

Fañch an Uhel – (Plouared 1821 – Kemper 1895).

## **Kontadennoù ar bobl en Breiz-Izel.**

Dastumet e oa bet ar hontadennoù-ze gand Fañch an Uhel e fin an naontegved kantved. Kavet em-eus reoù anezo war gelaouennoù bet embannet en amzer-ze.

Med an darn-varsa anezo am-eus adskrivet digand eul leor “**Kontadennoù ar Bobl e Breiz-Izel, dastumet gand F.M. Luzel**”, bet embannet e 1939 gand Goaziou, Kemper. Sinet eo ar ragskrid : “J.O.” (Joseph Ollivier, 1878 – 1946).

Pa geñverier gand ar hontadennoù bet embannet en amzer Fañch an Uhel, e weler diosutu e oa bet cheñchet meur a stumm e-barz ar gerioù gand Ollivier.

Modernnaet eo bet an doare-skriva.

## Taolenn

Ragskrid J. Ollivier

Fañch ar skrill

An daou dort (Bet dastumet e Plouared e 1859).

Jezuz-Krist en Breiz-Izel. (Bet kontet gand Marharid Fulup, e 1869)

Daou vab ar pesketaer. (Bet kontet gand Marharid Fulup, a barroz Pluned))

Ar miliner hag e aotrou. (Bet kontet gand Barba Tassel, Plouared, 1868)

Genver ha C'hwevrer. (Bet kontet gand Marharid Fulup, e 1869)

Tregont a Bariz (Bet kontet gand Frañseza an Ewen, gwreg Tregoad, euz a Bederneg, 1869).

Ar pevarzeg Kazeg ha Marh ar Bed (Bet kontet gand Frañseza an Ewen, gwreg Tregoad, euz a Bederneg, 1869).

Mab an hini goz, pe Roue ar pesked. (Bet kontet gand ?)

Louizig, mab ar glaouer, fillor da Roue Frañs. (Bet kontet gand Barba Tassel, Plouared, miz Kerdu 1869)

Ar briñsez Troiol (Bet kontet gand Jakez Seson, a Blougonver, boutaouer-koad en forest Befou ; miz Kerdu 1869).

An Tignouz pe Mevel an Diaoul. (Bet kontet gand Barba Tassel, euz bourk Plouared, miz Genver 1869).

Roue ar Portugal (Bet kontet gand Frañseza Ar Hroseur, gwreg Bizi, euz a Venah, miz Genver 1869).

Ar peroked sorser (Bet kontet gand Barba Tassel, Plouared ; miz Kerdu 1868).

Merh markiz Koadleger, pe Fañch Kreñv, Yann Koveg, Youenn ar Reder, ha Job al Lagadeg. (Bet kontet gand ?)

# Rakskrid

## F.M. AN UHEL

(1821 - 1895)

Ker an born - bet gwechall eun noblañs vraz, evel Guernaham ha Guernachanay, tost dezi, n'oa ken, eun nebeud bloaveziou a-raog Dispah 1793, nemed eur vereuri vraz, pa oe prenet gand Frañsez an Uhel, genidig euz a Votsorhel (Penn-ar-Bed). O timezi e Plouared, ar 14 a viz c'hwevrer 1775, gand Mari Merrien, euz parrez Ploubér, ez eas da chom da Geranborn hag, e-unan gand mitizien, e talhas an douarou braz stag ouz ar maner koz, damgouezet, pe dost, en e boull.

E vab Frañsez, tad ar skrivagner, kemeret gand ar "rekizision", daoust m'en-doa prenet diou wech eur "remplaçant", a oe soudard e gward-a-enor an impalaer Napoleon kenta. Distro d'ar gêr, eh eureujas, d'an 20 a viz ebrel 1815, e iliz Prad, Rozali-Visanta ar Gac, ganet e Planiel, an "28 ventose, 4<sup>e</sup> année de la République une et indivisible". Evel o zad, kenderhel a rejont da diekaad douarou Keranborn. Tud a zoujañs Doue e oant o-daou, prest bepred da rei skoazell ha sikour d'o amezeien, hag ouspenn, madelezuz-tre e-keñver ar beorien, ar glaskerien-vara, a gave atao er maner lojeiz ha boued hag eun tamm plas e korn an oaled da domma o izili.

O dimezi a oe benniget gand Doue : daouzeg krouadur o-devoe. Fañch-Mari, an eil anezo, a oe ganet d'ar 6 a viz mezeven 1821.

E vugaleaj, e Kernaborn, a oe evuruz ha laouen, renet gand kerent vad ha karantezuz. Bepred An Uhel a gavo plijadur o tistrei war an amzer-ze, ha bepred ar soniou a zavo evid eñvori e vugaleaj a vezo fresk ha dudiuz hag a zeblanto deuet a-greiz e galon. Ar vuhez a vevas neuze a oe hini eur paotrig diwar ar mêz ; galoupad a-dreuz ar parkou hag ar prajou ; "ken skañv hag eur gwiñver", pignad er gwez, n'oa ket, hervez e lavar, eur pigner all par dezañ, evid dastum frouez pe evid klask neiziou, a-unan gand kanfarded all euz e oad pe gand e vreudeur hag e hoarezed ; tapoud kaouenned evid o lakaad da stourm ouz kaz an ti, kutuill bleuniou, hag all.

... Neuze<sup>1</sup> evel bremañ

*'Karen redeg atao dre 'r parkou, ar hoajou,*

*Ha n'em-boa ket ma far evid kavoud neiziou.*

Hag evel-se e kemere nerz ha yehed. Ma tegoueze gantañ dond d'ar gêr, e chupenn pe e vragou freget gand an drez pe ar brankou, a-dra-zur e veze gourdrouzet, ha red e oa, med prest e oa da adkomañs antronoz, daoust m'en-doa touet ne raje ken : le eur bugel a dremen evel an avel.

Rust pe fall an amzer, red e veze chom er gêr, ha neuze eur blijadur all e oa evitañ klevoud hini pe hini euz mitizien Keranborn o kana soniou pe werziou, ha mestrez an ti, Rozali ar Gag, o tiskana gante : or paotr Frañso-Mari<sup>2</sup> a zelaoue gand evez, marteze e henou digor gantañ war nav eur, evid o hleved gweloh.

Ha diou an noz, pa veze debret koan, o ! neuze, e blijadur hag e levenez a veze euz ar re vrasa, rag beilladegou Keranborn en-dro d'an oaled, a oa brudet tro-dro. Er beilladgou-ze, e spered a ree, nebeud ha nebeud, anaoudegez gand an teñzor miret e-touez ar bobl : gwerziou, soniou ha marvailloù ; e galon a dride dreist-oll o selaou ar hontadennoù burzuduz displeget gand konterien dispar evel Garandel, lesanvet Kompagnon-Dall, Alan Kourio hag all. Ne fell ket deom poueza war ar pez a oe beilladegou Kernaborn ; liez a wech, An Uhel en-deus displeget meur a hini aneze.

Pa oe deut evid ar paotrig an ampoent da zeski lenn ha skriva ar galleg, rag e Keranborn ne veze komzet nemed ar brezoneg, e oe kaset d'ar skol da Blouared. Med hir 'oa an hent a gas euz Keranborn d'ar bourk, ha Frañso-Mari, evel ar vugale all euz e oad, a blije dezañ dilerha war an hent, pe da zelled an dra-mañ-tra, pe da hoari pe, d'an diskar-amzer, da hija ar gwez-avalou pe ar gwez-kraoñ a gave war e hent. P'errue diwezad, ar mestr-skol, an "tad Thomas", a hourdrouze, a

<sup>1</sup> Neuze : « Ar ster vihan », e leor Ma horn-bro.

<sup>2</sup> Frañso-Mari : notenn gand an oberour : Evel-se e veze anvet gand e gerent hag e gamaraded.

roe pinijennou, bara seh da greisteiz, pe chom eur pennad mad war an daoulin, e-kreiz ar hlas. Se ne harze ket Frañso-Mari da adkomañs antronoz. A-wechou all e ree skolig al louar :

*Ganen kanfarded all, e-leh mond d'ar skol  
Na da wech 'tremenen an deiz, bete kuz-heol,  
O pesketa amañ, o c'hoari, o neuial,  
Hep komer nehamant ebed gand netra all<sup>3</sup>.*

E gerent a hoantae gweled o mab henañ o kenderhel gand e studi hag o kemer eur vicher all estreged hini eul labourer-douar. Fañch-Mari, krog en e 14 vloaz (miz Here 1835), a oe kaset da skolaj real Roazon, ha lakaet eno dindan renadur e eontr, eun hanter-vreur d'e vamm, J.M. Ar Huërou, a oa o paouez beza anvet, er skolaj-se, da gelenner war an istor. Pebez cheñchamant evid or paotr ! Boazet da redeg dizoursi en-dro da Geranborn ; setu-eñ bremañ serret etre peder moger evid deski latin, gregaj ha skiantchou all. Keuz en-devoe, hag ouspenn diêz e kavas plega dindan reolenn striz ha kaled ar skolaj, rag aliez, re aliez, hervez, e kouezas war e gein, stank evel ar grizill, ar pinijennou, evel ma lavar e-unan. Ha n'om ket souezet ma c'hoantaas meur a wech lampad dreist ar mogeriou evid distrei da Geranborn. Diêz eo gouzoud hag-eñ e plije dezañ ar studi. Hervez e notennou, ne zeblant ket beza bet eur skolaer dispar : kentoh eur skolaer "etre". Ne beurechuas ket e studi e Roazon. E 1839, greet gantañ e eilved klas, e kuitas ar skolaj hag e chomas e Keranborn da zazen e "vaccauréat", renet a-bell, evid doare, gand e eontr Ar Huërou.

E miz Here 1841, e tremenas e "vaccauréat-ès-lettres" ? Bremañ bachelier, e hell mond da Vrest da êsa beza diwezatoh medisin (pe surjian) war vor. Ne oe nemed eun taol-êsa. Ar pezh 'zo sur ne gaver roud ebed hag-eñ e tremenas An Uhel an arnod red evid antren e skol Medisinerez-war-vor Brest.

Gand miz Du 1845, goude an ehan-skol tremenet e Keranborn, setu-eñ ha kemer penn an hent da vond da Bariz evel studier. Oh erruoud er gêrbenn, ez eas da chom 34, ru Skol ar Medisinerez, hag eno e chomo e-pad an amzer a dremenno e Pariz (1842 - Gouere pe Eost 1847). Ha lakaad a reas e ano war roll studieren Skol ar Medisinerez ? A dra zur, rag felloud a ree dezañ senti ouz e gerent a hoantae e weled medisin. Ha studia a reas ar skiant-se en eur feson aketuz ? N'ouzom ket ; med, evid doare, gand e spered troet kentoh war al lizeradur, e tilezas nebeud-ha-nebeud ar medisinerez. N'eus meneg ebed euz ar studi-ze el lizerou a skriv (10 hag 28 a viz Eost 1845) d'an aotrou de Salvandy, ministr an Deskadurez, evid goulenn beza karget da vond e Breiz-Izel da zastum gwerziou ha soniou, hag ivez misteriou koz. E miz Gwengolo 1845, en-devoe e gevridi. Evel m'oa goullo e yalh, e oe roet dezañ, evid paea e veaj, an hanter euz e hopr, da lavared eo, 50 skoed ; paeet e vefe ar peurrest dezañ, goude m'en-dije rentet kont euz e gevridi. An Uhel a dremenno eur miz hanter e Keranborn, ha distro e Pariz, e rentas kont, ar 4 a viz Du 1845, d'ar ministr, euz an eost treud a-walh en-doa dastumet. A. Ar Braz a lavar e oa bet An Uhel "evid doare, skoazellet gand Pitre-Chevalier" evid kaoud ar gevridi-ze. En e lizerou d'ar ministr, ne weler ger ebed a ano ar skrivagner-ze ; n'eus meneg nemed euz e eontr Ar Huërou, a varvas er bloaz 1843.

Gand ar bloavezh-skol 1845-1846, e seblant studia ar Reiz pe al lezennou, ma'z eo gwir ar pezh en-deus skrivet d'ar ministr en e lizer euz an 19 a viz Eost 1845. Ma heulias kalz pe nebeud skol al lezennou, n'ouzom ket, med, hervez, e kendalhas da zarempredi, rag kredi a reom en-devoa komañset e 1843, e-leh studia ar medisinerez, ar baotred yaouank euz ar "Hartier latin" a studie al lizeradur, a zave gwerziou pe danevellou e-leh deski o micher.

Skuiz marteze o chom dibreder e Pariz, pe marteze ivez poulzet gand an dienez, An Uhel a houlenn eur plas en "Université". Anvet eo da vestr-studi e skolaj An Oriant, e miz Here 1847. Eno e chomas beteg miz Ebrel pe Vezeven 1848 : kaset eo neuze, evid êsa, da rejant (pe kelenner) ar 7<sup>ved</sup> hag an 8<sup>ved</sup> klas e skolaj Dinan. E 1849, en em gav eleksionou hag An Uhel en em laka war ar reñk evid beza depute<sup>4</sup> : n'en-devoe nemed eiz mouez. Diwar neuze, en em roas a-zevri d'al labour war al lizeradur breton : en e baperou on-eus kavet eur pennad-skrid hag e tivenn hag e tidamall ennañ

<sup>3</sup> netra all : "Ar ster vihan", e leor "Ma horn-bro"

<sup>4</sup> depute : notenn gand an oberour : Disklêria a ra en e lizer d'an elektourien ez eo republikan ; ne gav ket deom e vefe bet, d'ar mare-ze euz e vuhez, gwall don en e spered e vennoziou republikan.

Kervarker da veza distreset ar gwerziou dastumet gantañ e-touez ar bobl. Red eo laavred e troas kein diwezatoh hag e stourmas ouz Kervarker, evel ma welfom.

An 30 a viz Gwengolo 1851, e oe anvet da rejant ar 6<sup>ved</sup> hag ar 7<sup>ved</sup> klas e skolaj Pontoise (Seine-et-Oise). Bremañ emañ pell diouz Breiz-Izel, evel harluet. Ne zeblant ket en em blijoud er gêr vihanze. Beva 'ra e-unan-penn, heb darempredi den war vete nebeud : « Tremenet on peurvuia evid eun den n'oar ket en em ober ouz an dud », a skriv d'e gerent ar 27 a viz Ebrel 1853. Evid en em zizenoui ha marteze piket gand ar c'hoant da veza brudet diwezatoh evel barz, en em ro d'ar varzoniez. Savet en-deus, e Pontoise, meur a werz embannet en e leor *Chants de l'Epée*. Med ouspenn, kregi a reas, ma n'en-doa ket boulhet al labour-ze e-pad ma chome e Dinan, da drei e gwerziou galleg meur a werz hag a zon euz ar *Barzaz Breiz*, rag d'ar mare-ze al leor dispar-mañ a oa evitañ ar pez eo ar Bibl evid ar brotestanted : kavet on-eus en e baperou meur a droidigez deiziatet euz Pontoise. Ha ne gav ket deom e vefe dre foug e skrivas diwezatoh (14 a viz Du 1872) d'an Aotrou J. Salaun : « N'em-eus ket karet a-bell ar *Barzaz Breiz* ; troet em-eus al lodenn vrasa euz al leor-ze e gwerziou galleg (*L'Electeur du Finistère*, 20 a viz Du 1872).

E-kerz miz Gwengolo 1854, euz Plouared e-leh ma oa deuet da dremen an ehan-skol, An Uhel a houlennas digand ar ministr eur hoñje beteg diwez ar bloavez-skol 1855, abalamour m'oa klañv, emezañ. Nemed eun digarez n'oa ken : chom pelloh e Pontoise ne blije ket dezañ ; ne houneze nemed 1.100 lur ar bloaz, hag ouspenn, marteze, feuket e oa dre n'en-devoa ket bet eur respont mad da heul eul lizer skrivet d'ar ministr (Pontoise, 25 a viz Eost 1854) evid goulenn outañ beza anvet e Pariz da gelenner eur hlas izel en eul "lise" bennag. Roet e oe dezañ ar hoñje a houlenne.

Tremen a reas e Keranborn ar pennad kenta euz e goñje. E-keit-se ne chomas ket dibreder : en em lakaad a reas da zastum on misteriou koz ha d'o studia, ar pez a dalvezo dezañ diwezatoh evid skriva ar pennad a 'n em gav e penn e leor *Santez Tryphina hag ar roue Arzur*. Kenderhel a reas ivez da zevel gwerziou galleg. Pa gavas e oa fonnuz a-walh e hordenn, setu-eñ ha mond da Bariz evid êsa kas da benn e vennad : moulla en eul leor eun dibab euz ar gwerziou-ze. Evid rei muioh a lañs d'al leor-ze, e soñjas kaoud skoazell digand Sainte-Beuve, eur barner-skridou brudet-tre d'ar mare-ze, med n'en-devoe ket digantañ ar sikour a hoantae. Sainte-Beuve, goude beza lennet piz ar gwerziou, ne gredas ket e oa enne eun danvez nevez, dispar, gouest da denna war an aozer sellou hag evez al lennerien, hag eh alias An Uhel da lezel e werziou diembann, da zistrei da rejant ha, ma felle dezañ en em rei d'ar varzoniez, ober e ero e park Breiz-Izel.

An Uhel ne heulias ket penn-da-benn ha dioustu an aliou fur roet dezañ gand Sainte-Beuve. Distrei a reas koulskoude da Geranborn, rag ahane, ar 5 a viz Gouere 1855, e skrive d'ar ministr evid goulenn digantañ eur garg a rejant a glas izel, pe e Pariz pe en eur rannvro bennag, med dreist-oll e Roazon. E houlenn a reas skoazella gand Sainte-Beuve ha gand an aotrounez Laferrière, enseller-meur an Deskadurez, ha Viktor Foucher, an daou-mañ mignoned vraz e eontr J.-M. An Huërou. E-leh heuill aliou ar ministr, da lavared eo skriva da benn-rener an Akadeni ma c'hoantae beza anvet enni da rejant, An Uhel a skrivas adarre d'ar ministr an 23 a viz Here : euz Plougerneve eo deiziadet al lizer, rag eno e oa eet da dremen eur mizvez<sup>5</sup> bennag e ti e hoar hena Katell, a zalhe er barrez-se, gand he fried Clec'h, an douarou staget ouz maner Koad-Tugdual.

An 12 a viz Du 1855, ar ministr a zine d'An Uhel eur hoñje nevez "de disponibilité" (er-mêz a garg). An Uhel, chifet, a zistroas da Bariz e diwez miz Kerzu hag a reas moulla e leor gwerziou galleg, *Les Chants de l'Epée*. Al leor-mañ, embannet gand An Uhel e-unan, o chom neuze 17, ru Lamartine, a zeuas a-zindan ar wask en deziou diweza euz miz C'hwevrer 1856 : n'en-devoe na brud na gwerz ebed, daoust m'en-devoa an aozer kinniget peb gwerz d'eun den brudet bennag euz Bro-Hall.

Prestig goude, e kavom en eur gelaouenn zizunvezieg moulllet e Pariz, *L'Aigle* (niverenn an 13 a viz Ebrel), eur werz halleg sinet "L'auteur des *Chants de l'Epée*, An Uhel", ha deiziadet : Pariz 16 Meurz 1856. Er memez kelaouenn e kavom c'hoaz meur a werz pe son sinet, bremañ, euz e ano e

<sup>5</sup> mizvez : miz, er skrid orin.

galleg (Luzel), diou studiadenn, unan war “Machiavel”, eben war “Shakespeare et Voltaire”, hag ivez eun danevell, *Jenovefa Rozgwenn*<sup>6</sup>.

E-pad ar bloaveziou 1856 ha 1857 ma chomas er gêrbenn, An Uhel a zarempredas, hervez Anatol Ar Braz ha J. Loth, ar skrivagnerien vrudet Th. Gautier, Ch. Baudelaire, H. Murger ha Gérard de Nerval. Ne zeblant ket o-defe ar skrivagnerien-ze pouezet kalz pe nebeud war spered An Uhel, nemed marteze an hini diweza, dre ma reas anaoud d’on henvroad gwerziou ar bobl hag al “lieder” euz an Alamagn. Ober a reas An Uhel eur veaj war-zu ar Rhin, e-kerz miz Gouere hag Eost 1857, rag euz Hagenau eo deziadet danvez eur romantig *Arzur Menguy*, on-esus kavet en e baperou, n’ouzom ket hag eo bet moulllet en eur gelaouenn bennag euz Pariz.

E yalh<sup>7</sup>, evid doare, o veza deuet treutoh-treuta, An Uhel a reas e zoñj da skriva da benn-rener Akademi Roazon evid goulenn digantañ eur plas bennag pe a rejant pe a vestr-studi. Degemeret e oe e houlenn, rag an 11 a viz C’hwevrer 1858, e kavom anezañ mestr-sudi e “lise” an Naoned : er garg-se chomas beteg an 3 a viz Here. Etretant, ar 14 a viz Gouere, e houlenn, eur wech c’hoaz, digand ministr an Deskadurez, rei dezañ eur gevridi evid dastum e Breiz-Izel gwerziou ha soniou ar bobl : respont talvouduz ebed evitañ n’en-devoe. E-pad ma chomas en Naoned, An Uhel a zavas e genta gwerziou e brezoneg : *Stourmad Sant-Cast* ha *Maro Barz Breiz-Vihan* (Brizeug) a oe embannet prestig goude e *Revue de Bretagne et de Vendée*. Seblantoud a ree ‘ta heuill an aliou roet dezañ gand Sainte-Beuve.

Soñjal a ree e vistri, hervez o notennou, rei dezañ a-nevez eur plas a rejant en eur skolaj bennag, pa guitaas An Uhel, an 3 a viz Here, lise an Naoned, evid mond da Roazon. Kavet en-devoa eno, gand skoazell ar prefed Ferat, eur garg, nevez evitañ, e bureoioù ar prefektur. Eno e reas anaoudegez gand A. Orain<sup>8</sup> a laboure gantañ er memez bureo. Red eo bremañ chom e-pad an devez<sup>9</sup> stag ouz eul labour a zeblant dezañ vên ha dizaour ; ne ‘n-eus ken nemeur a amzer da redez war ar mêz. Keuz a dle kaoud d’e vicher a gelenner, pe gentoh d’an ehan-skol, rag goude 18 mizvez<sup>10</sup> tremenet e prefektur Roazon, e houlenn adarre eur plas a rejant.

Anvet e oe, e miz Here 1860, e skolaj Kemper, ha karget d’ober ar 5<sup>ved</sup> klas. Mired a reas ar plas-se beteg miz Here 1862. Hervez notennou e vistri ne zeblante ket beza eur helenner dispar, ha gwall-aketuz gand e skolaerien. Med ar pezh a zisplije ar muia d’ar vistri-ze eo ma taremprede An Uhel ofiserien rejimant Kemper ha ma’h embanne ivez gwerziou e kelaouennou ar vro. Digareziou iskiz, a gav deom bremañ, med a-walh er mareou-ze evid beza diblaset. War ali pennrener Akademi Roazon d’ar ministr (Roazon, 1<sup>a</sup> Gouere 1862), An Uhel a oe anvet, war ziskar, e miz Here, e skolaj Landerne, evel rejant ar 7<sup>ved</sup> hag an 8<sup>ved</sup> klas. Ne fellas ket dezañ mond da Landerne ha, war an taol, An Uhel, droug ennañ, a zoñjas rei e zilez ha kas da stoupa Ministr ha Deskadurez ; med ne reas ket, gwell a ze dezañ.

Chom a reas e Kemper, o veva diwar e goust, hag en em roas d’ar studi brezoneg, a blije kement d’e spered : danzen a reas moulladur ar mister koz *Santez Tryphina hag ar roue Arzur*. Sikouret e oe en e labour gand an abad Herry, aluzenner e Kemperle. Al leor-ze, moulllet e 1863 gand unan euz e vignoned, Th. Claret, moulllet e Kemperle, a goustas d’An Uhel 1.100 lur. Hervez Anatol Ar Braz (*Théâtre Celtique*, p. 159) ar mizou-ze a oe kemeret war an arhant arboellet gand Uhel diwar ar gopr dister (1.400 lur ar bloaz) a houneze evel rejant e Kemper. Kentoh e oe, a gav deom, war an arhant deuet dezañ a-ziwar-lerh e dad, marvet<sup>11</sup> e Plouared ar 17 Gwengolo 1860. An Uhel a skrivas evdi al leor-ze eru henskriz talvouduz braz diwar-benn istor on teatr koz ; an abad Herry a gempennas eun tamm re vrao danvez ar mister koz a oe troet e galleg gand An Uhel.

Goude al labour tenn-ze, An Uhel a zistroas da Geranborn. Eun nebeud miziou goude (miz Du 1863), e houlennas digand ministr an Deskadurez beza karget da zastum e Breiz-Izel ar misteriou

<sup>6</sup> Jenovefa Rozgwenn : notenn gand an oberour : Embannet diwezatoh e *Revue de Bretagne et de Vendée* (genver-meurz 1864), dindan an ano a *Henora Lestrezec*, nemed eo disheñvel-tre an eil lodenn, adskrivet ma’z eo bet etretant gand An Uhel.

<sup>7</sup> E yalh : notenn gand an oberour : Ma hellas An Uhel beva keit-se e Pariz, rag ne hounezas netra gand e vicher a skrivagner, eo, a gav deom, gand an arhant en-devoa espernet, med kentoh gand an arhant en-devoa bet a-ziwar-lerh e vamm, marvet (*maro er skrid orin*) ar 15 a viz Mae 1853.

<sup>8</sup> A. Orain : notenn gand an oberour : Hemañ, A. Orain, a raio diwezatoh, e departamant an Ill-ha-Vilen, al labour a reas An Uhel e Breiz-Izel : dastum soniou ha kontadennou ar bobl. E eost a vo fonnuz evel hini e vignon.

<sup>9</sup> devez : an deiz, er skrid orin.

<sup>10</sup> mizvez : miz er skrid orin.

<sup>11</sup> marvet : maro, er skrid orin.

koz a 'n em gave e-touez ar bobl. Abaoe ar bloaz 1845, n'oa ket ar wech kenta e ree eun heveleb goulenn, med, evid doare, dre m'oa bet gwall dreud e zastumadenn genta, ne oe roet hini ebed dezañ da heul e lizerou ar 26 Mezeven hag ar 15 Eost 1846. Ar wech-mañ, skoazellet gand e vignon Renan, en-devoe e gevridi sinet, an 8 a viz Genver 1864, gand ar ministr V. Duruy : karget e oe da zastum e departamant Aochou-an-Hanternoz, ar misteriou kopiet pe ar re voulllet. E tri lizer, chomet diembann (12 Meurz, 12 Ebrel, 20 Mae 1864), e rentas kont d'ar ministr euz e labour. Founnuz e oa e eost, rag eur gevridi all, heñvel, a oe roet d'An Uhel, an 19 a viz Kerzu 1864, e departamantchou Penn-ar-Bed hag ar Morbihan : ar memez gopr, 1.200 lur, en-devoe evid ober e droiou ha prena ar misteriou hag al leoriou.

O vond hag o tond a-dreuz mêziou Breiz-Izel, dreist-oll e Bro-Dreger hag e Bro-Leon ha Kerne, An Uhel n'ankouae ket dastum gwerziou ha soniou ar bobl, rag en soñj 'oa, a-benn neuze, embann diwezatoh eul leor pe zaou euz ar gwerziou hag ar soniou-ze.

Med a-raog kas da benn ar mennad-se, ober a reas moulla, e Montroulez, e ti J. Hasle, eul leor, ennañ ar soniou hag ar gwerziou en-devoa savet e-unan. *Bepred Breizad*, al leor-ze, a zeuas a-zindan ar wask e 1865.

Echu gantañ e drede gevridi, An Uhel a yeas da skolaj an Oriant, evel rejant ar 7<sup>ved</sup> klas : anvet e oa bet eno ar 7 a viz Here 1864. Er stad-se e chomas beteg ehan-skol braz 1868, heb en em rei gand kalz a sked d'e vicher, hervez notennou e vistri. Re droet 'oa e spered war ar brezoneg hag e lizeradur, hag ouspenn, tremen a ree e amzer o kopia ar gwerziou en-devoa dastumet e-touez ar bobl. Gand miz Here 1867, e lakaas moulla e ti Corformat, leorier ha mouller en Oriant, al leor kenta euz Gwerziou Breiz-Izel. Embannet dre rummadou, seiz pe eiz, al leor a oe peurvoulllet e miz Gouere pe Eost 1868 : moulllet e oe 1.000 leor ha deg all ouspenn war baper roz. Evel al leoriou all embannet gand An Uhel, hemañ ne oe ket gwerzet mad. Eur brezel dre zindan a oe greet d'al leor ha d'an aozer : darn a damalle dezañ stourm ouz Kervarker ; darn all beza embannet en e leor gwerziou a-eneb d'an dud a Iliz.

An 20 a viz Here 1868, An Uhel, da heul e houlenn harpet eur wech c'hoaz gand Renan, a oe karget gand ministr an Deskadurez, V. Duruy, da "zastum e Breiz an testeniou dre skrid pe dre gomz a hell talvezoud d'an istor, d'al lizeregez (*philologie*), d'an doueedoniez (*mythologie*) e-keñver ar poblou keltieg". Laouen hag evuruz e oe An Uhel o kuitaad e vicher a rejant ne blije ket nemeur dezañ ; bremañ eo e vestr hag e hell beva digabestr. En em lakaad a reas da zastum kontadennoù ar bobl, hag ivez, pa gave an tu, gwerziou ha soniou, rag e zoñj 'oa embann adarre eul leor all pe zaou a werziou hag a zoniou Breiz-Izel.

O vond hag o tond amañ hag a-hont dre Vreiz-Izel, evel ar Boudedeo<sup>12</sup>, e c'hoarveze a-wechou gantañ gwall-reuz : bale dindan ar glao, an erh, dre hentchou fall ; kousked en ostaleriou dister, aliez e gweleou leun a hwenn, pe kleved e-pad an noz tud vezo oh ober cholori, o tirezoni pe o kana traou sod e galleg-saout ; chom heb kavoud lojeiz ha red dezañ kousked en "otel ar steredenn", evel ma tegouezas gantañ eun nozvez hañv e Kimerh<sup>13</sup>. An Uhel a gemere an oll draou-ze war an tu mad, hag antronoz, goude beza savet eur zon bennag, e kendalhe gand e hent, drant ha seder. E-pad ar bloaveziou 1868 - 1870, e tastumas eun eost founnuz, dreist-oll e Bro-Dreger : 18 kontadenn er bloaz 1868 ; 52 e 1869 ; 16 e 1870, ha marteze ouspenn. Renta 'reas kont euz e zastumadenn d'ar ministr e pemp lizer bet embannet e *Archives des Missions scientifiques et littéraires*.

Abaoe ma tastume kontadennoù, An Uhel a zoñje embann eur re bennag. En deiziou kenta a viz Mae 1870, e oe lakaet e gwerz eul leorig *Contes bretons* (ne oe moulllet nemed 300 leor, e ti Th. Clairret e Kemperle), ennañ c'hweh kontadenn, darn e galleg, darn e brezoneg : diou aneze a oa diembann ; ar peder all a oa bet moulllet war gazetenn ar *Publicateur du Finistère* (Kemperle), adaleg ar 25 a viz Du 1869 beteg an 9 a viz Ebrel 1870. Al leorig-se, hervez lavar an aozer, n'oa nemed evid rei d'al lennerien eun tañva euz e eost ha diskouez deze penaoz e ree hag eh intende e labour.

E-pad ar brezel etre Bro-Hall hag ar Prus (1870 - 1871), An Uhel, chomet e Breiz-Izel, a zavas meur a werz e brezoneg evid kennerzi e genvroidi : darn a oe moulllet er hazetennou amañ hag a-hont, darn all war feillennou distag.

<sup>12</sup> Boudedeo : notenn gand an oberour : anvet 'oa bet gand e vignoned *Boudedeo Breiz-Izel*.

<sup>13</sup> Kimerh : notenn gand an oberour : Sellit ouz son : *Otel ar Steredenn en Menezioù Arre*, e leor *Ma Horn-bro*.

Echu ar brezel, An Uhel en em lakaas adarre da zastum kontadennou : abaoe 1868, e gevriddi a oa bet adnevezet bloaz ha bloaz, hag a vo, beteg 1873. Soñjal a ra bepred en e eil leor a Werziou Breiz-Izel, rag prest 'oa e zornskrid, med ne gaso e vennad da benn nemed e miz Mezeven 1873.

E miz Gouere 1872, Breuriez Breiz (*l'Association bretonne*), nevez adsavet, a dlee kaoud eur hendalh e Sant-Brieg. E-touez al labouriou da ober, merket war ar roll, e oa hemañ : "Ober istor gwirion gwerziou ar bobl e Breiz-Izel, bete vremañ". An Uhel a gredas e oa bet lakaet al labour-ze war ar roll evid ma stagfe gantañ, hag e skrivas e bennad *De l'authenticité des chants du Barzaz-Breiz*. Lenn a reas e labour ar 5 Gouere. Trouz ha tabut a zavas : eur re 'oa a-du gand Kervarker ; ar re all gand An Uhel. 'Benn ar fin, e oe diviziet ne vije ket embannet ar pennad-labour-ze gand al labouriou all lennet e-pad ar hendalh, hag An Uhel a reas moulla anezañ en eul leorig e ti Guyon, mouller e Sant-Brieg (1872).

E miz Mezeven 1873, e reas marhad gand Cormat mab, mouller en Oriant, da embann e eil leor a *Werziou Breiz-Izel*. Gand miz Here, o weled n'ee ket al labour moulla buan a-walh en-dro, e teuas da chom en Oriant, evid rei eun tamm lañs d'ar mouller ; al leor a zeuas a-zindan ar wask e deiziou diweza miz Meurz 1874 : ne oe moulllet, ar wech-mañ, nemed 800 leor, e-leh 1.000 evel ma oa bet greet gand an hini kenta.

O veza ne felle ken dezañ goulenn ma vije adnevezet e gevriddi, nag ivez mond da rejant en eur skolaj bennag, marteze pell diouz Breiz-Izel, An Uhel, heb micher ebed, a zegemeras ar plas a gazetenner republikan<sup>14</sup> a oe kinniget dezañ e Montroulez. Euz an Oriant (29 a viz Kerzu 1873), e skrivas d'eur mignon, an Ao. Allier, d'an amzer-ze kelenner e skolaj Montroulez, da lavared dezañ penaoz eh intende eur gazetenn vrezoneg greet evid ar bobl. Siwaz ! pa oe rener ar gazetenn-ze, adaleg miz Ebrel 1874, ne gavas ket an tu da gas da benn ar mennoziou-ze, poelleg ha fur, rag ar bolitikerien, perhenned ar gazetenn, ne hoantaent ober nemed politik, hag eur politik a-eneb d'ar vonarchisted ha d'an dud a Iliz. D'An Uhel, heb micher ebed, e oe red plega. Koulskoude, daoust d'al labour-ze, divlaz evitañ, n'ankouaas ket e studi war al lizeradur breton hag, eur wech an amzer, eh embannas eul labour bennag, en o zouez ar *Veillées Bretonnes*, bet dastumet goude en eul leor (1879).

Dre ma tremene an amzer, ar politik hag ar vicher-ze a zisplije muioh-mui d'An Uhel ha, pa gavas an tu, e houlennas eur garg a varner a beoh, dreist-oll e Plouared, evid galloud kenderhel da zastum kontadennou ha gwerziou. Ober a reas skoazella e houlenn gand an depute Hemon, eur mignon dezañ. Hep keuz eta e kuitaas e vicher a gazetenner pa oe anvet da varner a beoh e Daoulaz, an 3 a viz Gwengolo 1880. Med d'an aotrou Loeiz Hemon e felle gweled An Uhel beza anvet e Kemper da virer an diellou, er garg chomet goulo goude maro R.-F. Ar Men<sup>15</sup>. An Uhel, hag a zante n'oa ket gouizieg a-walh evid kemer ar plas kinniget dezañ, a refuzas hag a yeas da Zaoulaz. Med kement e pouezas warnañ an depute, ma skrivas eul lizer da houlenn ar garg ; skoazellet gand an aotrou Loeiz Hemon hag ar prefed, e oe anvet an 21 a viz Genver 1881, evid êsa<sup>16</sup>, rag n'en-doa diplom ebed a zieller. D'e vicher nevez en em roas gand aket : lakaad urz er paperou koz lezet digempenn gand an dieller en e raog, reiza ha reñka ar re all, ober roll an diellou a oa chomet re war-lerh.

E diwez 1881, e eo lakaet e gwerz, e Pariz, daou leor *Légendes chrétiennes de la Basse-Bretagne*, enne eul lodenn vraz euz ar hontadennou dastumet gand An Uhel. Marhad en-doa greet hemañ, 'pad m'oa c'hoaz e Daoulaz, n'eo ket heb beh avad, gand an embanner leoriou Th. Maisonneuve. Tri

<sup>14</sup> republikan : notenn gand an oberour : En eul lizer skrivet d'an aotrou Gaidoz (Montroulez, 18 mezeven 1878), An Uhel a zegas da zoñj d'e vignon penaoz eo deut da veza republikan war-lerh an divizou o-devoa bet, e-pad ar veaj a deir zizun a rejont o-daou (Gwengolo-Here 1872), dre vèziou Breiz-Izel, o vond euz eur gêr d'eben. An Ao. Gaidoz, gounezet, evel meur a zen yaouank gouizieg, d'ar mennoziou republikan, a hounezas An Uhel. A-raog, hemañ a oa bonapartist, evid doare : en e leor *Chants de l'Épée*, en-devoa meulet Napoléon III hag e vrezeliou ; kanet en-devoa ar priñs imperial nevez-hanet (*L'Aigle*, 15 Mezeven 1856) ; greet en-devoa eun Arzur nevez euz an impalaer, pa zeuas hemañ d'ober eun dro e Breiz-Izel, er bloavez 1858. (*Armor ou Napoléon III en Bretagne*, gwerz embannet e 1864 hepken, med moulllet e oa bet an droidigez halleg e 1858, e *Journal d'Ille-et-Vilaine*, 4 Kerzu). Na vezom ket souezet ; e Keranborn, An Uhel, e-pad e vugalej hag e yaouankiz, en-devoa klevet meuli Napoléon kenta hag e daoliou-kaer gand e dad, bet gwechall soudard e gward-a-enor an impalaer-ze, ha gand meur a valeer-bro a gave lojeiz er maner. Red eo lavared ne reas ket a bolitikerez oberiant a-raog 1874, nemed marteze, ha c'hoaz, e 1849. Gwelit an notenn 4.

<sup>15</sup> Ar Men : notenn gand an oberour : Ar Men hag An Uhel a oe, e-pad eur penand, mignoned vraz, med facht e oant abaoe 1872 pe war-dro. E-touez paperou An Uhel en em gav eru hant lizer bennag skrivet dezañ gand Ar Men, eter 1865 ha 1871)

<sup>16</sup> evid êsa : notenn gand an oberour : Evid beza anvet da vad, e oe red d'An Uhel tremen eun arnodenn war e vicher nevez. Tremene a eras, a gav deom, an arnodenn-ze, er goañv 1883 - 1884.



leor all kontadennou a oe moulllet diwezatoh gand ar memez embanner, e 1887 : *Contes populaires de Basse-Bretagne*. Ker puill e oa bet eost An Uhel, ma chomas gantañ, en e gainerou, meur a gontadenn all. O embann a reas amañ hag a-hont, er hazetennou, er helaouennou-kelh, dreist-oll en hini Breuriez *archéologique* Penn-ar-Bed<sup>17</sup>. Er gelaouenn-mañ e reas moulla ivez, e 1889, eur mister koz, *Buez Sant Gwennole*, abad ; goude, e oe lakaet e gwerz 125 leor hepken anezañ.

Anatol Ar Braz, anvet da gelenner e lise Kemper, e miz Gwengolo 1886, a reas anaoudegez gand An Uhel, kerkent m'erruas er gêr-ze. Dioustu e teujont da veza mignoned vraz, rag o-daou o-devoa ar memez karantez evid kanaouennou ar bobl. An Uhel a gemeras Ar Braz da genlabourer evid al leor Soniou a hoantae bepred ober moulla. Evid pinvidikaad an eost o-doa dastumet, pep hini diouz e du, e rejont eun dro a-gevred (Gwengolo-Here 1888). Goude e stagjont gand dornskrid al leor *Soniou Breiz-Izel* : ouspenn troidigez meur a zon, Ar Braz a reas, e galleg, eur hentskrid talvouduz-tre, evid al leor, a oe embannet e ti Bouillon, embanner leoriou e Pariz (1890 - 1891).

E miz Genver 1890, e oe roet d'An Uhel ar groaz a enor. Chom a reas dizeblant dirag an enor-ze, daoust ma oa dleet dezañ, evid e leoriou bet kurunet an eil war-lerh egile gand an "Institut" ; evid e oberou all talvouduz braz d'al lizeradur breton, hag evid e vuhez gouestlet oll da glask kanaouennou ha kontadennou on bro Breiz-Izel. An 20 a viz Genver, e skriv d'e vignon Gaidoz en-devoa kaset dezañ e hourhemennou : « Ho trugarekaad a ran evid ho kourhemennou. Lavaret ameus deoh e oa an dra-ze gwall-zister evidon ; n'em-eus ket greet ha n'em-bije greet morse eur goulenn na dre skrid na dre her. An aotrounez Hemon ha Renan o-deus kaset ar gevridi en-dro. Ne zougan ket c'hoaz ar zeizenn ; med enseller an Akademi ha, war e lerh, ar prefed, o-deus lavaret din e oa red din he dougen. He dougen a rin ar miz a zeu, med anzav a ran deoh en em gavan eun tamm diêz ».

Lavaret on-eus en-doa c'hoaz An Uhel kontadennou chomet diembann en e gainerou. war-dro 1892, H. Caillère, embanner leoriou e Roazon, a hoantaas moulla eul leor a gontadennou dastumet gand An Uhel ; hemañ a roas dezañ eun dornskrid ennañ ugent kontadenn. Hogen H. Caillère, e stal o veza eet da stalig ha prestig goude da get, n'hellas ket kas da benn e vennoz, hag al leor ne oe ket embannet. Diwezatoh, goude maro An Uhel, A. Ar Braz a reas moulla en eul leorig pemp kontadenn tennet euz an dornskrid-se : *Contes et légendes des Bretons Armoricains*, e ti H. Gautier, embanner leoriou e Pariz (4 Genver 1896).

Gand *Soniou Breiz-Izel*, An Uhel en-doa kaset e ero da benn ; embannet en-doa an darnvuia euz ar gwerziou, ar soniou hag ar hontadennou dastumet gantañ<sup>18</sup>. Galloud a ree 'ta lakaad ar vourell war an ibill, evel ma reer d'ar marh distro euz ar park. Koulskoude ne reas ket. ; ne felle ket dezañ chom dilabour, hag e-pad e nozveziou, daoust d'e zaoulaagd da veza deut gand an oad kizidig ha tener, dre forz lenn diellou koz hag ivez beilla, e stagas gand eul labour all : war ali an Aotrou de la Borderie, ene m lakaas ad ziskriva ar mister koz *Louis Ennius*, evid e voulla diwezatoh en eru gelaouenn bennag. N'oa ket echu al labour-ze pa varvas. Ha neuze

<sup>17</sup> Breuriez *archéologique* Penn-ar-Bed : notenn gand an oberour : Oh erruoud e Kemper, en-doa lakaet e ano er vreuriez-se. Eno en em gavas gand Kervarker, en-doa gwall-dregaset e meur a bennad-skrid : ar peoh a renas etreze, evid mad ar Vreuriez hag ar Brezoneg.

<sup>18</sup> ar hontadennou dastumet gantañ : notenn gand an oberour : meur a wech eo bet sikouret da zastum kontadennou, gwerziou ha soniou, gand e hoar Perine (ganet e Keranborn an 28 a viz Ebrel 1829, ha marvet e Plouared an 30 a viz Meurz 1915, oajet a 86 vloaz), dreist-oll adaleg 'm-oa deuet da chom e Kemper, n'en-doa ken amzer d'en em rei d'al labour-ze nemed e-pad ar hoñje gwall-verr en-devoa bep bloaz e diwez an hañv. Ar genlabourerez-se, dispar, akuit, eo a zastumas, etre miz Genver ha miz Meurz 1890, ar hontadennou bet kontet gand Fañch Thepaut, mevel-boulañjer e Plouared, med ginidig a Votsorhel, ar re ziweza embannet gand e vreur er *Bulletin de la Société Archéologique du Finistère* (1892, 1893 ha 1894). en *Annales de Bretagne* (1893 ha 1894), en *Hermine* (1893).

## Fañch ar skroll

« Petra a vi, ma mab ? »

« Diviner. En eur hastell. »

« Petra ? »

« Me 'zo diviner. An aotrou e-neus kollet aliañs e wreg. Lakaet e-pad eiz devez en eur gambr, ar paotr a gambr hag ar vatez a oa al laeron. »

« Divinit », eme ar plah a gase dezañ da zebri, ar pezh a zo er zoupierenn.

« List ahanon. »

« A ! paour-kêz skroll - ar skroll e oa - « ma feiz », eme ar vatez, « diviner eo. »

« Tapet om. Tretom gantañ. Kemerit an aliañs, aotrou. Roit kant skoed. Roit an aliañs d'eun houad. »

« Ahanta ! Diviner.. »

« Grit laza ar mal-houad braz. Kaveteoanaliañs. Roit pemp-kant skoed, hag eur serifikad, diviner. » An aotrou e-neus kollet pemp-kant skoed.

« Setu ma zertifikad. »

Al laeron a oa ar heginer, ar paotr hag ar plah a gambr.

« Eun diviner », emeze, « diwallom. »

Ar plah a gas an dijuni.

« Ma Doue », emezi, « dizoloet om ».

Daou, tri bet tapet. Anzao 'vefe ar gwella.

« Na lavarit ket ».

Bet lakaet an arhant en eun toull er voger. Bet kant skoed digand ar vevelien.

« It, aotrou, d'an toull-hont. »

« Piou al laer ? N'eo a ket bet divizet. Bet kant skoed all hag eur serifikad. »

En eur hastell all : An aotrou n'en-devoa bugel ebed. Dougerez e oa ar wreg. Pe baotr pe blah ? Greet d'an Itron en em ziwiska.

« Ya, 'vad.

« Pa oa en eur penn : eurpaotr. Pa oa en eur penn all : eur plah.

« Bet eur paotr bihan ; bet adarre eur plah bihan. Bet adarre pemp-kant skoed.

« Eom bremañ d'ar gêr. A-walh. Se ne hall ket kontinui. Dond a ra en-dro. Lakaad a ra sevel eun ti nevez. Hag e-neus bet eur mab beleg.

# An daou dort

Eur wech e oa daou dort, Nonnig ha Gabig, hag e oant mignoned o-daou. Kemenerien e oant o-daou, ha bemdez eh eent da labourad d'an tiegez war ar mêz, pep hini en e du.

Eun noz, pa oa Nonnig o tistrei euz e zevez, diwezad eun tammig, degouezet en lann Penn-ar-Rohou, e klevas moueziou o kana evel-henn :

*Dilun, dimeurz ha dimerher.*

« Daoust piou a zo o kana evel-se ? », a laras ennañ e-unan. Hag e tostaas, goustadig.

Sklêr e oa al loar, hag e welas an dañserien-noz, hag a zo kornandoned, krog dorn-euz-dorn, o tañsal en kelh hag o kana. Unan a gane a-raog :

*Dilun, dimeurz ha dimerher.*

Hag ar re all oll a gane war e lerh :

*Dilun, dimeurz ha dimerher.*

Ha ne lavarent nemed se. Nonnig en-devoa klevet aliez komz euz an dañserien-noz, med biskoaz n'en-devoa gwelet aneze, hag en em guzas 'dreg eur rohell evid sellad oute. Med gwelet e oe prestig, ha tapet e-kreiz ar helh. Hag i neuze da zañsal ha da drei en-dro dezañ, ha da gana gwaz evid biskoaz :

*Dilun, dimeurz ha dimerher !*

Ha da lared da Nonnig :

« Deus da zañsal ganim ivez ! »

Nonnig ne oa ket eur paotr aonig, hag ah eas en dañs ; ha setu-eñ da drei ha da gana gante :

*Dilun, dimeurz ha dimerher.*

« Ha goude ? », a lavaras ; « gwall-verr eo ho son. »

« N'eus ken », a lavarjont dezañ.

« Penaoz n'eus ken ? Perag ne larit ket ivez :

*Ha diziou<sup>19</sup> ha digwener ?*

« Ya avad ! » a lavarjont oll. « Se a zo brao-kaer. »

Hag i da gana neuze :

*Dilun, dimeurz ha dimerher.*

*Ha diziou ha digwener !*

Ha da vond en-dro, en-dro !

Pa hoantaas Nonnig mond kuit, e lavarjont an eil d'egile :

« Petra a rofom d'an den-mañ, evid beza hirraet ha bravaet on zon ? »

« An dra a garo ; arhant hag aour kement ha ma karo, pe beza didordet. »

« Mar karit ma didorta avad », a laras Nonnig, « ne houlennan ken diganeoh. »

Ha kerkent e oe lamet e dort dezañ, hag e tistroas d'ar gêr skañv hag eeun, ha zoken eur paotr koant.

An deziz war-lerh, pa welas e vignon Gabig anezañ, e oe souezet.

« Petra ? », emezañ..., hag e selle ouz e gein..., » ha da dort ? »

« Eet kuit, evel ma welez. »

« Penaoz eo c'hoarvezet kement-se ? »

Hag e kontas dezañ evel ma oa c'hoarvezet an dra.

« A ! me 'h aio ivez emberr da noz da Benn-ar-Rohou, da weled an dañserien noz. »

Hag e reas evel ma en-devoa lavaret. Pa erruas 'barz al lanneg, e oa ar gornandoned o tañsal hag o kana :

*« Dilun, dimeurz ha dimerher »,*

a gane unan da genta, hag ar re all war e lerh :

*« Ha diziou ha digwener ! »*

Hag e troent, hag e lampent !

Gabig a dostaas, hag e lavarjont dezañ :

<sup>19</sup> diziou : diriaou.

« Deus da zañsal ganeom ivez ! »

Ha setu Gabig dorn-euz-dorn gante, ha da zañsal, ha da gana evelte :

« Dilun, dimeurz ha dimerher.

*Ha diziou ha digwener ! »*

« Ha goude ?... », a lavaras.

« N'eus ken. Petra, c'hwi a oar c'hoaz ? »

« Ya da ! »

« O ! lavarit eta, lavarit eta ! »

*« Ha disadorn, ha disul ! »*

« O ! se n'eo ket mad ! se ne junt ket ! On zonig a oa koant-kaer a-raog, ha n'eo ken bremañ !

Petra a vo greet dezañ ? »

« Lakaad dezañ tort egile », eme unan.

« Ya, ya, lakaad tort egile war e-hini. »

Hag e oe peget tort Nonnig dezañ war e hini, hag e tistroas d'ar gêr droug ennañ ha mezuz-braz, m'ho ped da gredi.

Hag evel-se, ar peurrest euz e vuhez, e rankas dougen daou veh, e-hini hag hini e gamarad.

*Dastumet en Plouared, e 1859.*

# Jezuz-Krist en Breiz-Izel

## I

On Zalver Jezuz-Krist a oa deut da ober en dro e Breiz-Izel, gand Sant Per ha sant Yann. Mond a reent dre-oll, da di ar paour evel da di ar pinvig, hag e prezegent en ilizou, er chapellou, hag aliez en tachennou, dirag ar bobl dastumet.

Eun devez, e-kreiz an hañv, e oant o pignad eur hreh hir ha sonn. Tomm e oa an heol, ha sehed o-devoa, ha ne gavent ket a zour. Degouezet war lein ar hreh, e weljont eun ti bihan soil war vord an hent.

« Eom amañ da houlenn dour », a laras sant Per

Pa oent eet en ti, e weljont eur wrahig koz azezet war mên an oaled, ha war an bank-tosel, e-kichenn ar gwele, eur havr o rei da dena da eur bugel bihan.

« Eur bannah dour, mar plij, mamm goz », a laras Sant Per.

« Ya, sur, dour am-eus, dour mad ; med n'am-eus ket kalz ouspenn ivez. »

Diskenn a reas eur skudellad dour euz ar picher, hag eh evjont o-zri. Neuze e tostajont da weled ar bugel o tena ar havr.

« N'eo ket deoh ar bugel-mañ, mamm-goz ? », a laras on Zalver.

« Nann, sur ; ha koulskoude eh eo 'vel pa vije din. D'am merh eo ar bugelig ; med marvet eo e vamm o henel anezañ, hag eh eo chomet war ma diouvreh. »

« Hag e dad ? »

« E dad a zo beo, hag eh a bemdez, kerkent hag an deiz, da zeveziata da eun ti pinvig a zo e-kichenn ; hag e honez eiz gwenneg bemdez hag e voued ; ha setu oll ar pez on-eus evid beva on-zri. »

« Ha mar ho-pefe eur vuoh ? », a laras on Zalver.

« O ! mar on-befe eur vuoh, neuze e vefem evuruz ; me ah afe da vêsa anezi war an hentjou, hag on-befe lêz hag amann da gas d'ar marhad ; med n'm-bo biken eur vuoh. »

« Ma ! roit din ho paz eun tammig, mamm-goz. »

On Zalver a gemeras baz ar wrah-koz, hag a skoas ganti eun taol war an oaled ; ha kerkent e savas ahane ar vuoh vriz ar gaerra, ha lêz ganti a-lezi he zez !

« Jezuz-Maria, a laras an hini goz, penaoz eo degouezet ar vuoh-se amañ ? »

« Dre hras Doue, mamm-goz. »

« Bennoz Doue warnoh, aotrounez geiz ! Me a bedo evidoh beb beure ha beb noz. »

Hag eh ejont o-zri en hent.

An hini goz, chomet heh-unan, ne skuize ket o selled ouz he buoh : « Kaerra da vuoh !<sup>20</sup> ha 'vel ma zo lêz ganti !<sup>21</sup> Med penaoz eo degouezet amañ ivez ? O skei eun taol gand ma baz war an oaled ! Ar vaz a zo chomet ganen, ar mên-ouled a zo bepred ivez. Mar am-befe eur vuoh all evel homañ avad ! Marteze n'am-eus netra da ober evid se nemed skei gand ma baz war an oaled ? »

Hag e skoas eun taol gand he baz war ar mên-ouled ; ha kerkent e tilampas ahane eur pikol Bleiz hag a<sup>22</sup> dagas ar vuoh vriz war al leh !

Hag an hini goz e-mêz he zi, ha da redeg war-lerh an tri dremeniad, ha da grial :

« Aotrounez ! Aotrounez ! »

Evel na oant ket eet pell c'hoaz, he hlevjont hag e hortozjont anezi.

« Petra a zo c'hoarvezet, mammig koz ? », a laras on Zalver.

« Allaz ! Eur Bleiz braz a zo degouezet 'barz ma zi, kerkent ha ma'z oh eet kuit, hag eñ 'n-eus taget ma buoh vriz ! »

« Ya, pa hoh-eus galvet anezañ, mamm-goz. Distroit d'ar gêr, hag e kavfet c'hoaz ho puoh, beo ha yah. Med bezit furroh en amzer da zond, ha na hoantait ken ober ar pez na hall nemed Doue e-unan. »

<sup>20</sup> Kaerra da vuoh ! : kaerrad buoh !

<sup>21</sup> ha 'vel ma zo lêz ganti ! : 'vel ma'z eus lêz ganti !

<sup>22</sup> hag a : pehini, er skid orin.

Hag e tistroas d'ar gêr, hag e kavas he buoh beo ha yah, hag eh anavezaz neuze penaoz e oa an Aotrou Doue a oa bet en he zi !

## II

Eur wez<sup>23</sup> all e oant arre<sup>24</sup> en hent o zri. Degouezet e oa war-dro diou eur goude kreisteiz, hag evel n'o-devoa debret tamm ebed abaoe ar beure, o-devoa naon. Pa oant o tremen e-biou eun ti war vord an hent, e weljont en toull an nor eur vatez o verad toaz evid ober krampouez.

« Eom en ti-mañ », a laras Sant Per, hag on-bo krampouez. »

Mond a reont o-zri e-barz an ti.

« Demad deoh oll 'barz an ti-mañ, tudou geiz. »

« Ha deoh ivez, aotrounez. »

« Ni a zo tri dremeniad, pell a zo en hent, hag a zo skuiz, hag on-eus naon ; kavoud a rafem eun draig bennag da zebri, evid arhant ? »

« Ya, sur », a lavaraz ar vestrez ; « emañ ar vatez o verad an toaz, ha bremaig e vo krampouez. »

« Mar be bolontez Doue, a gredan, e vez mad dit lared », eme on Zalver.

« O ! », a laras neuze ar vatez, « greet eo an toaz, ha krampouez a vo sur ! »

« Ma ! », eme on Zalver.

Hag eh azezjont da hortoz. Ar vatez a lakaas neuze daou drebez war an oaled, hag a reas tan indanne<sup>25</sup>. Goude e kemeraz ar varaz e oa an toaz enni, 'vid he zostaad d'an oaled.. Med setu ma tifoñs ar varaz ; ha skuillet war an douar oll ar pez a oa enni ! Hag ar vatez da estlammi , hag ar vestrez da grozal !

« Bremañ, Aotrounez, emezi, e hallit mond da glask krampouez e leh all, rag evid amañ ne vo ket a gramponnez feteiz ! »

« Eo ! eo ! gand gras Doue », a laras on Zalver.

Ha gand penn e vaz e stokas ar varaz a oa eet a-beziou, ha setu-hi da zond kerkent en he fez hag an toaz enni.

Ha souezet-braz tud an ti !

Hag e oe greet krampouez, hag e tebrjont, hag eh ejont goude en hent arre.

Mez a-raog mond kuit, e laras on Zalver d'ar vatez :

« Ha dalhit soñj mad, ma flah, ez eo mad lared bepred : *Mar be bolontez Doue !*

*Kontet gand Marharid Fulup, a barroz Pluned. Miz Even 1869.*

Notenn gand Luzel : *Mar be bolontez Doue !* : Les paysans bretons ont sans cesse cette phrase à la bouche quand ils expriment un désir ou un espoir.

---

<sup>23</sup> Eur wez : eur wech.

<sup>24</sup> arre : adarre

<sup>25</sup> indanne : dindanno.

# Daou vab ar pesketaer

Eur wez e oa, eur wez e vo,  
Evid rei roll d'an oll gaozo'.<sup>26</sup>

Eur wez e oa eur Pesketaer koz, hag e oa dougerez e wreg. Eun abardaez eh erruas er gêr ha n'en-devoa tapet netra. E wreg a hoantaas debri pesked, hag e rankas retorn dioustu d'an aod. Teurel a ra e rouejou, hag e tegas gantañ pesk ar haerra. Ma oa stad ennañ.

« Bremañ bepred », 'lare dezañ e-unan, « am-boa peuh digand ma gwreg. »

Med setu, pa oa o kregi er pesk, hemañ en em laka da brezeg, hag a lar dezañ :

« Pa vin maro, ro ma hig da zebri d'az kwreg ; ma halon hag an dour e vin bet gwalhet<sup>27</sup>, d'az kazeg, ha ma bouzellou ha ma skevent d'az kiez. »

Ma oa souezet braz ar Pesketaer o kleved ar pesk o prezeg evel eun den ; biskoaz n'en-devoa gwelet kemend-all. Lared a reas :

« Ober a rin. »

Hag e teuas neuze d'ar gêr.

Pa erruas e laras d'e wreg :

« Me 'vad am-eus tapet eur pesk kaer ! Sellit, gwreg, pebez pesk !... »

« Ya 'vad ; red eo lakaad anezañ da boazad. »

« Ma ouezfeh petra en-deus laret din ? »

« Piou ? Ar pesk ? »

« Ya, ar pesk. »

« Petra en-deus laret eta ? »

« Rei e gig deoh da zebri, e galon hag an dour a vo bet o walhi anezañ d'ar gazeg, hag e vouzellou hag e skevent d'ar giez. »

« Red e vo ober evel m'en-deus laret. »

Setu poazet ar pesk eta, debret e gig gand gwreg ar Pesketaer, e galon gand ar gazeg, hag e vouzellou gand ar giez.

Prestig goude e wilioudas ar wreg, hag e hanas daou vugel, daou baotr ar haerra, ha ken heñvel an eil ouz egile, ma oa red staga eur ruban ouz breh unan aneze, evid anavezoud an eil euz egile. Ar gazeg a halas ivez, ar memez deiz, hag he-devoe daou ebeul bihan, ha na oant ket disheñvel, en neb feson ; hag ar giez he-devoa ivez daou gi bihan, ha na oant ket disheñvel ivez.

« Hag a zo mad ! », a laras ar Pesketaer ; « peb a ebeul ha peb a gi da bep hini ma bugale. »

An daou baotr a deue mad. Pa oent degouezet gand an oad a bemzeg pe a hwezeg vloaz, e laras unan aneze e oa skuiz er gêr, hag e rankje mond da vale bro. Kaer o-devoa hen pedi da chom er gêr, e dad, e vamm hag e vreur, ne dalveze ket ; red e oa hen lezel da vond. Med a-raog e laras d'e vreur mond beb beure, kerkent ha ma savje, da skei eun taol kontell en troad al loreen a oa er jardin, ha pa deuje gwad gantañ, neuze e vije maro ; med bete neuze n'en-dije ket ezomm da gaoud morhed gantañ.

Mond a ra en hent, gand e varh hag e gi. Bale a ra kement ha ker bihan, ma tegouez ivez en eur vali gwez-dero braz, eur vali hir-hir. Mond a ra beteg ar penn, hag e wel eur hastell kaer. Skei a ra war an nor. Digoret eo dezañ. Goulenn a ra ha n'eus a ezomm mevel ebed. Kemeret eo da baotr marchosi. Dre ma oa ar paotr stummet mad, akuit en e labour, hag eur paotr koant ivez, e plije kaer d'an Aotrou ; hag e varh hag e gi a blije dezañ ivez. Med mui e plije c'hoaz da verh an Aotrou, eun dimezell yaouank ar hoanta. Kement a reas o plijoud dezi, ma oent dimezet hag eureujet a-benn ar bloaz.

<sup>26</sup> Eur wez e oa, eur wez e vo,  
Evid rei roll d'an oll gaozo'.

: Notenn gand Luzel : C'est une des nombreuses formules usitées pour entret en matière : Chaque conteu a ordinairement la sienne, et souvent plusieurs, suivant la nature des récits.

<sup>27</sup> an dour e vin bet gwalhet ; er skrid orin : an dour en pehini e vin...

An daou bried yaouank a veve evuruz, o vale bemdez dre ar jardinou hag ar hoajou, en-dro d'ar hastell. Eun deiz e taolas evez mab ar Pesketaer penaoz en eun tu a 'r hastell an dorojou hag ar prenestou a veze serret bepred, hag e houlennas digand e wreg petra a ao kirieg da ze.

« A-taoue, emezi, deuz an tu-ze a 'r hastell a zo eur porz leun a loened binimuz, naered, sourded, touseged hag a bep seurt amprevaned. »

Setu diwar neuze ne ree nemed soñjal er porz-se, hag en-devoa eur c'hoant braz da vond da weled e-unan ha gwir e oa bet laret dezañ. Run deiz pa oa o vale en tu-ze a 'r hastell, gand e varh hag e gi, (e wreg ne oa ket ganatañ an dro-ze), o tremen a-biou an nor, e laras :

« Red eo din gweled petra a zo aze. »

Skei a reas war an nor. Digoret eo kerkent gand ar wrahig koz, a lar dezañ<sup>28</sup> :

« Demad dit, ma mabig ; deut out d'am gweled eta ? »

« Demad deoh, mammig koz. »

« Hast buan dond e-barz, ma tiskouezin dit an traou<sup>29</sup> kaer a zo amañ. Sell aze diou chadenn da staga da varh ha da gi. »

Hag e tennas diou vlevenn euz he fenn, hag e roas aneze dezañ. Ha kerkent e oent troet e diou chadenn, hag e stagas gante e varh hag e gi ouz daou beul mên a oa eno en daou du d'an nor. Ar marh hag ar hi, pa weljont, en em lakaas da lampad, da hourignal, da yudal ; med ne dalveze ket, stag mad e oant, red e oa chom.

« Deus ganen bremañ, mabig, ma tiskouezin dit ma hastell ; deus da weled an oll draou kaer am-eus-me ; biskoaz n'az-teus gwelet kemend-all. Eom da genta da weled ar vilin aotennou. »

Pa oent e-kichenn ar rod vraz, goloet oll a aotennou :

« Sell, mabig, kaerra da dra ! Laka da benn dre aze, 'n em bleg eun tammig, evid gweled ggwellohoh. »

Pa oa o selled en toull, hep soñjal en droug, an Diaoulez koz a vountas anezañ war ar rod, hag e kouezas d'an traoñ, draillet ha malet evel brenn-heskenn !

E vreur, a oa chomet er gêr, ah ee bemdez da gontella troad al loreenn, hag evel ne deue ket a wad gantañ, a lare bep tro :

« Doue ra vo meulet, beo eo c'hoaz ma breurig ! »

Med allaz, ar beure-ze, kerkent hag en-doa roet e daol-kontell, e tilampas eur bouill gwad :

« Maro eo ma breur kêz, siwaz ! », a laras kerkent.

Hag eñ raktal da gaoud e dad, o ouela, ha da lared dezañ :

« Allaz ! ma zad, maro eo ma breur paour ! »

« Ha penaoz eh ouzout-te se ? »

« Laret en-devoa din, a-raog mond kuit, mond beb beure da skei eun taol-kontell en troad al loreenn a zo er jardin, ha pa deuje gwad ganen, neuze e vije maro. Allaz ! ar beure-mañ, kerkent hag am-eus skoet al loreenn, a zo dilampet eur bouill gwad ! Ma breurig paour a zo maro ! Red eo din mond bremañ d'hen klask, ha ne baouezin a vale, nag en noz nag en deiz, ken am-bo kavet anezañ ! »

Kaer o-devoa e dad hag e vamm gouela hag hen pedi da chom er gêr gante, en o hozni, ne dalveze ket ; mond a ra en hent, gand e varh hag e gi, evel egile. Bale a ra, bale a ra, kement ha ken bihan ma tegouez ivez er memez bali gwez-dero evel e vreur. Skei a ra war dor ar hastell, ha kerkent ez eo digoret dezañ. Pa hen gwel o tond er porz gwreg e vreur, e tiskenn buan-ha-buan euz he hambr, hag e teu da lampad en e gerhenn, o lared :

« Erru out eta, ma fried kêz ! Jezuz ! 'vel am-eus bet nehamant ganit ! Aon am-bo a vijes eet er porz a-dreñv ar hastell, rag ahane ne retorn den. »

Hemañ a welas prest e oa kemeret 'vid e vreur, hag a laras :

« 'N em gollet e oan er hoad, ne ouzon ket penaoz ; med n'am-eus bet droug ebed. »

Setu joa vraz er hastell, a-greiz ma oa glaharet an oll.

Pa oa deut ar houlz, e koanjont asamblez, ha goude e pignjont o-daou da o hambr, evid mond da gousked. Med a-raog mond er gwele, hemañ a lakaas e gleze noaz etreze o-daou.

<sup>28</sup> a lar dezañ : er skrid orin : pini a lar dezañ.

<sup>29</sup> an traou : er skrid orin : an treo.



« Daoust, petra a zo kaoz dezañ da ober se ? » a lare enni heh-unan ar wreg, souezet.

Mab ar Pesketaer en-devoa aon braz da veza anavezet hag a laras e oa skuiz hag en-devoa c'hoant kousked. Med ar wreg ne baouez ket a brezeg, ha da houlenn digantañ e zoare abaoe ma oa eet euz ar gêr, ha kalz a draou all. Hemañ 'oa nehet-braz, ha ne ouie petra lared. Ma houlennas ivez, perag ma oa serret kloz oll doriou ha prenestou eun tu a 'r hastell.

« Perag ? med laret am-eus dit c'hoaz ; n'az-teus ket a zoñj eta ? »

« Nann sur ; ankouet am-eus. »

« Ma ! me a laro dit c'hoaz : En tu-ze a 'r hastell a zo eur porz leun a naered, sourded, touseged, oll amprevaned binimuz, ha loened all falloh c'hoaz, hag an hini a yafe eno, ne zistrofe biken. »

Ma soñjas kerkent penaoz e oa eet e vreur eno.

An deiz-warlerh ar beure, goude dijuni, eh a da vale en tu-ze a 'r hastell, gand e varh hag e gi.

« Aze », a lare ennañ e-unan, « e rank beza ma breur, ha n'eus forz petra a hoarvezo, red eo din mond da weled. »

Skei a ra war an nor. Dond a ra ar wrah koz da zigori. Anavezoud a ra kerkent marh ha ki e vreur, evite da veza treud ha prest da vervel gand an naon.

« Demad dit », mabig ! a lar dezañ ar wrah, « deut out ivez d'am gweled ? Deus e-barz buan, ma tiskouezin dit an oll draou kaer am-eus amañ. Kemer an diou chadenn-ze, da staga da varh ha da gi aze en toull an nor, ken a zistroi. »

Hag e tennas diou vlevenn euz he fenn, hag eh astennas he dorn 'vid o rei dezañ. Med hemañ a hwezas warne, hag e kouezjont d'an douar, troet en diou naer-wiber.

« Ma ? mar ne fell ket dit staga da varh ha da gi, o laosk aze, ha deus ganen bepred da weled ma hastell. »

Mond a ra ganti. Erru e-kichenn ar vilin aotennou :

« Sell, mabig, bount da benn en toull-ze, hag e weli eur burzud ar haerra. »

« Diskouezit din penaoz ober, mamm-goz, evid gweled. »

« Sell, evel-henn, mabig. »

Hag e vountas he fenn en toull. Med kerkent mab ar Pesketaer a grogas en he zreid, hag he zanfoeltras war ar rod goloet oll a aotennou.

Hag e kouezas d'an traoñ, draillet munud evel brenn-hestenn.

Neuze eh a da vale dre ar hastell, da weled ha ne gavo ket e vreur. Me tegouez gantañ eul Louarnes, a lar<sup>30</sup> dezañ :

« Penaoz hoh-eus-c'hwi gallet dond amañ ? »

« Petra ? c'hwi a gomz ivez ? », a houlennas, souezet-braz.

« Evel ma welit. »

« O ! me am-eus gouvezet an tu da zond a-benn euz ar wrah koz. »

« Penaoz se eta ? »

« Penaoz ? taolet m-eus anezi war he fenn 'barz ar vilin aotennou, hag ez eo bet draillet munud evel brenn-heskenn. »

« O ! me 'garfe e ve gwir a larfeh ! »

« N'eus netra a wirroh, kredit ahanon, pa laran deoh. »

« Neuze hoh-eus ma delivret ? »

Ha kerkent e oe troet al louarnes en eur briñsez ar gaerra.

« Pemp-kant vloaz a oa, emezi, e oan-me dalhet amañ indan gazell-gae gand ar zorserez villiget-se ! »

« Ha ma breur paour, ne ouzoh doare anezañ ?... »

« Ho preur a zo bet taolet ganti er vilin-aotennou, hag eh eo bet draillet munud evel brenn-heskenn. Med n'eus ket a forz ; me am-eus dastumet oll, e gig, e wad hag e eskern, ha gand eur vuredad dour a vuhez a zo en kambr ar wrah koz e rentfom dezañ c'hoaz ar vuhez. »

<sup>30</sup> a lar : pehini a lar, er skrid orin.

Lakaet e oe an oll dammou en eur bern, kig, gwad hag eskern, taolet warneze eur vuredad dour a vuhez, ha kerkent e weljont o sevel ahane mab all ar Pesketaer, beo ha yah evel biskoaz, hag a laras : « Me avad am-eus kousket ! »

« Ya, ma breur paour, ha penamedon<sup>31</sup> hag ar Briñsez kaer-mañ, ne vijes ket dihunet c'hoaz ! »

Ma 'n em daoljont an eil en kerhenn egile, hag e oueljont gand ar joa da 'n em gavoud. Neuze e tistrojont o-zri en tu all d'ar hastell, hag ar wreg yaouank a oe souezet o weled daou bried dezi e-leh unan, ha ne ouie ket pehini a oa an hini gwir, kement ha ma oant heñvel an eil ouz egile. Ma oe kontet oll dezi. Neuze eh anavezaz perag an eil en-devoa lakaet eur hleze noaz er gwele, e-pad an noz en-devoa termenet ganti.

Neuze an hini aneze na oa ket dimezet a zimezas d'ar briñsez en-devoa delivret hag a oa stumm eul louarnez.

Lakaet e oa kerhad ar pesketaer koz hag e wreg, en eur harroñs kaer, hag e oe eno neuze, pad eur mizvez<sup>32</sup> penn-da-benn, festou, dañsou ha c'hoariou evel n'hoh-eus gwelet biskoaz.

Mamm-goz ma mamm-you-koz a oa eun tammig kar d'ar pesketaer koz, hag e oe pedet ivez, hag evel-se e teuas kelaou 'barz ar vro euz an eured-se.

*Kontet gand Marharid Fulup, a barroz Plunet.*

---

<sup>31</sup> penamedon : panevedon.

<sup>32</sup> eur mizvez : eur miz, er skrid-orin.

## Ar miliner hag e aotrou

Pevar bloaz a oa n'en-devoa ket paeet e hourmikêl d'e aotrou. Paour a-walh e oa ! Eun deiz, an aotrou, o retorn euz ar chase, ha droug ennañ, abalamour n'en-devoa tapet netra, a dennas war vuoh ar miliner, a gavas en e hent, hag a lahas anezi. Gwreg ar miliner a welas an taol, hag a zeredas d'ar gêr oh estlammi :

« Allaz ! allaz ! glaharet a-walh om 'vid an dro-mañ ! Setu lahet on buoh gand an aotrou ! »

Ar miliner ne laras mann ebed ; med droug a oa ennañ memez tra. E-pad an noz, e kignas e vuoh, hag eh eas neuze da werza he hrohenn da Wengamp. Evel ma en-devoa pell da vond, hag en-devoa c'hoant da veza beure-mad en kêr, e partias euz ar gêr war-dro hanternoz. Degouezet da dremen eur hoad 'leh ma oa ar vrud e vije laeron vraz, e teuas aon dezañ, hag e pignas war eur wezenn, da hortoz an deiz.

En-berr 'erruas indan ar wezenn eur vandenn laeron, da bartaji o arhant. Ha setu chikan ha trouz ; ne oant ket evid 'n em glevet.

« Jezuz, ma hallfen kaoud an arhant-se ! », a lare ar Miliner ennañ e-unan. Hag eñ o soñjal teurel krohenn e vuoh en o hreiz, evid o sponta. Al laeron, o weled ar herniou hag ar hrohenn du-ze, rag du e oa ar vuoh, a zoñjas deze e oa erru an Diaoul d'o herhed. Ha da skara, du-mañ ha du-hont, hag o leuskel eno o oll arhant !

« Deuet eo ma zaol da vad, war ma feiz ! », eme ar miliner.

Hag e tiskennas neuze diwar e wezenn, hag e pakas an oll arhant en krohenn e vuoh, ha d'ar gêr ! Beteg an deiz e chomas e wreg hag eñ o konta arhant ; med ne oant ket evid dond a-benn da ober kont ebed, re a oa euz an arhant.

An deiz-war-lerh ar beure, ar miliner a laras d'e wreg mond da di an aotrou, da houlenn eun anterenn<sup>33</sup> da vuzura an arhant. Mond a ra ar wreg, hag e houlenn eun anterenn.

« Da betra hoh-eus-c'hwi ezomm eun anterenn ? »

« Da vuzura arhant, aotrou. »

« Da vuzura arhant a-walh ! Ober goap ouzin a fell deoh, me 'gred ! »

« Nann, ma Doue, aotrou kêz ; ar wirionez a laran deoh ; deut ganen, hag e welfet. »

Mond a ra an aotrou ganti. Pa wel taol ar miliner goloet a beziou daou-skoed, ez eo souezet-braz, hag e lar dezañ :

« A beleh az-teus-te bet an arhant-se ? »

« Evid krohenn ma buoh, am-eus gwerzet en Gwengamp, am-eus bet aneze, aotrou. »

« Evid krohenn da vuoh ? Gwall-ger eo ar hrehen saout neuze eta ? »

« Ya 'vad, aotrou ; rekouret hoh-eus ahanon o veza lahet ma buoh. »

Hag an aotrou d'ar gêr, dioustu, hag oh ober laha e oll zaout, hag o higna. An deiz war-lerh ar beure e kas eur mevel en kêr gand ar hrehen, a oa aneze samm eun aneval, hag a lar dezañ goulenn eun anterenn arhant evid pep hini. Mond a ra ar mevel en kêr, gand e grehen.

« Pegement pep krohenn ? », a houlenn digantañ eur hivijer.

« Eun anterenn arhant<sup>34</sup> ! »

« Allons !<sup>35</sup> na ra ket a hoap ! ; pegement pep krohenn ? »

« Laret am-eus deoh, eun antrennad arhant. »

Ha 'vel ma lare ar memez tra d'an oll, eh eas droug en givijerien, hag e oe bahatet gante, ruillet ha diruillet war ar pave, ha lamet c'hoaz e grehen digantañ.

Pa erruas er gêr :

« Peleh emañ an arhant ? », a laras an aotrou dezañ.

« Ya da ! arhant, en eeun ! n'am-eus bet nemed taoliou treid ha bahadou, ha ma horv paour a zo brevet oll. »

<sup>33</sup> anterenn : poezell.

<sup>34</sup> Eun anterenn arhant : eun antrennad arhant.

<sup>35</sup> Allons ! : galleg.

« Bourdet on bet gand ar miliner ! », a laras neuze an aotrou, ha droug ennañ ; med n'eus forz, ma zro a deui ivez. »

Ar miliner a reas eun tammig fest gand ar vuoh 'oa bet lahet dezañ, hag e laras d'e wreg mond da bedi an aotrou da zond ivez. Mond a ra ar vilinerez ; ober a ra he fedenn.

« Petra, dond da ober goap ouzin c'hoaz em zi ! », a laras an aotrou dezi.

« Jezuz ! aotrou kêz, me, ober hoap ouzoh ? Na me na ma den ne gredfe biken ober se. »

« Ma ! Mond a rin koulskoude, hag e komzin gand ar miliner. Hennez a zoñj gantañ ez eo finnoh evidon, marteze ? »

Mond a ra an aotrou d'e goan d'ar vilin. Friko a oa, kig-sall, rost ouz ar ber, jistr ha gwin ivez. En defin<sup>36</sup> ar pred, pa oa eun tammig tomm ar pennou, ar miliner a laras da'n aotrou :

« Ma ! aotrou, an oll a oar ervad ez oh eun den fin ; ha koulskoude ez on kontant da ober eur pari na refet ket ar pezh a rin-me. »

« Petra eta ? »

« Laha ma gwreg dirazoh oll amañ, hag he resusita goude, o c'hoari gand ar violoñs am-eus aze. »

« Pari ugent skoed ne rin ket se. »

« Gwelom eta », eme an oll.

An aotrou a zalh ar pari.

Hag ar miliner o kemer eur gontell, o lampad war e wreg, hag oh ober van da droha he goug dezi. Med ne drohas nemed eur vouzellenn leun a wad en-devoa lakaet en-dro d'he goug. An aotrou, ha<sup>37</sup> ne ouie ket an dro, evel ar re all, a euze o weled ar gwad o redeg. Ar wreg a gouezas d'an douar, evel pa vije maro-mik. Ar miliner a gemeras neuze e violoñs, hag en em lakaas da zon. Hag e wreg da zével kerkent, ha da zañsal evel unan pennfollet. Ma chomas an aotrou da zelled, digor e henou gantañ.

« Ro din da violoñs », a laras d'ar miliner, « ha me a lezo ar vilin daou vloaz ganit evid netra. »

Setu greet ar marhad. Hag an aotrou d'ar gêr, gand e violoñs, ha stad ennañ.

« Ma gwreg », a lare ennañ e-unan o vond, « a zo eun tammig koz, ha mar gallan he yaouankaad ! »

Pa erruas er gêr, e kavas e wreg en he gwele, hag hi kousket mad.

« Hag a zo mad ! emezañ, evel-se ne ouvezo netra. »

Tapoud a ra eur gontell er gegin, hag e troh he goug d'e wreg. Ha da zon neuze gand e violoñs ! Med kaer en-devoa son, ar wreg paour ne zañse ha ne flache ; maro-mik e oa !

« Sota den eo ar miliner-ze ! emezañ. Lakaad ahanon da laha ma gwreg, ha kaer am-eus son, gand ar violoñs, ne deu ket a vuhez enni ! Red eo en-defe ankouet lared eun dra bennag din. Eh an prim da glevet gantañ. »

Redeg a eure d'ar vilin. Pa erruas, e welas ar miliner en korv e roched, eur skourjez gantañ en e zorn, hag eñ o skourjeta eur pod-houarn braz, en-kreiz ar porz, hag an dour o vervi ennañ. (A-nevez e oa diskennet diwar an tan). Chom a eure da zelled outañ, digor gantañ e henou, hag ankouet gantañ e wreg.

« Petra a rez-te evel-se, miliner ? »

« Lakaad ar zoubenn da vervi, ma aotrou ; deut buan da weled evel ma verv. »

Hag an aotrou a dostaas evid selled er pod-houarn, hag a laras :

« Ya avad ! Ha gand ar skourjez eo e rez dezi bervi evel-se ? »

« Ya, sur, aotrou ; ar hoad a zo ker, hag e vez re goustuz din. »

« Gwir a-walh a larez. Ro din da skourjez, ha me a lezo ganit ar vilin daou vloaz all evid mann. »

« Pa eo c'hwi eo, aotrou, setu-hi aze. »

Hag an aotrou a retornas d'ar gêr gand e skourjez ; hag o tond, e lare dezañ e-unan :

« Bremañ e lakain diskar ar hoad diwar ma oll douarou, hag am-bo kalz a arhant evite. »

Gwerza a eure ar hoad oll diwar e zouarou.

<sup>36</sup> defin : diwez.

<sup>37</sup> ha : pehini, er skrid orin.

« Aotrou, n’am-eus ken eun tamm koad na keuneud ; penaoz e rin-me bremañ evid aoza boued ? », a laras ar geginerez dezañ, eur zadorn da noz.

« Me a ouvezo mad penaoz ober, keginerez ; n’ho-po let a vorhed gand kement-se. »

An deiz-war-lerh ar beure, a oa eur zul, hag an aotrou a laras da oll dud e di, mevelien ha mitizien, mond d’an overenn-bred, nemed Yann-vraz, e vevel kenta, a chomje gantañ er gêr.

« Ha lein, piou hen aozo ? », a laras ar geginerez.

« N’ho-pet ket a nehamant gand se, hag it oll, pa laran deoh. »

Setu-int ‘ta partiet oll d’ar bourk. An aotrou a laras neuze da Yann-vraz degas ar pod-houarn braz en-kreiz ar porz, hag e leunia a zour. Neuze e lakaas e-barz kig-sall, kig bevin, kaol, irvin, hollen, pebr, oll kement a zo red da gaoud evid ober soubenn vad. Goude e tiwiskas e chupenn, e kemeras skourjez ar miliner, ha da skourjata ar pod-houarn ! Med kaer en-devoa skei, an dour a chomas yen bepred.

« Petra a rit ivez, aotrou ? », a laras Yann-vraz, souezet.

« Ro peuh, genaoueg, bremañ-souden e weli. »

Hag eñ da skourjata adarre, euz e gwelloha. A wez an amzer<sup>38</sup>, e vounte e viz er pod-houarn ; bepred e oa yen an dour ! Pa oe skuiz a-walh, e paouezas ivez, hag e laras :

« Arsa, ar miliner, ‘m-eus aon, a ra goap ouzin ! »

« Ya, goap a ra ouzoh, sur, aotrou », a laras Yann-vraz.

« Ma ! n’eus forz ; n’eus nemed ar maro evitañ ! »

« Larda anezañ ervad, gand e skourjez, me ‘gred e vo a-walh, aotrou. »

« Nann, nann, ar maro ! Ober goap ouzin-me ! Eom buan d’ar vilin, ha degas ganit eur zah ma vo bountet e-barz ha taolet er stank da veuzi. »

Yann-vraz a kemeras eur zah goullo war e skoaz, hag ez ejont o-daou ‘trezeg ar vilin. Bountet eo ar miliner paour er zah ha sammet war ar marh-portez evid beza kaset d’ar stank, a oa<sup>39</sup> eun tammig pell euz ar vilin. Pa oant o vond, e weljont o tond gand an hent eur marhadour ah ee<sup>40</sup> da foar Wengamp, ha gantañ tri a gezeg sammet a varhadourez. Ma teuas aon d’an aotrou.

« Eom da ‘n em guza ‘dreg ar hleuz, emezañ, ken a vo tremenet ar marhadour-ze. »

Mond a reont dreist ar hleuz er park. Ar miliner, en e zah, a oe harpet ouz ar hleuz, war vord an hent. Pa glevas trouz kezeg ar marhadour, o tremen e-biou dezañ, en em lakaas da grial :

« Nann, ne gemerin ket anezi ! ne gemerin ekt anezo ! »

« Ne gemeri ket piou ? », a houlennas ar marhadour.

« Pennherez eun aotrou pinvidig, he-deus bet eur bugel, hag a fell d’he zad ober din he hemer. »

« Ha gwir eo pinvig-braz ? »

« Ya, ar pinvika euz ar vro. »

« Ma ! me a zo kontant d’he hemer. »

« Deut amañ neuze buan er zah, ha me ‘ayo er-mêz. »

Mond a ra ar marhadour er zah, ar miliner a skoulm warnezañ, ha neuze e kemer e skourjez hag eh a etrezeg Gwengamp, gand an tri marh sammet a varhadourez.

Pa oe eet kuit, an aotrou ha Yann-vraz a returns d’o zah.

« Me a gemero anezi ! me a gemero anezi ! », a grie ar marhadour, a oa e-barz.

« Te a gemero piou , », eme an aotrou. `

« Ho merh, aotrou. »

« A ! mab gast ! kerz da glask anezi neuze en foñs ar stank ! »

Hag e oe taolet er stank, hag abaoe n’eo ket bet gwelet.

An aotrou hag e vevel Yann-vraz ah eas an deiz-war-lerh da foar Wengamp. Pa oant o selled ouz ar staliou kaer a oa eno, e oant souezet-braz o weled ar miliner eno ivez, ha gantañ ar stal aourfrebour ar gaerra.

« Petra, miliner », eme an aotrou, « te eo a zo aze ? »

« Ya ‘vad, ma aotrou ; deut oh da brena eun dra bennag diganen ‘michañs ? »

<sup>38</sup> A wez an amzer : a wech an amzer, eur wech an amzer.

<sup>39</sup> a oa : pehini a oa, er skrid-orin.

<sup>40</sup> pehini ah ee, e skrid orin.

« Penaoz, n'out ket chomet er stank eta ? »

« Evel ma welit, ma aotrou ; n'en em gaven mad eno ; ha koulskoude e trugarekaan ahanoh, rag ahane eo deut ganen an oll draou kaer a welit aamñ. »

« Ha gwir ? »

« Evel me lavar deoh, aotrou. N'am-eus keun nemed da eun dra, hag eo ma n'ho-poa ket ma zaolet eun tammig pelloh ; neuze e vijen kouezet el leh ma n'eus nemed traou aour. »

« Ha gwir ? »

« Ken gwir ha ma laran deoh, aotrou. »

« Hag emaint eno c'hoaz ? »

« Ya, me 'oar mad ; med mad e ve deoh hasta, mar hoh-eus c'hoant mond da weled. »

Hag an aotrou d'ar gêr gand e vevel ; ha d'ar stank ! Yann-vraz a lampas da genta en dour, hag evel ma oa braz-kaer, e save c'hoaz e zorn war horre an dour, da houlenn sikour, rag ne ouie ket neuial.

« Sell ! », eme an aotrou, « diskouez a ra din gand e zorn lampad pelloh ; 'michañs n'eo ket eet beteg an aour. »

Hag e kemeras e lañs, hag e lampas pella ma hallas.

Hag abaoe n'eus bet kelou ebed aneze.

Ha setu aze kaoz ar miliner hag e aotrou.

*Kontet gand Barba Tasel. En bourk Plouared. Miz Kerdu, 1868.*

# Genver ha C’hwevrer

*Eur wech e oa, eur wech a vo,  
Komañsamant an oll gaozo’,  
N’eus na mar na marteze  
En deus ti zroad an trebe’.*

Eur wech e oa eun den koz hag en-devoa daou vab, anvet Genver ha C’hwevrer. Evel ma ouzoh mad, Genver a deu atao a-raog C’hwevrer. Genver a oa eta ar mab henañ. Deut war-dro an oad a ugent vloaz, e skuizas e ti e dad, hag e c’hoantaas mond da vale bro. E dad a ro dezañ eun nebeudig arhant, rag n’oa ket pinvidig, hag eh a en hent.

Goude beza baleet e-pad tri deiz<sup>41</sup>, en em gav en eun ale vraz ; e penn an ale-ze e oa eur hastell kaer.

« Red eo din, emezañ, goulenn beza kemeret da vevel er hastell-mañ. »

Skei a ra war an nor. Kerkent eo digoret dezañ.

« Demad ! », emezañ d’ar porzier.

« Ha deoh ivez. »

« N’eus ket ezomm a eur mevel amañ ? »

« Eo, sur. A-nevez eet a zo unan kuit, hag a zo ezomm a eun all en e leh. Deut ganen, m’ho kaso dirag an aotrou. »

Mond a reont da gaoud an aotrou.

« Setu amañ, va aotrou, eun den hag a houlenn beza kemeret da vevel. »

« Hag a zo mad ! ezomm am-eus end-eeun a unan. Petra ‘ouzoh ober ? »

« Ma feiz ! va aotrou, eun nebeud a bep tra. »

« Ma ! Eun den stummet mad a zeblantit beza, plijoud a rit din. Setu amañ an divizou : Bemdez eh afet da labourad d’ar park, pe d’ar hoad, pe d’ar jardin, ‘leh ma vo lavaret deoh ; da guz-heol e teufet d’ar gêr, ha neuze ho-pezo da ziwall ar vugale, hag ober oll ‘vel ma lavarfont deoh. Eur gopr kaer ho-pezo, kant skoed ar bloaz, ha pa gano ar goukoug ‘vo fin ho ploaz. »

« Kement-se oll a zo mad. »

« C’hoaz em-eus eun dra da lavared deoh : arabad ‘vo deoh facha, n’eus forz petra a vezo greet pe lavaret deoh, pe e vefet kaset kuit gand netra, ha c’hoaz e vezo savet korreenn deoh, eur ruban krouenn ruz, adaleg chouk-ar-hil beteg seul ho troad. »

« Ma ! se eo ar gwas. Med c’hwi, aotrou, ma fachit da genta ? »

« Memez tra, e vo savet korreenn din ivez. »

« Neuze c’hoaz... »

Ma oe roet eur falz dezañ neuze, evid mond da droha lann d’al lanneg, beteg kuz-heol.

« Med n’ouzon ket an hent d’al lanneg. »

« Setu aze eur hi hag ho kaso hag a chomo ganeoh beteg kuz-heol. »

Mond a ra ar hi a-raog, eur pikol ki, hag hemañ war e lerh, e falz gantañ war goubl e vreh. Erruoud a reont en eul lanneg vraz. Hag eñ da droha lann. Pa oe skuiz, e fellas dezañ diskuiza eun tammig hag ober eur hornad butun. Kerkent ar hi a deu dezañ, o skrigna e zent hag o hrognal.

« Tie<sup>42</sup> ! Tie ! paotr mad eo. »

Med ar hi a hrogne mui-ouz-mui, hag, a-zav outañ, o skrigna e zent.

« Sell amañ ‘vad eur hi ar foeltr ! »

Ma eo red dezañ paka e gorn-butun hag en em lakaad adarre da labourad. Da greisteiz e teu ar vatez da zegas lein.

Azeza ‘ront en disheol war ar hlazenn, dindan eur wezenn fao. Diou skudellad soup ‘oa gand ar vatez, unan soup bara gwenn, unan all soup bara du. Mond a ra Genver evid kemer ar soup bara gwenn.

<sup>41</sup> tri deiz : tri devez.

<sup>42</sup> Tie : Tiens (galleg), er skrid orin. E brezoneg e vez lavaret “tie” d’ar chas.

« Ola ! », eme ar vatez, hemañ eo soup ar hi ! »  
« Penaoz ? Bara gwenn d'ar hi, ha bara du d'ar mevel ? »  
« Evel-se emañ ar bed amañ, va den mad ! »

Debri a ra e skudellad en eur hrozmolad, hag e c'hoanta neuze ober eur hornad, evel m'emañ ar hiz. Med kerkent ar hi a lamp gantañ adarre, o hrognal, ma rank dioustu mond da droha lann.

Da guz-heol, ar hi a gemer hent ar hastell, ha Genver war e lerh. P'errujont, e oa ar vevelien all gand o hoan er gegin, hag an itron o rei kig deze. Genver a zebras prim-ha-prim e skudellad soup, med kerkent ar vugale da lavared :

« Me m'-eus c'hoant kahad ! », eme unan ; « me 'm-eus c'hoant staotad ! », eme eun all.  
« Alo ! mevel nevez », eme an aotrou.  
« Ya, ya ! », eme Henver.

Hag eñ er-mêz gand ar vugale... Pa zistroas, n'oa netra ken war an daol : fin 'oa da goan. Ma selle Genver ouz an aotrou hag an itron, hep kredi lavared netra.

« 'Barz va zi », a lavaras an aotrou, « emañ ar hiz penaoz an hini a erru, pa vez klenket ar boued, n'en-defe netra ken. »

« Ma ! », eme Henver.  
« N'oh ket kontant ? », eme an aotrou.  
« Eo, sur. N'eo ket ar wech kenta am-eus greet eur goan fall.  
« Da gousked bremañ ! », eme an itron.

Eet en e wele, Genver a lavare dezañ e-unan :

« Tapet on bet hirio, med warhoaz e taolin pled. »

An deiz-war-lerh ar beure, e oe kaset adarre da droha lann d'al lanneg. Ma tremenas an deiz-mañ evel egile. Ar hi a oa gantañ adarre, ha ne roe peoh ebed dezañ pa hoantae diskuiza eun tammig. Da greisteiz e teuas ar vatez gand diou skudellad soup : ar hi a zebras adarre ar soup bara gwenn, ha Genver ar soup bara du. Da guz-heol e tistrojont adarre d'ar gêr. Genver a oa gwall-skuiz ha naon braz dezañ.

« C'hoaz gand ne vo ket evel deh da noz », a lavare dezañ e-unan, « hag e vin lezet en peoh da zebri va hoan. »

P'errujont e oa adarre hanter debret o hoan gand ar vevelien all. A-boan 'oa da Henver beza kroget en e skudellad soup, ma komañsas adarre ar vugale da lavared :

« Me 'm-eus c'hoant kahad ! Me 'm-eus c'hoant staotad ! »  
Genver ne ree van ebed da gleved aneze, hag a lonke soup.  
« Alo ! Genver », eme an aotrou, « ne glevit ket ? »  
« Eo, sur, med mar karfent gortoz eun tammig. »  
« A ! nann, dioustu ! dioustu ! »  
Ha Genver er-mêz gand ar vugale.  
« Prim ! prim ! bugaligou. »

Med kaer en-devoa hasta, pa retornas, 'oa fin da goan, ha klenket ar boued diwar an daol. Ha 'vel ne roe den netra dezañ :

« Me, aotrou », emezañ, « am-eus gwall labouret an deiz-mañ, hag am-eus naon. »

« A ! gwaz a ze deoh ! Lavaret em-eus deoh c'hoaz penaoz amañ an hini a erru, goude ma vez klenket ar boued, n'en-deus netra da houlenn ken. »

« Ola ! homañ n'eo ket eur vuhez da veva outi ; labourad e-pad an deiz, ha tremen beb noz heb e goan ! »

« Petra, n'oh ket kontant ? »

« Nann, sur, hag eun all em leh... »

« Neuze 'vo savet korreenn deoh diousu. Alo ! paotred. »

Ha kerkent pevar mevel a grogas en Genver gêz, hen lakaas en noaz hag hen astennas war e gov war an daol : kaer en-devoa krial ha difrinka, e oe savet eur gorreenn dezañ adaleg chouk e gil beteg seul e droad. Neuze e oe laosket da vond d'ar gêr, ha ne oe roet netra dezañ.

Distrei a ra Genver d'ar gêr, hag eñ mezuz ha neuz klañvuz dezañ.

Pa wel e dad anezañ o tond :



« N'out ket bet pell, va faotr !... Erru out adarre war va hein, ha me nag a boan am-eus o veva. »

E eil mab, C'hwevrer, a lavar e partio ivez d'e dro, da weled hag-eñ e vezo evurusoh eged e vreur. Mond a ra, hag e tegouez er memez kastell evel Genver. Kemeret eo da vevel, gopret daouhant skoed ar bloaz, gand ar memez divizou, da lavared eo, ar henta a deuje da facha ouz e aotrou hag e vije savet korreenn dezañ ; en-divije da ober ouz ar vugale, goude kuz-heol, pa retornje euz e labour ; hag e vije fin d'e vloaz pa ganje ar goukoug.

Kaset eo an deiz kenta da droha lann d'al lanneg, hag ar hi gantañ ivez. Da greisteiz e teu ar vatez da zegas lein : ar hi a zebr adarre ar soup bara gwenn, ha C'hwevrer an hini bara du. Pa fell dezañ diskuiza, e lamp ar hi gantañ, hag e skrign e zent :

« Sell amañ 'vad eul loen kasuz !... Ar hamarad-mañ ne chomo ket ganen-me pell ! »

Da guz-heol e teuont o-daou d'ar gêr. P'errujont, 'oa krog ar vevelien all gand o hoan. Roet eo ivez e skudellad da Hwevrer. Prestig goude e komañs ar vugale :

« Me 'm-eus c'hoant kahad ! », eme unan ; « me m'-eus c'hoant staotad ! », eme eun all.

« Ahanta ! mevel nevez », eme an aotrou.

« ya, ya », eme Hwevrer.

Hag eñ gante er-mêz... Pa retornas 'oa fin da goan : n'oa netra ken war an daol.

« Amañ », a lavaras dezañ an aotrou, « emañ ar hustum penaoz an hini a erru, pa vez klenket ar boued, n'en-defe netra ken. »

« Ma ! se 'zo mad da houzoud. »

« N'oh ket kontant ? »

« Eo, sur. Ne varvin ket evid eur goan fall, med eur wech all e taolin pled ! »

Ha da gousked.

An deiz war-lerh ar beure, e oe kaset C'hwevrer adarre da droha lann, hag ar hi gantañ adarre.

« N'em-eus ezomm ebed euz ar hi-mañ. Dalhit anezañ er gêr. »

« Nann, nann ! ar hi a yelo ganeoh. »

« Ma ! Gwelet e vo ha ni a deuio on-daou emberr ! », a lavaras goustadig.

Goude beza trohet lann e-pad war-dro eun eur<sup>43</sup>, e c'hoantaas ober eur hornad butun. Hag ar hi da hrognal, da skrignal e zent ha da lampad gantañ.

« Goustadig ! kamarad. Bremaig e welfom eur c'hoari all ! »

« Ha C'hwevrer o troha e houzoug dezañ gand e falz, hag o teurel e gorv en douvez. Neuze eh eas d'azeza dindan eur wezenn fao ha da vutunad en peoh.

Da greisteiz, p'erruas ar vatez, e oa souezet-braz pa ne wele nag ar hi na C'hwevrer. O klask, hen kavas gourvezet en disheol, ha da vutunad en peoh.

« Peleh emañ ar hi ? », emezi.

« Ar hi ? me 'oar 'vad eo kousket war-dro pe eet war-lerh eur had bennag.

« O ! ar hi-ze ne gousk ket evel-se er park, ha ne red ket war-lerh ar gedon. »

« Ma ! klaskit anezañ, mar karit. »

Hag ar vatez. da glask, hag e-keit-se, C'hwevrer a zebras ar soup bara gwenn.

« Maleüruz ! », a lavaras ar vatez, pa welas korv ar hi en douvez. « Lazet az-teus ar hi ! »

Hag hi d'ar gêr raktal da lavared d'an aotrou.

« Lazet az-teus ar hi, maleüruz ! », a lavaras an aotrou dezañ, evel m'erruas.

« Ya, sur. Hennez n'eo ket eur hi 'oa, med eun diaoul, a zoñj din. Ha neuze, lavaret em-oa deoh mired anezañ er gêr ! »

« Ggwelloh e vije ganen beza kollet daou-hant skoed, mab ar hagn ! »

« N'oh ket kontant, aotrou ? »

« N'on ket kontant ? N'em-eus ket lavaret se. Med laza va hi ! »

« Me 'm-eus c'hoant kahad ! Me 'm-eus c'hoant staotad ! », eme ar vugale.

« It gand an diaoul, ha list ahanon da zebri va hoan ! »

« Petra ? Ankouaet ah-eus dija on divizou ? »

« Me 'm-eus c'hoant kahad ! »

<sup>43</sup> eur : eurvez.

Ha C’hwevrer o kregi er paotr bihan hag hen teurel dre ar prenest er-mêz.

« Kerz da gahad ‘ta, marmouz bihan ! »

« Mab an diaoul, teurel va mab dre ar prenest ! »

« N’oh ket kontant, aotrou ? »

« Ha penaoz beza kontant ? »

« Ha neuze, gouzoud a rit, e vo savet korreenn deoh... »

« N’em-eus ket lavaret n’on ket kontant... Med teurel va bugale dre ar prenest !... It da gousked, ha warhoaz ‘vo gwelet petra a vezo greet. »

Setu nehet an aotrou gand C’hwevrer.

« Hemañ, avad, emezañ, a zo eur paotr ha n’eo ket brao c’hoari gantañ ! Petra ar foeltr a rin outañ ? »

An deiz war-leh, ne oe ket kaset C’hwevrer da droha lann. An aotrou a lavaras dezañ :

« Deuit ganen d’ober eur bale d’ar hoad : laeret e ven bemdez, trohet e vez ar plant yaouank, diskaret e vez ar gwez. Gwaz a ze d’an hini a gavin ! »

N’oant ket eet pell, pa weljont eur vaouez koz o tastum tammou keuneud seh. An aotrou, a oa droug ennañ, a dennas dioustu gand e fuzul hag a lazas mik ar baourez kêz koz.

« Manket oh avad, eme C’hwevrer. Me ‘anavez an hini goz-se ; honnez he-deus tri mab, paotred an terrupla, ha ne vankfont ket war ho puhez ! »

Setu aon d’an aotrou.

« Kerz prim, emezañ, da gerhad diou bal a zo er horridor<sup>44</sup> e-kichen kambr va gwreg, ma touarfom prim an hini goz, ha n’ouvezo den netra. »

Mond a ra C’hwevrer d’ar hastell. Gweled a ra an itron hag an dimezell en o hambr, digor an nor warne. Antren a ra :

« Me ‘zo lavaret din gand an aotrou, emezañ, dond da bokad deoh ho-tiou. »

Lampad a ra war an itron, ha pokad dezi.

« Ampoezon ! Charn ! me ‘lavaro d’an aotrou, hag e raio troha da houzig dit ! »

Ha garm, ha kri forz.

« Hast buan ‘ta ! », a gri an aotrou, a oa dindan ar prenest o hortoz.

« O-diou, aotrou ? », a houlennas dre ar prenest.

« Ya, o-diou, ha hast buan ! »

Hag eñ o tapoud ar verh hag o pokad dezi ivez. Ha kuit neuze, da gavoud an aotrou, gand an diou bal.

Pa oe douaret ar vaouez koz e teujont d’ar gêr. P’errujont, e lampas kerkent an itron e bleo he fried :

« Petra, den fall, kollet eo da skiant-vad ganit ?... Degas an diaoul-ze da bokad d’az merh ha din ! »

« Ha posubl ‘ve en-defe greet an taol-ze ? », a lavaras an aotrou, o tistrei ouz C’hwevrer.

« N’em-oa ket goulennet diganeoh dre ar prenest : « O-diou ? ». Ha n’hoh-esu ket lavaret din : « Ya, ya, o-diou, ha buan ? »

« Mil malloz warnout, diaoul ! », eme an aotrou o tiskouez dezañ e zorn serret.

« N’oh ket kontant, aotrou ? »

« Ha piou ‘vefe kontant ? »

« Neuze ‘vo savet korreenn deoh, evel ma ouzoh. »

« N’em-eus ket lavaret n’on ket kontant, med n’eus forz piou em flas ne vefe ket. »

Setu ne ouie ket an aotrou petra ober euz C’hwevrer.

« Hen kas kuit dioustu », eme an itron.

« Neuze ‘vo red rei daou-hant skoed dezañ. »

« O rei dezañ, ha prim. »

« Ya, hag ar gorreenn, deoh-c’hwil ‘vo savet, pa’z eo lavaret n’echuo e vloaz nemed pa gano ar goukoug ? »

<sup>44</sup> er horridor : galleg. en trepas.

Setu-int nehet-braz.

« N'eus forz, eme an itron, me 'gavo an tu d'en em zizober dioutañ. »

« Penaoz ? »

« Va lest d'ober ; gweled a rafet hebdale. »

An deiz-war-lerh ar beure, e lavaras an aotrou da Hwevrer :

« Kemerom peb a fuzul, hag eom da chaseal d'ar hoad. »

Pa oant o vond er-mêz a 'r porz, e klevjont en eur wezenn dero a-uz d'o fenn :

« Koukou ! koukou ! »

« Petra ? petra ? », eme C'hwevrer, eur goukoug o kana er vro-mañ en miz c'hwevrer !... Biskoaz kemend-all n'em-eus gwelet. Bremaig, loen brao, me ho tesko da hortoz ho koulz da gana ! »

Hag eñ o tenna er wezenn. Ha kerkent, a vranc da vranc, e kouezas eun dra bennag n'oa ket heñvel ouz eur goukoug. Pa dostajont da weled :

« Allaz ! allaz ! va gwreg ! », eme an aotrou. « A ! mab an diaoul ! kef an ivern ! »

« Fachet oh, aotrou ? »

« Ya, fachet on sur, ha bremaig hen paea din ! »

Hag eñ o sevel e fuzul evid tenna war C'hwevrer, med hemañ a lampas warnezañ, en eur lavared :

« Goustadig, va mestr ! Gouzoud a rit moarvad on divizou ? Red eo paea, pa goller. »

Allaz ! hag e rankas an aotrou kêz lezel sevel eur gorreenn dezañ adaleg chouk e gil beteg seul e droad, ha rei daou-hant skoed da Hwevrer, hag ouspenn ar gorreenn a oa bet savet d'e vreur Genver, hag a oa eno en eur gambr, en divil<sup>45</sup> euz ar voger gand kalz a re all.

Neuze e teuas C'hwevrer d'ar gêr, ha stad ennañ.

Pa welas e dad anezañ o return :

« Setu-te distroet ivez 'ta, va mab C'hwevrer, evel da vreur. »

« Ya, va zad kêz, setu-me distro ivez, med nann evel va breur, rag setu amañ daou-hant skoed en aour melen, hag eur gorreenn savet d'an aotrou, hag unan all hag a anavezo anezi, a gred din, va breur Genver. »

Neuze e oe greet eur pred kaer. Va mamm-goz a oa eun tammig kar deze hag a oe pedet ivez, hag evel ma klevas gand C'hwevrer e-unan an doare euz a gement-mañ oll, m'ho ped da gredi n'em-eus lavaret amañ nemed pep tra gwir.

*Kontet gand Marharid Fulup, a Bluned ; miz Kerdu 1868.*

---

<sup>45</sup> en divil : a-ispill.

# Tregont a Bariz

*Eur wech e oa, eur wech e vo,  
Komañsamant an oll gaozo' ;  
N'eus na mar na marteze  
En-deus tri zroad an trebe'.*

D'ar houlz ma ao an Aotrou Doue ha sant Per ha sant Yann o vale dre Vreiz-Izel, pa oant o vond gand o hent, o kaozeal, e klevjont eun deiz evel eur bugel bihan o ouela en eun douvez. Pa zelljont, e kavjont eur bugelig dilezet, en e gavell, eur mabig ar haerra. Ma kemerjont anezañ, hag hen kasjont gante. Eur vaouez koz, n'he-devoa bugel ebed, hen kemeras digante, hag a zavas anezañ evel he mab.

Ar paotr a deue mad. Da bemzeg vloaz, e oa eur hrennard kreñv ha stummet mad. Ma c'hoantaas mond da vale bro. Kaer he-devoe an hini goz ober, red e oe hen lezel da vond. Rei a reas dezañ eun tammig arhant, hag eh eas etrezeg Pariz.

Pa zegouezas en Pariz, eh eas dioustu da houlenn labour da balez ar roue. Ma oe kemeret, dre ma oa eur paotr stummet mad, ha koant ivez. Ne oe ket bet pell eno, ma plije kaer d'ar roue. Ma oa gourvenneg ar vevelien all outañ, hag e klaskjont an tu d'hen koll...

Eun deiz, pa oant gand o haoz, e lavaras unan ivez :

« Daoust petra 'zo kaoz d'an Heol da veza ken ruz pa zav diouz ar beure ? »

« Se n'eo ket êz da houzoud, avad », a lavaras ar re all.

« Ma lavarfem d'ar roue penaoz Tregont a Bariz « - Tregont a Bariz a oa e ano, dre n'anaveze den e dad –« en-deus lavaret beza den da vond da houlenn digand an Heol petra 'zo kaoz dezañ da veza ken ruz pa zav diouz ar beure ? »

« Ya, lavarom se dezañ ! », eme an oll.

Ar henta paotr marchosi a yeas da gavoud ar roue, hag a lavaras dezañ :

« Ma ouvezfeh, aotrou roue, petra en-deus lavaret Tregont a Bariz ? »

« Ha petra en-deus lavaret eta ? »

« Lavaret en-deus beza den da vond da houlenn digand an Heol petra 'zo kaoz dezañ da veza ker ruz pa zav diouz ar beure. »

« Ne gredan ket en-defe lavaret eun dra evel-se. »

« Lavaret en-deus, sur a-walh. »

« Ma ! degemennit dezañ dond da gomz ganen. »

Dgemennet eo da Dregont a Bariz da gomz gand ar roue.

« Penaoz, Tregont a Bariz, hag hoh-eus lavaret beza den da vond da houlenn digand an Heol perag e vez ker ruz, pa zav diouz ar beure ? »

« Me, va roue ? Biskoaz n'em-eus komlzet a ze ; n'on ket diod a-walh evid lavared ar seurt traou-ze ! »

« Eo, lavaret hoh-eus, ha red 'vo deoh ober ar pezh hoh-eus lavaret, pe n'eus nemed ar maro evidoh. »

Setu nehet Tregont a Bariz, m'ho ped da gredi.

« Greet eo ouzin ! », a lavaras dezañ e-unan.

Kerkent ha ma oa deut er-mêz ar porz, e welas eur gazeg wenn euz ar gaerra, hag a lavaras dezañ :

« Deus war va hein, ha me da gaso beteg an Heol. Mil leo 'zo da ober evid erruoud, kent kuzheol, er hastell kenta ma kouskfom. »

Pignad a ra Tregont a Bariz war gein ar gazeg wenn, ha kerkent e savas en êr, ha setu-int partiet, primmoh eged an avel. Erruoud a reont e-tal ar hastell, pa oa an Heol o vond da guza. Tregont a Bariz a ziskenn diwar gein e gazeg hag a sko war an nor.

« Piou 'zo aze ? »

« Tregont a Bariz. Va hazeg ha me a ra unan ha tregont. »

Digoret eo dezañ. Pedet eo da goania ouz taol an aotrou.

« Peleh eh it ivez ? », a houlenn hemañ digantañ.

« Ma feiz ! n'ouzon ket kaer. Lavaret zo din mond da houlenn digand an Heol perag ma vez ker ruz, pa zav diouz ar beure, ha n'ouzon en pe du moned. »

« Ma ! Mar deuit a-benn d'erruoud eun deiz 'leh ma zo lavaret deoh mond, goulennit digantañ ivez petra 'zo kirieg d'am zad da veza klañv, ha petra 've mad d'ober evid renta ar yehed dezañ. »

« Ma ! ober a rin. »

An deiz war-lerh ar beure, kerkent ha ma sav an heol, e pign war gein e varh, ha setu-int en hent adarre, ha da vond ken a foeltr. A-benn kuz-heol, e oant dirag an eil kastell, a oa mil leo euz an hini kenta. Degemeret mad eo adarre Tregont a Bariz hag e koagn ouz taol an aotrou. Hemañ a houlenn digantañ evel egile :

« Peleh eh it ivez, va den mad ? »

« Ma feiz ! lavaret zo din mond da houlenn digand an Heol perag e vez ker ruz, pa zav diouz ar beure ; med n'ouzon dre beleh nag en pe du mond. »

« Ma ! mar degouezet eun deiz bennag e ti an Heol, goulennit digantañ ivez petra 'zo kirieg m'am-eus eur wezenn-ber 'barz va jardin, hag eun hanter anezi a zo seh, hag an hanter all a ro bleun ha frouez beb bloaz. »

« Ma ! goulenn a rin. »

An deiz war-lerh ar beure, en em laka adarre en hent, pignet war e gazeg.

« Petra, ne dostaom ket c'hoaz ivez ? » a houlenn Tregont a Bariz digand e gazeg.

« Eo, n'on-eus ken nemed mil leo d'ober. Emberr e tegouezfom e-kichenn eur vreh-vor, hag e vo red dit va lezel en tu-mañ. Med eun tremener a gavi eno ha da dremeno war e vagig. Goulenn a raio diganit peleh eh ez ; med taol evez mad ha na lavar ket dezañ ; ha, pa zistroi, na lavar ket adarre peleh e vi bet, ken e vi tremenet en tu all. »

Derhel a reont da vond, hag e tegouezont gand ar vreh-vor. Lakaad a ra neuze e gazeg da beuri en eur prad eno, hag eh a da gavoud an tremener.

« Peleh eh it ivez, aotrou ? », a lavar hemañ dezañ, pa oant war an dour.

« Va zremenit bepred, ha pa zistroin, e lavarin deoh peleh e vin bet. »

Setu-eñ en tu all. Gweled a ra dirazañ kastell an Heol, kaerra tra en-devoa gwelet biskoaz. Tostaad a ra evel evid antren. An Heol a oa o vond da zevel, ha, pa wel anezañ, e lavar dezañ :

« Pella, pella buan, pe me da losko ! Da betra out-te deut amañ ? »

« Da houlenn diganeoh perag ez oh ker ruz diouz ar beure, pa zavit. »

« Ato, pa baran war gastell Priñsez he hastell aour ; kee kuit bremañ, buan, ma savin, pe me da losko. »

« Red 'vo deoh lavared din c'hoaz, a-raog, petra 've mad da ober evid rei ar yehed d'eur priñs klañv a zo er henta kastell 'leh am-eus kousket o tond amañ, ha ne gaver medisin ebed da gwellohaad anezañ. »

« Eun touseg a zo dindan troad dehou e wele, ha, pa vezo lazet an touseg-se, kerkent en em gavo yah... Med teh buan ; poent braz eo din sevel ».

« N'in ket kuit ken ho-pezo lavaret din petra 'zo kirieg ma zo e jardin an eil kastell 'leh am-eus kousket, eur wezenn-ber hag a zo seh eun hanter anezi hag en hanter all e ve bleun ha frouez beb bloaz. »

« Ato, ar wezenn-ber-ze a zo eur varrikenn arhant dindan he gwriziou, hag en tu emañ an arhant ez eo seh ha maro, hag en tu all ez eo glaz ha leun a vuhez. Kee kuit bremañ, prim-prim, rag diwevad on ! »

Tregont a Bariz a deu kuit, p'en-deus klevet ar pezh en-devoa c'hoant da gleved, hag an Heol a zav neuze.

Degouezet e-kichenn ar vreh-vor, an tremener a gemer anezañ adarre war e vag, hag a houlenn digantañ, pa oant e kreiz an tremen :

« Lavar din bremañ petra en-deus lavaret an Heol dit. »

« Pa vin en tu all. »

« Lavar din raktal, pe me da daolo en dour. »

« Neuze bepred ne glevi netra, ha gand-se, ggwelloha 'teus d'ober eo tremen ahanon. »

Tremen a ra anezañ.

« Lavar din bremañ, p'am-eus da dremenet. »

« Eur wech all, ma teuan c'hoaz dre amañ. »

« Allaz ! tapet on adarre. Va malloz ganit !... Pemp-kant vloaz 'zo abaoe ma'z on amañ tremener, ha te 'halle va delivra. »

« Ya, evid kemer da blas, ha chom keid-all pe belloh... Trugarez ! »

Kavoud a ra e gazeg, 'leh m'en-devoa lezet anezi.

« Ahanta ! greet mad e-teus da dro ? »

« Ya, ya. »

« Pign war va hein neuze, ha kuit ! »

Degouezoud a reont a-benn kuz-heol e-kichenn an eil kastell 'leh m'o-devoa tremenet an noz. Degemeret mad eo Tregont a Bariz ; koania 'ra adarre gand an aotrou a houlenn digantañ :

« Ahanta ! greet hoh-eus va hefridi d'an Heol ? »

« Ya, ya, greet em-eus. »

« Hag en-deus petra deoh ? »

« Dindan ho kwezenn-ber ez eus kuzet eur varrikenn arhant, hag en tu emañ an arhant ez eo seh ha maro, hag en tu all ez eo glaz ha beo. »

Diskaret e oe ar wezenn-ber, hag e oe anavezet en-devoa lavaret gwir an Heol.

An deiz war-lerh ar beure, eh ejont kuit, abred, hag a-benn kuz-heol e oant adarre e-kichenn ar hastell kenta 'leh m'o-devoa kousket o vond. Degemeret mad int adarre. Tregont a Bariz a goagn gand ar briñsez yaouank, rag he zad a oa bepred klañvoh-klañv.

« Ahanta ! », a lavaras dezañ, « greet hoh-eus va hefridi da'n Heol ? »

« Ya 'vad, priñsez. »

« Hag en-deus lavaret petra ? »

« Lavaret en-deus penaoz dindan troad dehou gwele ho tad a zo eun touseg, ha ken a vo lazeta an amprevan-ze, ne gavo ket ar yehed. »

Klasket e oe raktal dindan gwele ar roue koz, ha dindan an troad dehou e oe kavet eur pikol touseg. Lazet e oe, ha kerkent ar roue koz en em gavas ker yah ha biskoaz.

An deiz war-lerh ar beure, kerkent ha ma savas an heol, Tregont a Bariz hag e gazeg en em lakaas adarre en hent hag a-benn kuz-heol e oant erru e Pariz, dirag palez ar roue. Ar gazeg a gimias neuze digantañ, hag a zavas en êr, hag e kollas ar gwel anezi.

« Ma ! honnez a dle beza gwall-gaer, ar briñsez-se ! »

Tregont a Bariz a antreas er palez hag a yeas kerkent etrezeg ar roue.

« Ahanta ! Tregont a Bariz », a lavaras ar roue dezañ, « deut eo da daol da vad ? »

« Ya avad, va roue. »

« Ha petra en-deus lavaret an Heol dit ? »

« An Heol, va roue, en-deus lavaret din penaoz ar pezh a lakae anezañ da veza ker ruz, pa zave diouz ar beure, eo kastell Priñsez he hastell aour, pa deue da bara warnañ »

« Ma ! honnez a dle beza gwall-gaer, ar briñsez-se ! »

Tregont a Bariz a zsitroas neuze d'e labour, evel kent, hag en-devoe peoh eur pennadig... Med ar vevelien all a glaske bepred an tu evid koll anezañ. Eun deiz, unan aneze a yeas adarre da lavared d'ar roue :

« Ma ouezfeh, aotrou roue, petra en-deus lavaret Tregont a Bariz ? »

« Petra en-deus lavaret Tregont a Bariz ? »

« Lavaret en-deus beza den da zegas deoh d'ho palez Priñsez he hastell aour. »

« Ha gwir ? Lavarit dezañ dond d'am havoud ; me 'garfe a-walh gweled ar briñsez kaer-ze. »

Setu degemeret da Dregont a Bariz mond da gomz gand ar roue.

« Petra ? Tregont a Bariz, hag hoh-eus lavaret beza den da zegas din d'am falez Priñsez he hastell aour ? »

« Me, va Doue ! biskoaz n'em-eus komzet a ze, va roue. »

« Eo, eo ! Lavaret hoh-eus, ha red 'vo deoh ober ar pezh hoh-eus lavaret, pe n'eus nemed ar maro evidoh. Hag it raktal. »

Setu nehet Tregont a Bariz.

« Penaoz ober ? », a lavare dezañ e-unan. « M'am-bije bet va hazeg c'hoaz ! »

En em lakaad a ra en hent an deiz war-lerh, beure mad. E-tal toull dor ar porz e kav e gazeg, a lavar dezañ :

« Pign war va hein, hag eom kuit buan, rag pell on-eus da vond »

Pokad a ra dezi gand ar joa ; pignad a ra war he hein, ha kuit !... Erruoud a reont en aod ar mor. O vond, war an trêz e welont eur pesk bihan, digor e henou gantañ, hag eñ evel pa vije o vond da vervel.

« Tap krog er pesk-se », a lavaras ar gazeg, « ha laka anezañ buan en dour. »

Lakaad a ra ar pesk en dour, ha kerkent hemañ a zav e benn war horre, hag a lavar :

« Va bennoz dit, Tregont a Bariz !... Me eo roue ar pesked ha ma 'z-pefe ezomm biken ahanon pe euz va re, goulenn hag e kavi sikour. »

Mond a ra neuze war eur vag a 'n em gav eno, hag e tegouez prestig dirag kastell Priñsez he hastell aour. Skei a ra war an nor, hag ar briñsez heh-unan a deu da zigeri.

« Demad dit, Tregont a Bariz ! », a lavar dezañ. « Te 'zo deut amañ d'am herhad evid mond ganit da balez a'r Roue Frañs. »

« Ya, avad, priñsez, gwir a lavarit. »

« Mond a rin ganit ; med fenoz e chomi ha warhoaz eh efom kuit. »

Tremen a ra an noz er hastell, hag an deiz war-lerh ar beure e partiont o-daou. Ar briñsez a zegas ganti alhweziou ar hastell hag o zaol er mor. Kavoud a reont ar gazeg en tu all, war an aod ; pignad a reont o-daou war he hein, ha kuit etrezeg Pariz.

Pa welas ar roue koz ar briñsez, e oe ker braz e joa ma oe darbet dezañ koll e benn. Bemdez e veze festou ha c'hoariou, ha ne gomze nemed a zimezi d'ar briñsez. Homañ a lavaras dezañ e oa kontant a-walh, med e vije red dezi a-raog, kaoud eno he falez aour.

Setu nehet ar roue. Penaoz ober evid degas ar palez aour da Bariz ?

« Ba ! » a lavaras dezañ unan euz ar briñsed, « an hini en-deus kerhet deoh ar briñsez a gerho ivez he falez. »

Degemennet eo adarre da Dregont a Bariz mond da gomz gand ar roue.

« Arsa ! Tregont a Bariz, kastell aour ar briñsez a vo red dit da gerhad din amañ, bremañ, dirag va-hini. »

« Ha penaoz, va roue, e fell deoh e rafen-me se ? »

« Red 'vo dit ober, pe n'eus nemed ar maro evidout. »

Dond a ra Tregont a Bariz war e giz, hag eñ trist-mad.

« Ma teu adarre va hazeg kêz d'am zikour », a lavare outañ e-unan, « marteze en em dennin c'hoaz euz ar pleg-mañ ».

An deiz war-lerh ar beure, kerkent ha ma teu er-mêz a borz ar palez, e wel adarre e gazeg hag e lavar oll dezi.

« Distro beteg ar roue, ha lavar dezañ e vo red dit, a-raog mond en hent, kaoud eur marh sammet a aour hag eun all sammet a gig. »

Retorn a ra beteg ar roue ; roet eo dezañ ar pez a houlenn, hag en em lakaont neuze en hent. Degouezoud a reont en aod ar mor. Tregont a Bariz a garg ar hig en eur vatimant a 'n em gav eno, hag eh a kuit neuze, o lezel e gazeg beteg an distro. Degouezoud a ra en eun enezenn, e-leh ma wel pevar leon, droug braz enne. Mond a ra etrezeg enne, hag e lavar deze :

« N'en em zebrit ket evel-se, loened paour. Deuit ganen ha me 'roio boued deoh. »

Mond a reont gantañ beteg ar vag hag e taol deze an oll gig a oa deut gantañ. P'o-devoe debret leiz o hov, e lavarjont dezañ :

« On bennoz dit. Ni 'oa o vond d'en em zebri amañ, ma ne vijes deuet d'on zikour. Ma 'z-pefe biken ezomm ahanom, goulenn, hag e vi sikouret. »

« Ma feiz ! loenigou paour, ezomm a-walh am-eus a-vremañ. »

« Petra 'hallom ober evidout ? »

« Lavaret a zo din gand a'r Roue Frañs e rankan degas dezañ da Bariz kastell Priñsez he hastell aour, pe n'eus nemed ar maro evidon. »

« O ! ma n'eo nemed se, e vezo greet prestig. »

Kerkent ar pevar leon a redas d'ar hastell aour hag a ziwriziennas anezañ diwar ar rohell 'leh ma oa, hag hen dougjont war ar vag. Hag a-raog mond kuit, e lavarjont c'hoaz da Dregont a Bariz :

« C'hoaz az-pezo ezomm ahanom, Tregont a Bariz ; med n'eus forz peleh e vi, goulenn hag eh errufom. »

An deiz war-lerh ar beure, pa zigoras ar roue e zaoulagad, e oe souezet o weled evel ma oa sklêr e gambr.

« Petra eo kement-mañ ? », a lavaras.

Hag e lampas er-mêz e wele ; hag e vountas e benn er prenest.

« Ola ! », a grias kerkent, « setu ar hastell aour ! »

Hag eñ da redeg da gambr ar briñsez ha da lavared dezi :

« Setu erru ar hastell aour ! Deuit da weled ! »

« Ya, avad ; eñ eo, n'hallan ket hen nah. Eom da weled anezañ. »

Mond a reont, ha d'o heul oll dud al lez.

« Med peleh emañ an alhwez ? Allaz ! dond a ra soñj din bremañ em-eus lezet anezañ da goueza e foñs ar mor, pa oan o tond amañ. »

« Eun alhwez all a vo greet », eme ar roue, « hag e hallfom dimezi dioustu. »

« O ! n'eus den war ar bed hag a hallfe ober eun alhwez da zigeri va hastell ; an hini koz a vo red da gavoud, hag ahann da neuze ne vezo ket greet an eured, rag em hastell aour em-eus c'hoant beza eureujet. »

« Med penaoz ober evid kaoud an alhweziou-ze euz a foñs ar mor ? »

« Nemed Tregont a Bariz a deufe a-benn d'hen kaoud, ne welom den all ebed », a lavaras an oll.

Degemennet eo adarre da Dregont a Bariz mond da gavoud ar roue, ha lavared dezañ e ranko kavoud an alhwez, pe n'eus nemed ar maro evitañ.

Mond a reont en hent, e gazeg hag eñ. Pa 'z int degouezet en aod ar mor, ar gazeg a lavar dezañ :

« Galv bremañ roue an oll besked, en-devoa lavaret e teuje d'az sikour, pa 'z-pije ezomm. »

Gervel a ra roue an oll besked a deu dioustu hag a lavar :

« Petra 'zo evid ho servij, Tregont a Bariz ? »

« Degas din alhwez kastell Priñsez he hastell aour, a daolas e foñs ar mor, pa oa ganen o vond da Bariz. »

« Ma n'eus nemed se, ne bado ket pell. »

Gervel a ra ar roue e oll besked hag e houlenn digante ha n'o-devoa ket gwelet an alhwez. Hini ne ouie doare dezañ. Tremenet e oant oll, nemed ar wrah, a vez atao war-lerh. Dond a ra ivez, hag an alhwez ganti en he genou. Ar roue a ro anezañ da Dregont a Bariz, hag hemañ a zistro kerkent d'ar gêr.

« Bremañ bepred », a lavaras ar roue koz da Briñsez he hastell aour, o rei dezi alhwez he hastell, « e vo greet an eured, pa 'm-eus rentet deoh oll kement hoh-eus goulennet diganen. »

« Ya, bremañ e vo greet an eured. Med eun draig a hoantaan c'hoaz a-raog ; se ne vo ket diêz deoh, goude ar pezh hoh-eus greet. »

« Petra eo 'ta ? »

« Gouzoud a rit n'oh ket yaouank-yaouank ken, hag a-raog dimezi deoh, em-befe c'hoant d'ho kweled evel pa oah en oad a bemp vloaz warn-ugent. »

« Med penaoz e hallfe kement-se c'hoarvezoud ? »

« Gand an dour a vuhez hag an dour a varo. »

« Ha penaoz kaoud an daou zour burzuduz-se ? »

« Êz a-walh, a gredan ; kalz diêsoh evid se hoh-eus greet. »

Degemennet eo adarre da Dregont a Bariz mond da gomz d'ar roue, a lavar dezañ e ranko kerhed diou vuredad euz an dour a varo hag an dour a vuhez, pe n'eus nemed ar maro evitañ. »

An deiz war-lerh ar beure, en em gav adarre ar gazeg gand Tregont a Bariz, hag e lavar dezi petra a hoanta c'hoaz ar roue.



« Allaz ! emezi, homañ a vezo on gwas tro ; med, ma teuom a-benn anezi, e vo fin ivez d'az labouriou ha d'az poaniou. Eom en hent, rag gwall-bell on-eus da vond. »

Goude beza greet kalz a hent, dre a bep seurt broiou, e tegouezjont ivez e-leh m'o-devoa da vond, e-kreiz eur hoad braz, leh ne zeue den gwech ebed.

« Sell du-hont an diou feunteun, ouz treid an diou rohell vraz a welez », a lavaras ar gazeg da Dregont a Bariz. Eun dakenn peb eur a gouez euz peb rohell en peb feunteun. »

« Ya, gweled a ran an diou feunteun, med daou leon euz ar re vrasa a welan ivez en pep tu d'an daou zour, ha ma tostaan, e vin diframmet sur gante. »

« Goulenn roue al loened d'az sikour. »

Goulenn a ra roue al loened, hag e teu kerkent.

« Petra 'zo evid ho servij, Tregont a Bariz ? »

« Ato, degaset on gand a'r Roue Frañs da gerhad dezañ diou vuredad euz an dour a vuhez hag an dour a varo, med ar pevar loen a welan du-hont va lakaio a-beziou, ma tostaan. »

« N'eus nemed se ? Gortozit eun tammig, ma komzin gand ar baotred-se. »

Mond a ra roue al loened d'ar pevar leon a oa o tiwall an diou feunteun, hag e tiskar aneze d'an douar, hag, e-keit-se, Tregont a Bariz a garg e ziu vured, unan a bep seurt dour. Trugarekaad a ra roue al loened, hag e retorn neuze d'ar gêr gand e gazeg vad.

Tri bloaz e oant bet oh ober o zro, ha, ma oa koz ar roue diagent, bremañ n'oa ket nebeutoh, ha koulskoude ne furrae tamm, hag e c'hoantae muioh-mui dimezi da Briñsez he hastell aour. Pa welas Tregont a Bariz distroet gand an daou zour, e kane hag e lampe gand ar joa, evel eur bugel. Raktal e felle dezañ beza yaouankaet.

Astennet e oe war e gein war an daol, hag ar Briñsez a skuillas warnañ diou pe deir dakenn euz an dour a varo. Ha ne lavaras goude ze na bu na ba : maro-mik e oa.

Ar briñsez a lavaras neuze :

« Kasit ar hagn koz-se da vreina du-ze en douveziou ! An hini en-deus bet an oll boan a dle kaoud ivez an digoll. Tregont a Bariz a vezo va fried ! »

Taolet e oe korv ar roue koz da vreina e douveziou ar hastell ha Tregont a Bariz a oe dimezet da Briñsez he hastell aour.

Festou ha goueliou a oe eno neuze euz ar re gaerra. E dibenn pred an eured, Tregont a Bariz a lavaras :

« N'em-eus keun nemed da eun dra. »

« Petra eo ? », a lavaras dezañ ar briñsez.

« Pa ne welan amañ ivez va hazeg vad, a zo bet fidel din en oll boaniou hag em ol labouriou. »

Keerkent en em gavas e sal ar banvez, den ne ouie penaoz, eur plah euz ar gaerra, kalz kaerroh evid Priñsez he hastell aour, a oa kaer a-walh, hag a lavaras :

« Me eo an hini a zo bet ganit en da oll boaniou ha labouriou, e stumm eur gazeg ; me eo ar Werhez Vari, degaset d'az sikour gand an Aotrou Doue, en-devoa da zastumet, pa oas bet dilezet en eur hleuz, war vord an hent.

Ha p'he-devoe lavaret ar homzou-ze, e kolljont adarre ar gwel anezi.

*Kontet gand Frañseza an Ewen, gwreg Tregoad, euz a Bederneg ; 1869.*

# Ar pevarzeg Kazeg ha Marh ar Bed

*Selaouit, mar hoh-eus c'hoant,  
Hag e klevfet eur gaozig koant,  
Ha nan-eus enni netra gaou,  
'Med, marteze, eur ger pe daou.*

Eur wech e oa eur pennher yaouank pinvidig-mor. Pevarzeg kazeg a oa en ti e dad, ha bemdez eh ee gand ar vevelien d'oa has da beuri, hag e vrasa plijadur a oa redek warne er parkou hag el lanneierou.

Pa oe deut en oad a zaouzeg vloaz, e oe kaset d'ar skol en kêr, hag e vrasa keuz a oe rankoud dilezel e gezegened. A-benn eur bloaz e tistroas d'ar gêr, ha kenta ma houlennas ouz e dad a oe doare ar pevarzeg kazeg.

« Ma feiz ! », a lavaras e dad dezañ, « n'em-eus ket o gwelet pell braz a zo, med kredi 'ran emañ mad ar bed gante. »

Med ar pennher a yeas kerkent d'ar park hag a welas eno ar pevarzeg kazeg o peuri, ha gante trizeg ebeulez kaer hag eun ebeul fall ha dinerz. Mond a reas beteg an ebeul fall-mañ, hag en em lakaas da grafad e dal dezañ. An ebeul a gomzas neuze hag a lavaras :

« Lazit an trizeg ebeulez ha va list beo va-unan, evid ma hallin tena ar pevarzeg kazeg, ha dond da veza ken kreñv va-unan ha pevarzeg marh. »

« Petra ? C'hwi 'gomz ivez, loen paour ? »

« Ya 'vad, me 'gomz ivez ; med ober a rafet ar pezh am-eus lavaret deoh ? »

« Laza trizeg ebeulez kaer evel ar re-ze evid eur falleganig na vo mad biken da netra, marteze ? Ne rin ket se, avad. »

« Grit, pa lavaran deoh, ha diwezatoh n'ho-po ket a geuz. »

« Ne rin ket, ne rin ket. Red e vefe 've kollet va skiant-vad ganen evid ober an dra-ze. »

Hag e tistroas d'ar gêr. Med e-pad an noz ne reas nemed soñjal er pezh en-devoa lavaret an ebeul dezañ. An deiz war-lerh, eh eas adarre d'ar park da weled ar hezeg, hag an ebeul bihan a gomzas outañ evel an deiz diagent, hag an drived deiz, memez tra. Ma lavaras neuze ennañ e-unan :

« Kement-mañ 'zo eun dra bennag ; mad e ve din senti. »

Hag e lazas an trizeg ebeulez.

Med deut 'oa an amzer da retorn d'ar skol, hag eh eas adarre evid eur bloaz<sup>46</sup>. Pa oe greet e vloaz, e tistroas adarre d'ar gêr, hag a-boan 'oa dezañ beza erruet, ma redas d'ar park da weled ar hezeg, ha dreist-oll e ebeul bihan. Pevarzeg ebeulez all a oa adarre gand ar pevarzeg kazeg, hag ouspenn, an ebeul fall ne oa kresket tamm. Hemañ a deuas etrezeg ar pennher, kerkent ha m'hen gwelas, hag a lavaras adarre dezañ :

« Lazit adarre ar pevarzeg ebeulez nevez, evid ma chomin va-unan da dena ar pevarzeg kazeg. »

« Ne rin ket, pa n'eo ket kollet va skiant-vad ganen ! Eur wech on bet tapet, med ne vin ken, ebeulig fall. N'out kresket tamm, ha te denet ganit pevarzeg kazeg, e-pad eur bloavez<sup>47</sup> ! »

« Grit, pa lavaran deoh, ha n'ho-pezo ket a geuz a ze diwezatoh. »

Kement e talhas warnañ, ma lazas adarre ar pevarzeg ebeulez.

Ha neuze e rank adarre retorn d'ar skol evid eur bloavez.

Dond a ra adarre d'ar gêr pa oe echu ar bloavez, hag e red d'ar park da weled ar hezeg. Pevarzeg ebeulez vihan a oa adarre gand ar pevarzeg kazeg, hag an ebeul fall n'oa bepred ggwellohaet tamm. Mond a ra d'hen kavoud, eun tammig droug ennañ, hag e lavar dezañ :

« Arsa ! biskoaz n'em-eus gwelet kemend-all ! Dena e-pad daou vloaz pevarzeg kazeg, ha c'hoaz n'out na kresket na ggwellohaet tamm ! Petra eo kement-se ivez ? »

<sup>46</sup> eur bloaz : eur bloavez.

<sup>47</sup> eur bloavez : eur bloaz, er skrid orin. Memez mod pelloh.

« N'eus forz, eur wech c'hoaz e vo red deoh laza ar pevarzeg ebeulez. »

« Ba ! ba ! ober goap ouzin a rez. »

« Nann, ne ran ket goap ouzoh. Sentit ouzin, pa lavaran deoh : ar wech diweza e vo. »

« Ma ! pa 'm-eus greet diou wech, eo koulz din ober ivez an deirved, ma vezo gwelet. »

Hag e lazas evid an deirved gwech an ebeulezed, ha goude e retornas adarre d'ar skol, hag a-benn eur bloavez e tistroas adarre d'ar gêr, echu bremañ e studi. Kerkent ha m'erruas, e redas d'ar park da weled ar hezeg :

« Daoust petra 'vo c'hoarvezet ? », a lavare dezañ e-unan.

An dro-mañ e oa bepred ar pevarzeg kazeg o peuri er park, med n'oa ket a ebeulezed bihan gante : n'oa nemed an ebeul tri bloaz, hag eñ ker bihan ha ker fall evel kent. Ma'z eas droug er pennher o weled kement-se, hag e trohas eur vaz evid bazata al loen fall.

« Ola ! va mestr », a lavaras an ebeul, « na skoit ket, m'ho ped. Va zelaouit mad, grit evel ma lavarin deoh, hag e welfet neuze petra 'hoarvezo. It d'ar gêr, kemerit eur brid, eun dibr hag eur skrivell, ha deuit amañ gante. »

Mond a ra ar pennher d'ar gêr, hag e retorn kerkent d'ar park, gand eur brid, eun dibr hag eur skrivell.

« Mad ! », eme an ebeul. « Lakait bremañ ar brid em fenn hag an dibr war ma hein... Mad evel-se !...Kemerit bremañ ar skrivell hag en em lakait d'am skrivella, ha stard ! »

Hag ar pennher da skrivella. Kel liez taol skrivell a roe, e kreske an ebeul eun tamm. Ma teuas da veza ker braz ha ker uhel, ma rankas pignad war eur hleuz. Pa oe ker braz ha ker uhel ha tri marh mad, e lavaras dezañ :

« A-walh ! Pign bremañ war ma hein, evid ma'z efom on daou da vale bro. »

Setu-int o-daou en hent, ha lorh er pennher, m'ho ped da gredi, o veza gwintet war eur marh evel hennez. Biskoaz n'oa bet gwelet e bar ; dre-oll e soueze an dud, hag e choment da zelled oute, digor o genou gante. Mond a reont, mond a reont ken e tegouezont en Pariz.

Ar roue en-devoa nao a gezeg hag a oa klañv-oll, ha den n'halle o yac'haad, hag e oa poaniet braz a ze. Ma lavaras e varh d'ar pennher :

« Me 'oar penaoz yac'haad kezeg ar roue. It, ha lavarit dezañ ma kar rei deoh eur hant kerh evid pep hini euz e gezeg, o lakafet ken yah ha biskoaz. P'ho pezo bet ar herh, hen degasfet din, ha neuze e tornfet kezeg ar roue gand eur vaz, ken a zavo an eonenn warne. Dastumit an eonenn-ze en eul lien evid va frota gantañ, hag e kresko va nerz euz a oll nerz kezeg ar roue, hag ar re-mañ en em gavo yah ivez. »

Mond a ra ar pennher da gavoud ar roue.

« Demad deoh, aotrou roue. »

« Ha deoh ivez, va den mad. »

« Me, aotrou roue, a yac'hao deoh ho kezeg, mar karit. »

« Ne glaskan nemed se. Mar deuit a-benn d'hen ober, e vefet paeet mad. »

« Ma ! roit din eur hant kerh da rei da bep hini aneze, ha va lezit da ober goude. »

« Mar n'hoh-eus ezomm nemed a ze, e vezo êz rei deoh ho koulenn. »

Gourhemenn a ra ra roue d'e genta paotr marchosi rei dezañ nao hant kerh. O has a ra kerkent d'e varh, hag e tistro neuze da zorna kezeg ar roue gand eur vaz dero glaz, trohet gantañ en eur harz. Skei a ra, skei a ra, ken e oe ar hezeg paour ker gleb ha pa vijent bet en eur stank. Neuze, gand eun torchouer, e tastumas an eonenn diwarne, hag e teuas prim da frota e varh. Hemañ a deuas kerkent da veza flourroh ha kreñvoh, ha kezeg ar roue en em gavas ivez yah mad.

Merh ar roue a oa sorserez ha, pa welas kement-se, e lavaras d'he zad :

« C'hwil, va zad, a zoñj deoh hoh-eus kezeg kaer ; med ma welfeh Marh ar Bed, hennez, avad, a zo eur marh ! Ho re n'int nemed koz gagnou en e geñver ; ken ho-pezo Marh ar Bed en ho marchosi, n'hallfet ket lavared ho-pezo eur marh kaer. »

« Ya, med penaoz kaoud ar marh-se ? »

« An hini en-deus yac'haet ho kezeg a zo den d'hen degas deoh ; lavarit dezañ ober. »

Degemeret eo d'ar pennher dond da gavoud ar roue.

« C’hwil, a gavan, a zo eun den dreist ar re all. Marh ar Bed am-eus c’hoant da gaoud, hag e vo red deoh hen degas din d’am falez. »

« Ha penaoz, aotrou roue, e hallfen-me ober ze, pa n’ou majisian na sorserez ? »

« A ! red e vo deoh hen ober, pe n’eus nemed ar maro evidoh. »

Hag eñ o tistrei beteg e varh, trist mad, ha stouet e benn gantañ.

« Petra ? », a lavaras ar marh, « a zo c’hoarvezet, ma’z oh ker trisit-se ? »

« Allaz ! kollet on, rag biken ne deuin a-benn da ober ar pezh en-deus gourhemennet ar roue din. »

« Petra en-deus gourhemennet ar roue ? »

« Degas dezañ d’e balez Marh ar Bed, pe n’eus nemed ar maro evidon. »

« Se n’eo ket eñ, med diêsoh kalz on-devo da ober, ha, mar karit ober oll evel ma lavarin deoh, e kredan en em dennfom euz ar pleg-se. Retornit da gavoud ar roue, ha lavarit dezañ e ranko va ober houarna gand pevar houarn a bemp-kant livr pep hini, deg tach en pep houarn, ha lakaad en-dro din naonteg ha pevar-ugent ejen, evid terri nerz gwinkadennou Marh ar Bed :

*C’hwil va brido ha a zibro,*

*A zalho kont*

*euz an tachou.*

Mond a ra ar pennher beteg ar roue, hag e lavar dezañ kement-se oll.

« Greet e vezo evel ma lavarit », eme ar roue, « hag ouspenn ho-pezo arhant kement ha m’ho-pezo ezomm. »

Pa oe prest oll, en em lakajont en hent. Mond a reont, mond a reont, kement ha kement m’en em gavjont dirag mogerioù porz ar hastell ‘leh ma oa Marh ar Bed. Digor ‘oa an nor vraz.

« Pignit bremañ war voger ar porz, dre ar wezenn-dero a zo e-kichen, hag ahane e welfet bremaig c’hoari kaer. »

Pignad a ra ar pennher war ar voger, hag e varh a ya er porz.

Kerkent, Marh ar Bed a zered en eur hourignal, ha savet gantañ e lost hag e voue en êr. Hennez, avad, a oa eur marh !... Memestra e oe souezet o weled eul loen ker kaer ha ma oa ivez egile. Distaga ‘ra dezañ eur winkadenn, hag e kouez daou pe dri grohenn ejen d’an douar. Ha setu neuze eur hann tenn ha rust, ken a grene ar hastell hag an douar gante.

Marh ar Bed a wall-skoe, ha bep taol e teue gantañ daou pe dri grohenn ; med egile a roe gwall flipadou ivez gand e hern a bemp-kant livr, ha bep taol e tistage eur pezh kig. Teir eurvez<sup>48</sup> e padas ar hann, hag ar pennher, war e voger, en-doa aon braz na gollje e varh, o weled ne chome ken nemed pevar pe pemp krohenn ejen en-dro dezañ, pa welas Marh ar Bed o koueza d’an douar, e bevar droad en êr, hag o houlen kartier<sup>49</sup>. Neuze e tiskennas buan diwar ar voger ; hag e lakaas eur brid dezañ en e benn. Hemañ a lezas ober, hep stourm, hag a deuas neuze war-lerh ar marh all, trist ha stouet e benn gantañ.

Pa zegouezjont o-zri en Pariz, an oll a zerede d’o gweled : biskoaz n’o-devoa gwelet daou varh ker kaer. Ar roue a zegemeras mad ar pennher hag hen pedas da leina gantañ. Stad vraz a oa ennañ o kaoud en e balez eur burzud evel Marh ar Bed.

Med ar briñsez sorserez, ha ne glaske nemed koll ar pennher, n’oa ket a stad enni, hag, eun toullad deizioù goude, e lavaras adarre d’ar roue :

« Ma ouifeh, va zad, petra en-deus lavaret paotr e varh braz ? »

« Ha petra en-deus lavaret ‘ta ? »

« Petra en-deus lavaret ?...Lavaret en-deus ez eo den da gerhad deoh ar briñsez kaer a zo gand eur sarpant en eur hastell dalhet gand peder chadenn aour etre an douar hag an neñv. »

« Ha gwir ‘ve en-defe lavaret an dra-ze ? »

« Ya, gwir a-walh, pa lavaran deoh. »

« Ma ! neuze ‘vo red dezañ ober, pe n’eus nemed ar maro evitañ. »

Setu ma’z eo degemennet d’ar pennher mond adarre da gavoud ar roue.

<sup>48</sup> eurvez : eur, er skrid orin.

<sup>49</sup> o houlen kartier : galleg.

« Petra ? Hag hoh-eus lavaret penaoz oh den da gerhad din ar Briñsez kaer a zo gand eur sar pant en eur hastell dalhet gand peder chadenn aour etre an douar hag an neñv ? »

« Biskoaz, ger, va roue, n'am-eus bet lavaret a gement-se. Red 've lavared e ve kollet krenn va skiant-vad ganen evid soñjal ober eun dra evel-se. »

« A ! eo, lavaret hoh-eus, ha red e vo deoh ober ar pez hoh-eus lavaret, pe n'eus nemed ar maro evidoh. »

« Neuze, mar rankan mervel, pe vervel eno, pe vervel amañ, n'eus ket a forz kaer din, ha ggwelloha 'm-eus d'ober eo êsa bepred. »

Retorn a ra da gavoud e varh, hag eñ trist-mad.

« Petra 'zo nevez adarre ? », a houlennas ar marh, p'hen gwelas.

« Netra a vad, siwaz ! Lavaret a zo din gand ar roue e rankan kerhad dezañ ar briñsez kaer a zo gand eur sar pant en eur hastell dalhet gand peder chadenn aour etre an douar hag an neñv. Biskoaz n'em-oa klevet komz euz ar briñsez-se, ha n'ouzon peleh mond d'he hlask. »

« Me 'oar ; med pell a zo ahann di, ha kement-se n'eo ket eun dra êz. N'eus forz, mar karit senti ouzin hag ober oll evel ma lavar in deoh, e teufom c'hoaz a-benn d'en em denna ahane. Distroit da gavoud ar roue, ha lavar in dezañ penaoz e vo red va houarna en arhant gwenn gand hern a bemp-kant livr ouz pep troad, ha deg tach en pep houarn :

*C'hwi ma brido hag a zibro,  
A zalho kont ezu an tacho'.*

Neuze e vo red dezañ lakaad ober deoh eur hleze dir, trempet en binim aspik, hag a droho an aour evel koad. »

Retorn a ra ar pennher da gavoud ar roue, a lavar rei dezañ oll kement en-devo ezomm evid ober e dro.

Pa oe houarnet ar marh ha greet ar hleze, eh ejont adarre en hent. Mond a reont, mond a reont kement-ha-kement m'en em gavont e-kichenn ar chadennou a zalhe ar hastell en êr, uhel, uhel, ken o-devoa poan oh hen gweled.

« Kemerit bremañ ho kleze evid troha ar chadennou, ha skoit stard ! »

Setu troha eur chadenn, diou, teir ; med gwall skuiz 'oa a-benn neuze.

« Kalon ! » a lavare ar marh dezañ ; « skoit bepred, ha hastit pe ez om kollet ! »

Dond a ra a-benn, gand kalz a boan, euz ar bederved chadenn, hag ar hastell a gouez neuze d'an traoñ, gand eun trouz spontuz. Kerkent eur briñsez, kaer evel heol, a lamm er-mêz dre eur prenest, hag a red da bokad d'ar pennher, en eur laaverd dezañ :

« Va bennoz dit, pa'z-teus va zennet digand al loen-louz-se ! Med hastom mond kuit, gand aon on tapfe c'hoaz. »

Hag e pignjont o-daou war ar marh, ha prim war-zu Pariz.

Pa welas ar roue koz ar briñsez kaer-mañ, e oe ken chalmet e galon, ma c'hoantaas dimezi raktal. Ne roe peoh ebed dezi, ma oent dimezet ; med an eured a oe lakaet diwezatoh, pa vije degaset an Aval aour, a lakaas ar briñsez sorserez e spered ar briñsez all da houlenn, evel kaerra tra a oa war an douar.

Degemennet e oe adarre d'ar pennher mond da gavoud ar roue, a lavaras dezañ e vije red c'hoaz kerhad an Aval aour, pe n'oa nemed ar maro evitañ.

« Penaoz, va Doue, aotrou roue, e fell deoh ?... »

« A ! n'eus ket da lavared, red e vo deoh hen kerhad din, pe n'eus nemed ar maro evidoh ; ha grit prim. »

Dond a ra da lavared d'e varh petra a hoanta adarre ar roue.

« Homañ, eme ar marh, a vezo on tro diweza, ha mar deuom a-benn d'heh ober mad, on-devo ar peoh goude. It beteg ar roue, ha lavar in dezañ penaoz 'vo red va houarna an dro-mañ gand aour, ha staga eun houarn aour a bemp-kant livr ouz pep troad din gand deg tach aour en pep hini aneze :

*C'hwi ma brido, hag a zibro,  
A zalho kont euz an tacha.*

Ar roue koz a roas oll aour e deñzor, ken troet 'oa e benn gand ar briñsez !, ha pa oe houarnet ar marh, en em lakajont adarre en hent. Mond a reont, mond a reont, ar marh a ouie an hent, ha, goude beza baleet pell, en em gavjont en eur hoad braz, e-leh n'oa bet kristen ebed ouspenn kant vloaz a oa. Ma tegouezas gante eur wrahig koz hag a houlennas :

« Peleh it-c'hwi evel-se, va mab ? »

« Ma feiz ! mamm-goz, n'ouzon ket kaer ; lavaret a zo din mond da glask an Aval aour hag hen degas ganen, pe n'eus nemed ar maro evdion. »

« Ma ! me ho sikouro. Prestig en em gavfet e-kichenn eur hastell e-kreiz ar hoad, hag ez eo ker stank ar gwez, an drez hag ar spern en-dro dezañ, ken n'hallfet ket ober eur hammed. Pemp-kant vloaz 'zo n'eus bet den dre eno. Med setu amañ eur wialenn, ha n'ho-pezo nemed ober ganti eur groaz war ar hoad, an drez hag ar spern, ha kerkent e welfet eun hent kaer o tigeri dirazoh, hag eh efet neuze hep poan beteg ar hastell. Pa vefet eet er porz, e welfet eno eur wezenn-avalou, hag enni an Aval aour, ker brao, ker koant. Setu amañ c'hoaz eur zerviedenn, a astennfet war ar hlazenn, dindan ar wezenn. Neuze e hejfet ar wezenn, hag e kouezo an Aval aour war ar zerviedenn. Grit eur groaz warnañ gand ho kwialenn, hag e ranno, hag e welfet eur gontell en e greiz. Lakait ar gontellze en ho kodell, rag diwezatoh ho-pezo ezomm anezi. Grit neuze eur groaz all war an aval gand ho kwialenn, ha kerkent en em zerro adarre, hag eh aio evel kent. Neuze e tistrofet d'ar gêr gantañ. P'errufet, merh ar roue, hag a zo sorserez, a houlenno an aval diganeoh, med na roit ket anezañ. Neuze e vo greet eur pred kaer, hag e vo lakaet an aval war an daol. Ar roue a hoantao hen ranna, med nag eñ na hini all ebed ne hallo dond a-benn d'hen ranna : rampa 'raio o hontellou warnañ. Neuze hen goulennfet ivez, ha, gand ar gontell ho-pezo kavet ennañ hen rannfet hep poan. Med kerkent ha ma vo eet ho kontell ennañ, merh ar roue a gouezo war lein he hein, rannet he halon ivez, ha maro-mik.

« Trugarez, mamm-goz »

Hag ez ejont adarre a-raog. Med prestig n'halljont ken mond, gand ma oa stank ar gwez, an drez hag ar spern. Ar pennher a reas neuze eur groaz gand gwialenn ar wrahig koz, ha kerkent setu eun hent euz ar haerra, ha diraze eur hastell. Degouezet e oant tost, hep hen gweled, gand ma oa stank ar gwez hag ar struj en-dro dezañ. An nor 'oa digor, hag eh antrejont hep poan. Neuze e weljont e kreiz ar porz eur wezenn-avalou euz ar re gaerra, hag enni, e-touez an deliou, an Aval aour ker kaer ha ker koant. Lugerni a ree evel an heol, hag an evned a gane hag a richane en-dro dezañ. Ar pennher a astennas e zerviedenn war ar hlazenn hag a hejas ar wezenn, ken e kouezas an aval warni. Neuze, gand e wialenn, e reas eur groaz warnañ, ha kerkent e rannas, hag e welas en e greiz eur gontell vihan. Kemer a ra ar gontell, he lakaad en e hodell, ha gand eur groaz all, e serra adarre an aval evel kent. Distrei a reont neuze, ha den ne lavaras ger deze, rag ne weljont den eno.

En distro, e kavjont adarre ar wrahig koz hag a lavaras deze :

« Ahanta ! va mab, greet mad ho-peus ho tro ? »

« Ya 'vad, mamm-goz, ha va bennoz deoh ; emañ an aval ganen. »

« Ma ! it bremañ d'ar gêr en peoh, fin 'zo d'ho poaniou, hag an hini he-deus greet deoh kemend a zroug, a vezo paeet bremañ hervez heh oberou. »

Hag ez ejont adarre en hent.

Pa zegouezjont en Pariz gand an Aval aour, oll dud kêr a zeredas d'o diarbenn, pa glevjont ar vrud, hag ar hleier a vralle hag an trompillou a zone evel pa vije eur gouel braz.

Ar roue koz a oa ken evuruz, kemend a stad ennañ, ma oa prest da beurgoll e benn. An deiz war-lerh, heb gortoz pelloh, e fellas dezañ beza eureujet d'ar briñsez yaouank, an hini<sup>50</sup> ne oa ket ker laouen, ha merh ar roue a oa nebeutoh c'hoaz. Eur pred euz ar haerra a oe greet, ha kalz-kalz a dud a oe pedet. E-pad ar pred, e oa an Aval aour war greiz an daol, ha daoulagad an oll dud a oa warnañ ; kalz a ankounac'hae debri, gand ar blijadur o-devoa o selled outañ.

« Bremañ an Aval aour !... Ranna an Aval aour !... » a lavaras an oll.

« Roit hen din ha m'hen ranno », a lavaras merh ar roue.

« Nann ! nann ! d'ar wreg nevez eo dleet an enor ! »

<sup>50</sup> an hini : pehini, er skrid orin.

Hag e oe tremenet an aval dezi. Med n'oa ket evid dond a-benn da lakaad he hontell ennañ : bep tro e rampe diwarnañ.

« Roit din anezañ », a lavaras neuze ar roue.

Hag e oe roet dezañ. Med kaer en-devoa ober, n'hallas biskoaz hen boulha ivez.

« Tremenet hañ din, pa lavarar deoh, me 'deuio a-benn anezañ », a lavaras c'hoaz merh ar roue.

« Goustadig ! goustadig ! », eme ar pennher ; « roit hañ din, m'ho ped. Me 'zo bet oh hen kerhad, ha n'eus nemedon amañ a hallfe hen ranna. »

Hag e tennas e gontell vihan euz e hodell, hag e rannas an aval êz-braz. Ha kerkent e oe gwelet ar briñsez, merh ar roue, o koueza war lein he hein, rannet he halon evel an aval ; ha ne zavas ken goude.

« Da bep hini hervez e oberou ! » a lavaras neuze ar briñsez all. Ar briñsez-se he-deus gounezet he maro heh-unan, o klask hini ar re all : evel m'oa dleet eo c'hoarvezet ganti... C'hwi, aotrou roue, a gavan eun tammig re goz evidon ; a-hend-all, d'ar pennher eo bet an oll boan ; dezañ eo dleet ivez ar gopr, hag eñ a vezo va fried, ha nann eun all. »

Ma oa jao ha friko a-raog, neuze avad e oe ! E-pad eur mizvez<sup>51</sup> e padas ar festou, ar goueliou, ha dañsou, hag a bep seurt c'hoariou bemdez !

*Me 'oa eur geginerez*

*Am-oa bet eun tamm hag eur bannah,*

*Eun taol kloge war va geno',*

*Hag abaoe n'on ket bet eno.*

*Gand pemp-kant skoed hag eur marh glaz,*

*'Vijen eet da weled warhoaz ;*

*Gand kant skoed hag eur marh brun,*

*'Vijen eet warhoaz ar penn-sun.*

*Kontet gand Frañseza an Ewen, a Bederneq ; 1869.*

---

<sup>51</sup> eur mizvez : eur miz, er skrid orin.

# Mab an hini goz, pe Roue ar pesked

*Eur wech e oa, 'vel ma larer atao,  
Pa vez c'hoant da gonta eur gaozig vihan vrag.*

Eur wech e oa eur pesketaer koz hag en-devoa teir merh hag eur paotr. Paour 'oa, ha n'en-devoa, evid beva, eñ hag e re, nemed ar pezig a denne euz ar pesked a dape. Bemdez eh ee da besketa d'ar mor gand e vag vihan. Dond a eure da vervel, hag ar mab ah ee neuze bemdez da besketa e-leh e dad evid maga e vamm hag e deir c'hoar. Med allaz ! yaouankig 'oa c'hoaz, didalvez ha diwezad ivez eun tammig, ha ne dape kazi netra. Ma oa dienez en tiegez, mui eged biskoaz, hag e teujont da veza gwall-baour.

Pa zistroe d'ar gêr heb netra, ar pez a hoarveze aliez, e veze e hoarezed o c'hoari warnezañ :

« Didalvez ! genaoueg ! on lezel a ri da vervel gand an naon !

Ha beb beure, a-raog ma vije savet an heol :

« Alo ! lancho<sup>52</sup> sav buan ! Kerz da glask peadra da leina !

Mond a ree ar paotrig kêz, aliez heb beza debret tamm. Poania a ree euz e gwelloha, med, allaz ! ne dape kazi netra bepred. Ma oa reuzeudig a-walh.

Eun deiz dreist ar re all, e tapas eur pesk kaer, alaouret oll, hag evel n'en-devoa gwelet biskoaz.

« Va zaolit 'barz ar mor ! » a lavaras ar pesk dezañ.

« Petra ? », eme ar paotr, souezet-mad, « c'hwi a gomz ? »

« Ya 'vad. Med va zaolit 'barz ar mor, pa lavaran deoh. »

« Ola ! ola ! re a vuhez fall am-eus, pell 'zo, gand va hoarezed, ha hirio, pa 'm-eus tapet eur pesk ken kaer, ne vin ket diod a-walh evid hen teurel 'barz ar mor. »

« Va zaolit 'barz ar mor, a lavaran deoh c'hoaz eur wech, ha n'en em gavfet gwaz a ze... Me eo roue ar pesked, ha, mar va laoskit da vond, me ho lakaio da dapoud bemdez kement ha ma karfent a besked. »

Teurel a reas ar pesk 'barz ar mor. Hemañ a zavas e benn war-horre an doru, hag a lavaras :

« Va bennoz dit ! Me 'dalvezo dit kement-mañ. Lavar d'az c'hoarezed penaoz, a-benn eun deiz hag eur bloaz, e teuo tri roue d'o eureuji, roue ar pesked, roue al loened pevar-zroadeg, ha roue an oll lapoused-nij. »

P'en-devoa komzet e-giz-se, ar pesk a yeas kuit, hag ar paotr a chomas pell, souezet-mad, ha digor e henou gantañ. Pa zistroas d'ar gêr, setu e hoarezed da hoari warnezañ :

« Netra adarre ! Da betra out-te mad ivez 'ta ? »

« Tapet em-oa eur pesk euz ar haerra, ha 'vel ma'z eo en em lakaet da gomz ouzin, em-eus laosket anezañ en dour. »

« Ma ! ma ! ken diod ha te n'on-eus gwelet biskoaz ! Ha petra en-deus lavaret dit ? »

« Lavaret en-deus din penaoz, a-benn eun deiz hag eur bloaz, en em gavo amañ tri roue evid hoh eureuji, roue ar pesked, roue al loened pevar-zroadeg ha roue an oll laboused-nij. »

« Ro peoh ! Te eo diota paotr a zo war an douar !

An deiz war-lerh hag an oll deziou goude, e tape ar paotr pesked kement-ha-kement ha ma kare : bep tro ma taole e rouejou, e teue gantañ o leiz. E hoarezed ne ganent ken pouill dezañ ; ar hontrol da ze, stad a veze greet dezañ. Bemdez eh eent en kêr da werza pesked, hag e prenent dillad nevez, ha c'hoaz e tegasent arhant d'ar gêr. Ma teujont, e berr amzer, da veza pinvidig.

A-benn eun deiz hag eur bloaz, setu ma tegouez an tri roue. Ar verh henañ a oe eureujet da roue ar pesked, an eil, da roue al loened pevar-zroadeg ; hag an deirved, da roue an oll lapoused-nij. Ma oe greet teir eured war ar memez tro. Pa oe fin d'ar friko ha d'ar goueliou ha d'ar jabadao, an teir gwreg nevez a gimias diouz o breur, hag eh ejont kuit gand o friejou.

P'o-devoa greet eun tammig hent, e lavaras unan euz ar rouanez :

« Eun dra on-eus ankouaet. »

« Petra 'ta ? », eme ar re all.

<sup>52</sup> lanchoe : fenenant.



« Ober on frezantjou<sup>53</sup> eured d'on breur-kaer. »

« Ya 'vad ! Distroom war on hiz. »

Hag e tistrojont, hag e rojont pep hini e brezant da vab an hini koz.

« Sell aze », eme roue ar pesked, « eur voest, ha pa lavari : "dre vertuz va boest, m'am-bo an dramañ-tra !", kerkent e c'hoarvezo ar pez a houlenni. Hag ouspenn, pa'z-pezo ezomm a zikour n'az-pezo nemed on gervel, hag on kavi e pep reustl. »

« Trugarez, ha va bennoz deoh ! »

Hag eh ejont kuit neuze.

Ar paotr, evel ma oa chomet e-unan, a hoantaas mond da vale bro, gand e voest... Arruoud a ra en Pariz. Evel ne ouie peleh mond da houlenn lojeiz, eh antreas en eun ti, 'leh ma oa unan goz o chom heh-unan.

Ha c'hwi a zo yah, mamm-goz ? », a lavaras en eur antren.

« Jezuz, ma mabig, te 'zo aze ? Brasa da joa a ra din da weled ! » (Soñjal a ree ganti e oa he mab).

An deiz war-lerh ar beure, an hini goz a ya da gavoud ar roue (e-kichenn ar palez e oa o chom), hag a lavar dezañ :

« Erru eo va mab kêz, aotrou roue ! »

« Erru eo ? », eme ar roue.

« Ya 'vad, ha ken terrubl ha gaillard<sup>54</sup> bepred !... Ma karfeh hen kemer da vevel ? Rag ne houlenn nemed labourad. »

« Ya sur. Lavarit dezañ dond ; kavet e vo eul labour bennag da rei dezañ. »

Hag an hini goz d'ar gêr, ha stad enni.

« Lavaret a zo din, va mab, mond da gavoud ar roue d'e balez, hag az kemero da vevel. »

Mond a ra ar paotr an deiz war-lerh ar beure d'ar palez, ha lavaret zo dezañ mond da gavoud ar jardiner.

Bemdez e teue ar roue da vale gand e verh d'ar jardinou. Ma kavas ar jardiner nevez stummet mad, hag e plije kaer dezañ, hag e chome aliez da ziviz gantañ. Ma plije ar jardiner nevez d'ar roue, d'e verh e plije kalz muioh c'hoaz, ha ne skuize ket o selled outañ. Mab an hini goz a welas se prestig, hag e-unan e teuas da gared kement ar briñsez, ma kollas kazi e benn, hag e kouezas klañv-braz ; hag e teuas da di e vamm, pe bepred an hini hen kemere evid he mab. Kaer 'oe klask en-dro dezañ medisined ha sirurjined, ne gwellohae tamm : den n'anaveze e gleñved.

Setu glaharet an hini goz. Mond a ra da gavoud ar roue.

« Siwaz ! aotrou roue, va faotrig kêz a zo skoet klañv, ha n'oar den netra en e gleñved. Aon braz am-eus d'hen koll.

« Lavarit dezañ n'eus forz petra a hoantao euz va falez, hen roin dezañ, rag plijoud a ra ho mab din »

Hag an hini goz prim d'ar gêr, ha da lavared kement-mañ d'he mab.

« O ! nann », eme hemañ, « n'am-bo ket ar pez a houlennin. »

« P'en-deus lavaret ar roue, va mab paour, goulenn hag e weli. »

« Nann, biken ne roio din ar pez a zo red din evid va yac'haad. »

« Eo, sur, mar demañ en e balez ; lavaret en-deus. »

« Eo, en e balez emañ. »

« Petra eo 'ta ? »

« E verh da bried ! »

« Jezuz ! va mab, petra 'lavarez-te aze ? Nann, evid se n'az-pezo biken. »

« Ma ! marteze, va mamm. It bepred d'he goulenn din digand he zad. »

Mond a ra an hini goz da gavoud ar roue.

« Ahanta ! petra a hoanta ho mab ? »

« A ! aotrou roue, ne gredin biken hen lavared deoh. »

« Lavarit hardiz, ha, m'ema 'barz va falez, en-devo sur. »

« Eo, en ho palez emañ, med ne gredin biken. »

<sup>53</sup> on frezantjou : galleg ; on frofou.

<sup>54</sup> gaillard : galleg. freo.

« Lavarit heb aon. »

« Ho merh, aotrou roue ! »

« Va merh ? Ha kollet eo e skiant-vad gantañ ? »

« Mervel a ranko nezue, aotrou roue. »

« Foletr forz ne ran, med evid va merh, n'en-devo ket. »

Hag an hini goz d'ar gêr en eur ouela.

« Ahanta, va mamm ? »

« Allaz, va mab paour, me 'ouie mad. Lavaret en-deus ar roue n'az-po biken e verh. »

« Marteze, va mamm ! Gwelet e vo. »

Dastum a ra ar roue e guzulieren da lavared deze petra a hoarveze.

« Ta ! ta ! », eme ar re-mañ ; n'en em ankeniit ket gand ken nebeud a dra. Lavarit dezañ, m'en-deus c'hoant da gaoud ho merh, e ranko, a-raog, cheñch plas d'ar menez a zo dirag ho kastell hag a harz an heol-sav da bara warnañ. Birviken ne zeuio a-benn d'ober se. »

Degemeret eo an hini goz, ha lavaret dezi lavared d'he faotr penaoz, ma teu a-benn da cheñch plas d'ar menez a zo dirag kastell ar roue hag a harz an heol-sav da bara warnañ, en-devo merh ar roue.

« Jezuz ! emezi, n'eus den er bed hag a hallfe ober se ! »

Dond a ra d'ar gêr en eur ouela, hag e lavar d'he mab ar pezh a houlenner digantañ a-raog kaoud merh ar roue.

« Allaz ! va mabig kêz, biken n'halli ober an dra-ze. »

« Marteze, va mam ! Gwelet e vo. »

Da hanternoz e sav ar paotr, hag eh a da droad ar menez, hag e voest gantañ. Digeri a ra e voest, hag e lavar :

« Dre verrtuz va boest, ma vo kaset ar menez-se ahann, ha vo plên en e leh evel eul leur ! »

Ha kerkent setu eet ar menez kuit.

An deiz war-lerh ar beure, pa zihunas ar roue, e oe souezet o weled an heol en e gambr.

« Petra eo kement-mañ ? », emezañ.

Hag eñ o sevel hag o vond da zelled d'ar prenest : n'oa ken ar menez dirag e balez.

« A ! », a lavaras dezañ e-unan », mab an hini goz a zo unan bennag ! »

Redeg a ra da gavoud e guzulieren.

« Allaz ! », emezañ, « eet eo ar menez kuit, ha setu ma vo red din rei va merh da vab an hini goz ! »

« Nann c'hoaz », eme ar re-mañ. « Lavarit dezañ e ranko bremañ sevel eur hastell aour el leh ma oa ar menez, hag heñvel en pep tra ouz hoh-hini, ha diabarz ha diavêz. »

An hini goz a deuas beure mad da gavoud ar roue, hag a lavaras dezañ :

« Ahanta, aotrou roue, va faotr, avad, a zo eun den ! Setu eet ar menez kuit ! »

« Ya, med bremañ e ranko sevel el leh ma oa ar menez eur hastell aour heñvel ouz va hini, ha diabarz ha diavêz. »

« Jezuz ! penaoz 'raio se, ar paotrig kêz ? »

« Red e vezo dezañ hen ober, m'en-deus c'hoant kaoud va merh. »

Dond a ra an hini goz da gaoud he mab, hag e lavar dezañ petra a houlenner outañ c'hoaz.

« Evid an dro-mañ, va bugelig paour, ez out kollet. »

« Marteze, va mamm ! Gwelet e vo. »

Da hanternoz eh a gand e voest el leh ma oa kent ar menez ; he digeri a ra, hag e lavar :

« Dre vertuz va boest, ma vo amañ eur hastell aour, heñvel en pep tra ouz hini ar roue, ha diabarz ha diavêz ! »

Ha kerkent e oe greet evel ma lavaras.

Pa zavas ar roue, diouz ar beure, e oe souezet-mad o weled ar hastell aour, hag e chomas da zelled outañ, digor e henou gantañ :

« A ! emezañ, red eo rei va merh dezañ ! »

Ma oe greet an eured, eun eured euz ar gaerra, hag eh ejont o-daou da chom d'ar hastell aour.

Plijoud a ree e vab-kaer d'ar roue, hag eh eent o-daou da chaseal asamblez. Tapoud a ree, tapoud a ree a bep seurt loened, kement ha ma kare. Ma oa souezet an oll.

Merh ar roue ne blije ket dezi he fried, hag he-devoa eur hamarad-kleiz a deue d'he darempredi bemdez, pa veze ar roue hag e vab-kaer o chaseal. Ma 'n em glevjont o-daou evid tapoud e zekred digand mab an hini goz.

Eun abardaez ma oa distroet diouz ar chase, karget a hedon, konifled, klujiri ha loened all, evel bemdez, e wreg a lavaras dezañ :

« Jezuz ! va fried, c'hwi, 'vad, a zo eun den ! N'emañ ket ho par war an douar. Red eo e ve eur sorsor bennag a-du ganeoh. Lavarit din ivez penaoz e hallit dond a-benn da ober an oll draou kaer-ze ? »

« Ba ! emezañ, se n'eo nemed eur c'hoari evidon. Me am-eus amañ eur voest, ha pa lavarar : "Dre vertuz va boest !", kerkent e c'hoarvez oll evel ma c'hoantaan. »

« Hag a zo mad ! », a zoñjas. « Red e vo din kaoud ar voest-se. »

Ma lakaas ober eur voest heñvel ouz e hini, hag, e-keid ma oa kousket, e lakaas anezi e-leh eben.

An deiz war-lerh, mab an hini goz a gemer ar voest hag a ya adarre da chaseal, hep soñjal en droug ebed. Med kaer en-devoa lavaret : « Dre vertuz va boest ! », ar gedon hag ar honifled a rede, ar hlujiri a nije, ha netra ne goueze d'an douar.

« Allaz, emezañ, bourdet on ! N'eo ket homañ va boest. »

Ma teujont an deiz-se d'ar gêr hep beza tapet netra. P'errujont, ne gavjont ken ar briñsez.

Homañ, kerkent ha ma veze eet he fried d'ar chase, a zigoras ar voest hag a lavaras :

« Dre vertuz va boest, ma vin kaset pemp-kant leo ahann gand va fried-kleiz, ha ma teuio ganim ar hastell aour ! »

Ha kerkent ar hastell aour, hag an daou-mañ e-barz, evel eur bluenn en avel, a oe kaset pemp-kant leo ahane, ha dalhet gand peder chadenn aour etre an neñv hag an douar.

Pa welas ar roue koz e oa eet kuit e verh hag e gastell aour, e oe droug kaer ennañ hag e lavaras d'e vab-kaer e rankje degas dezañ e verh hag e gastell aour, pe n'oa nemed ar maro evitañ.

Setu ankeniet braz mab an hini goz.

« Penaoz ober, va Doue ? emezañ. Lavaret en-doa din roue ar pesked, pa 'm-bije ezomm a zikour, n'am-bije nemed hen goulenn hag e teuje. Ezomm a-walh am-eus bremañ, a gredan. »

Hag eñ o vond war aod ar mor, ha da lavared :

*« Roue oll besked an dour,*

*Deus prim, ezomm am-eus sikour. »*

Prestig goude, eur peskig aour a vountas e benn er-mêz an dour, hag a lavaras :

« Petra 'zo evid ho servij, mab an hini goz ? »

« Eur hastell aour am-oa euz ar haerra, hag ennañ eur briñsez, va fried, a garen a-greiz va halon ; eur voestig am-oa ivez hag a ree din oll ar peza hoantaen. Allaz ! oll am-eus kollet. »

« Mar demaint eun tu bennag 'barz va rouantelez, e vefont kavet hebdale. »

Hag ar roue da hervel dre o ano kement pesk a zo er mor ha da houlenn digante :

« N'hoh-eus ket gwelet, eun tu bennag, eur hastell aour, hag ennañ eur briñsez kaer ? »

« Nann avad, on roue ! », a lavarent, dre ma tremenent.

Tremenent e oant oll, bihan ha braz : hini ne ouie doare d'ar hastell aour.

« Roue an oll loened pevar-zroadeg en-devoa lavaret din ivez hen gervel pa 'm-bije ezomm :

*Roue 'l loened pevar-zroadeg*

*Ezomm am-eus, deut d'am haved. »*

Ma tegouezas kerkent en e gichenn eul loen ken kaer, ken braz, ma oe spontet.

« Petra 'zo evdi ho servij, mab an hini goz ? », a lavaras al leon.

« Mar demaint eun tu bennag, 'barz va rouantelez, e vefont kavet. »

Hag al leon da hervel dre e ano, peb loen pevar-zroadeg, ha da houlenn digante, dre ma tremenent, ha n'o-devoa ket gwelet ar hastell aour. Hini ne ouie doare dezañ.

« Allaz ! » eme mab an hini goz, « aon braz am-eus e vo red mervel... Med roue an oll loened-nij a chom c'hoaz. Red eo din hen gervel bremañ, rag lavaret en-devoa din ivez e teuje d'am zikour, pa 'm-bije ezomm :

*Roue al loened diouaskell,  
Nij amañ, a-dost pa a-bell ! »*

Ha kerkent en em gavas an Evn-braz :

« Petra 'zo evid da zervij, emezañ, mab an hini goz ? »

Lavared a ra dezañ e zoare.

« Ma ! mar demaint eun tu bennag etre an neñv hag an douar, e vefont kavet hebdale. »

Hag eñ da havel an oll laboused-nij dre o ano, adaleg an erer beteg al laouenanig. Trement e oant oll nemed an erer, hag hini ne ouie doare d'ar hastell aour.

An erer a erruas ivez e-barz ar fin.

« Petra eo dit beza ken diwezad-se ? », eme ar roue. « Peleh 'oas-te chomet ? »

« Me 'oa chomet da heolia war lein ar hastell aour, kaerrañ tra en-deus gwelet biskoaz lagad evn. »

« O klask hennez, end-eeun, ez om. Med n'az-teus ket gwelet ivez eur priñs hag eur briñsez, ha gante eur voest kaer ? »

« Eo, sur. Ar voest a vez bepred gand ar briñsez, ha n'he huita nepred, ha, pa'h a da gousked, he laka dindan he fenn. »

« Ar voest-se eo red din da gaoud. »

« Med penaoz he zapoud ? »

Ma oe lavaret e vije kaset eur raz hag eul logodenn evid he zapoud euz a-zindan penn ar briñsez. Pa vije kousket ar briñsez, al logodenn a dremenje teir gwech he lost dre he genou ; an deirved gwech e savje he fenn, ha neuze ar raz a dapje ar voest, ha kuit prim dre ar siminal.

« A zo mad ! », eme an oll. « Evel-se 'vo red ober. Med penaoz mond d'ar hastell aour ? »

« War gein an erer, a oar an hent. »

« Se a zo gwir. »

War-dro hanternoz, e tiskennas an erer war ar hastell aour.

Ar raz hag al logodenn a ziskennas der ar siminal e kambr ar briñsez. Kousket mad e oa. Trement a ra al logodenn he lost dre he genou. Ne ra van ebed evid ar wech kenta. Trement a ra eun eil gwech. Ar briñsez a ar : « *peu ! peu ! peu !* ». Trement a ra eun deirved gwech. Ar briñsez a zav he fenn hag a lavar :

« Petra eo ? »

Ar raz a dap ar voest, ha prim, prim er-mêz o-daou dre ar siminal.

Degaset eo e voest da vab an hini goz, a oa o hortoz war an aod, hag eñ ankeniet-mad. Kerkent he digor hag e lavar :

« Dre vertuz va boest, ra vo degaset ar hastell aour, ar briñsez hag ar priñs he mignon, el leh ma oant a-raog ! »

Ha kerkent e oe greet evel ma lavaras.

« Pe boan rei bremañ d'ar briñsez ha d'he fried-kleiz ? »

Pep hini a lavare e her. Unan a lavaras :

« Lakait nao zargas e-pad eiz deiz en eur gambr, heb rei tamm deze da zebri, hag a-benn an amzer-ze, lakait gante ar briñsez hag he fried-kleiz. »

Ma oe greet evel-se.

An targizier, prest da vervel gand an naon, a gouezas warne evel diaoulou kounnaret, hag o lakaas a-beziou.

Mab an hini goz a yeas neuze da vale bro, hag abaoe n'am-eus ket bet euz e gelou ; med, evel m'en-devoa kavet e voest, n'on-eus ket ezomm da gaoud nehamant gantañ.

# Louizig, mab ar glaouer, fillor da Roue Frañs.

*Red eo ma ouifeh  
Penaos eur wech,...*

Mab eur roue en em gollas eun deiz o chaseal en eur hoad braz. E-unan e oa chomet, ha ne gave hent ebed er hoad. Setu-eñ nehet-braz, rag an noz a oa deuet. Dre forz bale, e welas eur sklêrijenn pell dioutañ. Mond a reas war-zu ar sklêrijenn-ze, hag en em gav e-kichenn lochenn eur glaouer. Antren a ra, hag e wel eun den ko e-unan e-tal an tan. Hemañ a spontas, o weled eun aotrou gwisket ken kaer oh antren en lochennig paour.

« Na spontit ket, va den mad », eme dezañ ar priñs, « rag n'em-eus droug ebed d'ober deoh. Me 'zo en em gollet 'barz ar hoad o chaseal, serret an noz warnon, ha m'ho-pefe ar vadelez d'am loja evid eun noz<sup>55</sup>, e rafeh plijadur din. »

« Ya, sur, aotrou ; med gwall fall en em gavfet amañ ; va gwreg a zo kousket, en poan a vugale, ha n'on-eus na gwele na boued da rei deoh, nemed kousked a rafeh war ar solier, ha debri euz on bara heiz. »

« N'ho-pet ket a neh gand kement-se, me 'raio gand ar seirt a vo. »

E-pad an noz, e wilioudas gwreg ar glaouer euz eur paotr bihan : an naved bugel e oa deze. Diouz ar beure, pa ziskennas ar priñs diouz ar solier, hag eñ plouz oll, eh eas da weled gwreg ar glaouer a oa kousket war ar plouz, e traoñ al lochenn.

« Jezuz ! gwreg paour, » a lavaras pa welas e pe stad e oa eno, « eun druez eo ho kweled evel-se. »

Hag e roas arhant evid mond da glask bara gwenn, kig, ha gwin, ha kement a oa ezomm.

« Me, emezañ, a vo paeron d'ar bugel-mañ. Bez' hoh-eus eur veronez ? »

« N'on-eus ket, sur, aotrou kêz ; on naved bugel eo hemañ, hag evel ma'z om paour, on-eus poan a-walh o kavoud komperien ha komerezed. »

« Ma ! me 'gavo ivez eur gomer, hag a-benn tri deiz amañ e vo ar vadeziant. »

Ar glaouer koz a yeas neuze da lakaad ar priñs war an hent mad, hag a-raog mond kuit, hemañ a lezas 'barz al lochenn an oll arhant a oa gantañ. Tri deiz goude, e oe eur vadeziant euz ar gaerra e bourk o farroz ; markizez Rozambo a oa komer gand ar priñs. O-daou e rojont aour hag arhant d'ar glaouer koz, leiz e oll godellou ; ar priñs a lavaras skoliata mad ar bugel hag a roas eul lizer evid beza degaset dezañ gand e fillor da balez ar roue, pa hallje lenn ar pezh a oa merket warnañ.

Ar glaouer koz hag e wreg a oa pinvidig bremañ, hag e savjont eun ti kaer e-kreiz ar hoad. Ar paotr a oe kaset d'ar skol, pa oe deuet en oad da vond, hag e teske ar pezh a gare. Prestig e hellas lenn al lizer, hag e welas neuze penaos e oa e baeron mab d'a'r Roue Frañs, hag e oa lavaret dezañ mond d'hen kavoud en e balez.

Prena 'ra e dad dezañ eur marh kaer, hag e lavar dezañ diwall mad da ober hent pe gand tort, pe gand kamm, pe gand kakouz. Mond a ra en hent, hag eñ joauz-braz. Med n'oa ket eet pell, pa zegouezas gantañ eun tort.

« Peleh eh ez-te evel-se, Louizig, fillor a'r Roue Frañs ? », a lavaras an tort dezañ.

« Da gavoud va faeron. »

« Me a yelo ganit ivez. »

« Nann ! nann ! »

« Eo ! eo ! »

Hag e lamp an tort war dalier e varh. N'hell ket en em zizober dioutañ, hag e tistro d'ar gêr. Daou zeiz goude, eh a adarre en hent. Ma tegouez gantañ eur hamm.

« Peleh eh ez-te evel-se, Louizig, fillor a'r Roue Frañs ? », a lavar dezañ ar hamm.

« Da weled va faeron. »

« Me a yelo ganit ivez. »

« Ne deui ket ! »

<sup>55</sup> eun noz : eun nozvez.

Hag eñ da lakaad e varh d'an daoulamm. Med kaer en-devoa ober, ar hamm a oa bepred kerkent e penn e varh ; ma rank adarre dostrei d'ar gêr. E dad, p'hen gwel :

« Petra, hag out distroet adarre ? P'emañ kont 'vel-se, e chomi er gêr. »

Louizig paour a ya da ouela ouz e vamm. Kement a reont o-daou o pedi ar glaouer koz, ma lez anezañ da vond c'hoaz ; med an dro-mañ e ro dezañ e goz varh glaouer en-devoa ouspenn ugent vloaz.

« N'eus forz, emezañ, mond a refom eun tu bennag, rag 'vid an dro-mañ ne zistroin ket. Alo ! loen paour, eom da balez a'r Roue Frañs, da weled va faeron. »

War-dro an abardaez, pa oa o vond e-biou eur hoad braz, e welas war eur wezenn eur bluenn a sklêrijenne evel an heol. Ma chom da zelled, estonet.

« Daoust, emezañ, petra eo ar bluenn vuzuduz-se ? Moarvad eo eur bluenn euz lost paun priñsez he bleo aour, a zo o chom en he hastell arhant, hag am-eus klevet komz anezi kel liez a wech. Red eo din êsa he zapoud. »

« Lezit ar bluenn-ze, va mestr, hag heuillit hoh hent, » eme ar marh.

« Eun dra ken kaer, ken burzuduz ! n'he lezin ket avad. »

Hag eñ o tiskenn diwar e varh, o pignad war ar wezenn hag o tapoud ar bluenn. He lakaad a ra en e dok, ha setu-eñ da vond adarre, kontant ja joauz. Degouezoud a ra e-tal eur feunteun.

« Sell aze, emezañ, eur feunteun hag a zo enni dour sklêr ! Red eo din diskenn evid eva eur banne, rag sehed am-eus. »

E-pad ma oa daoulinet war mên ar feunteun, oh eva, eur hakouz a deu 'dreg e gein, a ro dezañ eun taol bount hag hen diskar en dour ; ha kerkent e lamm war ar marh, ha kuit d'an daoulamm. Lizer e baeron en-doa tapet digand Louizig.

« Ma ! n'em-eus chañs ebed ! », eme Louizig, pa oe en em dennet euz ar feunteun. « Setu eet va lizer ha va marh gand al loen fall-ze ! Penaoz ober bremañ ? Evid d'ar gêr ne zistroin ket. Evuruzamant eo chomet va fluenn ganen. Ma feiz ! derhel a rin da vond war va zreid, hag eun deiz bennag eh erruin ivez. »

Erruoud a ra ar hakouz e Pariz. Mond a ra raktal d'ar palez, hag e houlenn gweled mab ar roue.

« Amañ, va den mad », eme ar porzier, « n'antreer ket evel-se. Piou oh da genta ? »

« Louizig, fillor mab ar roue. »

Lavaret eo d'ar priñs 'zo eun den o houlenn hen gweled hag a lavar beza fillor dezañ.

« Grit dezañ dond dioustu », eme ar priñs.

Kaset eo ar hakouz da gavoud ar priñs, hag e ro dezañ e lizer.

« Ya », eme ar priñs, « anavezoud a ran al lizer-mañ ; med, va fillor paour, 'vel ma'z out, ha pe stumm az-teus ! Med n'eus forz, va fillor out bepred, ha ra vi deuet mad. »

Setu ma oe greet kribad ha gwalhi ar hakouz, roet dezañ dillad kaer, ha setu c'hwez ha lorch ennañ, m'ho ped da gredi, o vale dre ar palez hag ar jardinou.

War-dro eur pemzeg deiz goude, eh erruas ivez Louizig e Pariz. Mond a ra da houlenn beza kemeret da vevel er palez. Eur paotr-marchosi a oa bet kaset kuit, an deiz a-raog, hag ez eo kemeret en e leh. Eur joa vraz en-doe o kavoud e varh koz er marchosi.

« Setu-te aze 'ta, va marh paour ? »

« Ya, sur, va mestrig, med allaz ! c'hwi ho-po da ober bremañ ha se abalamour n'hoh-eus ket sentet ouzin hag hoh-eus dastumet war an hent, daoust d'am ali, ar bluenn euz lost paun priñsez he bleo aour, a zo o chom en he hastell arhant. Ar bluenn-ze a vo kirieg d'hoh oll boaniou hag ankeniou ; med me ho sikouro euz va ggwelloha, ha mar sentit ouzin e pep tra, marteze e teufom on-daou a-benn da 'n em denn euz a bep poan ha labour diêz, ha da drehi war ar hakouz milliget. »

Ar hakouz en-devoa anavezet Louizig, hag a oa morheduz, hag a glaske an tu d'e goll.

Louizig a oa eur paotr-marchosi euz ar ggwelloha hag, abaoe ma oa erruet er palez, ar hezeg a oa kalz lartoh ha flourroh ha yah ha gaillard bepred. E bluenn vuzuduz a oa gantañ bepred, ha beb noz he lakae da sklêrijenna ar marchosi evid galloud pleal gand e loened. Ar hakouz a welas eun noz ar sklêrijenn gaer-ze, ha kerkent ez eas da gavoud ar roue, hag e laras dezañ :

« Aotrou roue, ho paotr-marchosi nevez ne vanko ket da lakaad an tan en ho palez ; beb noz e vez goulou gantañ er marchosi, ha koulskoude hoh-eus divennet mad kement-se. Me 'gred e rafeh mad hen kas kuit. »

« Hen kas kuit ! Eñ, ggwelloha paotr-marchosi am-eus bet biskoaz ! Nann avad ! Ha neuze, red e vo din gweled va-unan. »

« N'hoh-eus nemed dond amañ er prenest hag e welfet. »

« Jezuz ! kaerra da sklêrijenn ! », eme ar roue. Kement-mañ n'eo ket naturel ; red eo din mond da weled. »

Hag e tiskenn kerkent, hag ez a goustadig beteg dor ar marchosi. Med Louizig a glevas eun trouz bennag, hag a glenkas prim ar bluenn ; ha kerkent setu eun deñvalijenn vraz.

« N'eus forz », eme ar roue, « warhoaz da noz me a daolo pled mad, hag a zegouezo warnañ pa zoñjo an nebeuta, rag red eo din gouzoud petra eo ar sklêrijenn vurzuduz-se. »

An deiz war-lerh da noz e oa ar roue en e brenest, ha kerkent ha ma welas ar sklêrijenn, e tiskennas prim, e treuzas ar porz goustadig, goustadig, ha gand eun taol troad e tigoras dor ar marchosi, na oa ket serret kloz. Louizig n'en-devoe ket an amzer da guzad ar bluenn, hag a chomas souezet da zelled ouz ar roue.

« Petra eo ar bluenn gaer-ze ? », eme ar roue.

« Aotrou roue... Aotrou... »

« Lar din prim, petra eo ar bluenn-ze ? »

« Aotrou roue... eur bluenn eo euz lost paun priñsez he bleo aour, a zo o chom en he hastell arhant. »

« Mad ! mad ! pell 'zo a-walh ez on o klask kaoud ar bluenn-ze ! »

Hag he hemeras, hag he hasas gantañ ; ha beb noz e sklêrijenne ganti e balez hag e jardinou.

Louizig en-devoe keuz braz d'e bluenn. E varh a lavaras dezañ :

« Allaz ! bremañ eh a da gomañs on labouriou hag o foaniou ! »

Eur pennadig goude, ar hakouz a lavaras d'ar roue :

« Ma ouifeh, ma faeron, petra en-deus laret ar paotr-marchosi ! »

« Ha petra 'n-deus laret ? »

« Petra ? Laret ez eo den da vond da gerhad deoh priñsez he bleo aour, a zo o chom en he hastell arhant ! »

« Ha gwir ? »

« Ya, gwir a-walh ! »

« Ma ! grit degemenn dezañ dond da gomz ganin. »

Degemennet eo da Louizig dond da gomz ouz ar roue.

« Laret hoh-eus, am-eus klevet, beza den da vond da gerhad din priñsez he bleo aour, a zo o chom en he hastell arhant ! »

« Biskoaz, ma roue, n'em-eus laret kement-se. »

« Eo, laret hoh-eus, ha red e vo deoh ober. »

« Penaoz, ma Doue, aotrou roue ! »

« Red e vo deoh ober, pe n'eus nemed ar maro evidoh ! »

« Roit din bepred eun noz da zoñjal. »

« Ya, med warhoaz ar beure e vo red deoh mond en hent. »

Dond a ra Louizig da gonta e zoare d'e varh, ha da ouela outañ.

« Laret em-oa deoh », eme ar marh, « lezel ar bluenn-ze ! Med ar pez on-eus da ober bremañ, eo labourad on-daou evid en em denn a boan euz on ggwelloha. Selaouit mad, ha grit oll piz evel ma larin deoh. It da gavoud ar roue, ha lavarit dezañ rei deoh samm tri vul a vara, tri a gig ha tri a vrignon, ha me evid ho tougen. Dwiezatoh, e larin deoh petra ho-po da ober gand at boued-se. »

Mond a ra da gavoud ar roue, hag ez eo roet dezañ ar pez a houlenn.

An deiz war-lerh ar beure, Louizig en em laka en hent, gand e varh hag an tri vul sammet. Emberr en em gavjont en eur hoad braz, 'leh ma teuas a bep seurt loened gouez en-dro deze, leoned, bleizi, mohgouez, lern, ha re all. Hga e yudent hag e skrignent o dent.

« Dirog prim seier », a laras ar marh, « ha taol kig en-dro dit ! »

Hag eñ da deurel kig du-mañ, du-hont ; hag al loened da lampad, ha da hoari gand o dent ! P'o-devoe debret o gwalh, eur pikol leon a deuas da gavoud Louizig hag a lavaras dezañ :

« Va bennoz dit, Louizig, fillor a'r Roue Frañs ! Me 'zo roue war an oll loened pevar-zroadeg, ha ma'z pe biken ezomm ahanon pe euz va re, n'az-po nemed goulenn sikour, hag e kavi. »

Pelloh, e tegouezjont e-tal eur stank vraz a oa goloet a wizi. Ma teujont oll war o lerh, oh ober : *wai, wai, wai !*

« Taol bara en-dro dit ! », eme ar marh.

Hag eñ da stlepel bara du-mañ, du-hont, hag ar gwizi da zebri. P'o-devoe debret o gwalh, ar vrasa a deuas da gavoud Louizig, hag a lavaras dezañ :

« Va bennoz dit, Louizig, fillor a'r Roue Frañs ! Me eo rouanez ar gwizi, ha pa'z-po ezomm ahanon pe euz va re, n'az-po nemed goulenn, hag e kavi sikour. »

« Hag a zo mad ! », eme Louizig. 'Vid pa ve an dud 'eneb din, al loened bepred a zo a-du ganen. »

Pelloh, o tremen dre eur hoad, e teuas en-dro deze eur bagad merien, braz evel gedon, ha darn evel deñved ; ha ma oa aneze kement, kement ma n'hallent ket bale.

« Taol brignon bremañ, ha prim ! », eme ar marh.

Hag eñ da zizaha brignon, hag ar merien da zebri ! P'o-devoe debret o gwalh, ar vrasa aneze a deuas da gavoud Louizig, hag a lavaras dezañ :

« Va bennoz dit, Louizig, fillor a'r Roue Frañs ! Me eo rouanez an oll verien. M'az pe biken ezomm ahanon hag euz va re, n'az-po nemed goulenn sikour, hag e kavi. »

Setu-int adarre en hent, evid mond pelloh. Degouezoud a reont neuze demdost da aod ar mor.

« Bremañ », eme ar marh, « ez afom eur pennad amzer an eil heb egile. Eur vag a gavi en aod ha da gaso d'an enezenn 'leh m'emañ ar hastell arhant, hag ennañ priñsez he bleo aour. Pa vi o tond war trêz an aod, e weli eur pesk bihan er-mêz an dour, digor e henou gantañ, ha prest da vervel. Laka ar pesk bihan 'barz an dour, rag ezomm az-po anezañ, eun deiz... Va lez amañ bremañ da beuri ha, pa retorni, am havi. »

Kimiadi a ra Louizig diouz e varh.

Pa oa o vond war trêz an aod, e wel ar pesk bihan. Digor 'oa e henou gantañ, ha poan dezañ fiñval c'hoaz eun tammig e lost. Hen tapoud a ra goustadig en e zorn hag hen laka 'barz an dour, al loenedig Doue. Ar peskig a zav neuze e benn war-horre an dour, hag a lavar :

« Va bennoz dit, Louizig, fillor a'r Roue Frañs. Ma'z pe biken ezomm euz va zikour, n'az-po nemed goulenn roue ar pesked, hag en em gavo dioustu. »

« Hag a zo mad ! », eme Louizig.

Mond a ra pelloh eun tammig, hag e wel eur vag vihan. Mond a ra e-barz, ha kerkent eh a kuit anezi heh-unan, hag en em gav hebdale en eun enezenn. Gweled a ra eno eur hastell, eun dra euz ar haerra. En arhant oll e oa, ha, pa bare an heol warnañ, n'halle den selled outañ. An nor a oa digor frank, hag eh antre : mond a ra e-barz ar gegin.

« Demad deoh, priñsez », a lavar d'eur plah kaer a oa eno.

« N'eo ket me ar briñsez », a lavar homañ, « n'on nemed he heginerez. »

« Eur plah, ker koant ha c'hwi, keginerez ? »

Gweled a ra neuze eur plah a gambr, koantoh c'hoaz, hag e lavar dezi ivez :

« Demad deoh, priñsez. »

« N'eo ket me ar briñsez », a lavar homañ ivez, « n'on nemed he flah a gambr. »

« Jezuz ! pe vuzud eo 'ta ar briñsez-se ! »

Renet eo da gambr ar briñsez. Ken kaer, ken lugernuz e oa an oll draou eno, ma n'halle ket derhel e zaoulagad digor.

« Demad dit, Louizig, fillor a'r Roue Frañs ! », eme ar briñsez dezañ, evel m'hen gwelas. « Te 'zo deut amañ d'am herhad, me 'oar se. Med an dra-ze, ma faotr kêz, n'eo ket êzet... Med koaniom bepred. »

Ma reas eno eur goan evel n'en-devoa greet biskoaz.

« C'hoariom bremañ eur barti kartou », a lavar ar briñsez, pa oe echu koan.



Setu-int 'ta o c'hoari kartou ; Louizig a golle bep taol, bep taol. Ma teu c'hoant kousked dezañ, hag e houlenn mond d'e wele.

« Penaoz e kredez komz a gousked ? », emezi. « N'eo ket o kousked e teui a-benn d'am zenna ahann ! Deus ganen, ma tiskouezin dit al labour az-teus d'ober evid an noz-mañ. »

Hag hen kasas neuze en eur prad 'leh ma oa teir stank, unan leun a zour, eun all leun a fank, hag an deirved goullo. Hag e lavaras dezañ :

« Sell amañ teir stank, unan leun a zour, eun all a fank du, hag an deirved goullo. Red e vo dit, a-benn warhoaz ar beure, dizehañ an hini genta, ha kas an dour hag ar pesked 'barz an deirved, ha lemel ar fank oll euz an eil, ha kement-se gand ar grogenn vrinig-mañ. »

Hag e roas dezañ eur grogenn vrinig, hag eh eas kuit neuze.

Setu nehet-braz ar paotr Louizig.

« Penaoz ober ? », emezañ. « Daoust piou a hallfe va zikour el labour-mañ ? Rouanez ar gwizi, marteze. Red eo din he gervel, da weled :

*Dre an êr pe dre an dour,*

*Rouanez ar gwizi, deut d'am zikour !*

Eur pennadig goude, e klevas eun trouz braz a ziouaskell a-uz d'e benn, hag e tiskennas gwizi 'leiz ar prad.

« Petra 'zo 'vid ho servij, Louizig, fillor a'r Roue Frañs ! », a houlennas ar rouanez digantañ.

Hag e lavaras dezi al labour a oa d'ober a-benn an deiz war-lerh ar beure.

« Mar n'eo nemed se », emezi, « n'hoh-eus ket ezomm da nehi. »

Neuze e lavaras d'ar gwizi a oa deut ganti, petra 'oa d'ober. Ha setu-int da labourad oll, pep hini euz he ggwelloha, ma oe greet al labour pell a-raog an deiz.

Pa deuas ar briñsez, da zav-heol, e oe souezet, m'ho ped da gredi.

« Mad eo kement-mañ », emezi, « eom bremañ da zijuni, rag naon a dleit da gaoud. »

Goude dijuni, e tremenjont an deiz o vale dre ar hastell hag ar jardinou. Deuet ar houlz, e koagnjont adarre asamblez, ha goude en em lakajont adarre da hoari ar hartou. Ma krogas evel an deiz a-raog, ar c'hoant kousked en Louizig, hag e houlennas mond d'e wele.

« N'eo ket greet al labour oll c'hoaz », eme neuze ar briñsez. « Deut ganen, ma tiskouezin deoh petra ho-po d'ober fenez. »

Hag hen kasas da zolier ar hastell, 'leh ma oa eur pikol bern ed, a deir greunenn, gwiniz, kerh hag heiz, hag e lavaras dezañ ;

« Setu aze eur bern ed a deir greunenn, gwiniz, kerh hag heiz, hag e vo red deoh, a-benn an deiz, lakaad pep seurt greun en e vern, heb ma vo unan a eur seurt all en hini an tri bern. »

Hag ez eas kuit neuze.

« Sell amañ 'vad eul labour ! », eme Louizig dezañ e-unan. « Ha piou a hallfe a-walh va zikour er pleg-mañ ? Rouanez ar merien, sur ! »

*Sikour, rouanez ar merien !*

*Sikour ! Selaouit va fedenn.*

Ha kerkent e tegouezas merien, ken a oa goloet leur ar solier.

« Petra 'zo 'vid ho servij, Louizig ? », a lavaras rouanez ar merien.

Konta 'ra dezi e zoare.

« Na nehit ket », emezi, « kement-se 'vo greet hebdale. »

Hag ar merien da labourad, ha d'ober tri bern.

P'erruas ar briñsez, da zav-heol, e oa fin deze pell a oa.

« Greet eo al labour ? », emezi.

« Ya, sur, priñsez. »

« Ha greet mad ? »

« Sellit hoh-unan. »

Hag hi o kemer eun dornad, daou zornad, tri dornad euz pep bern, hag hi da zelled piz. N'oa netra da lavared.

« Mad ! », emezi. » Eom bremañ da zijuni. »

Ma tremenjont adarre an deiz-se o vale asamblez, beteg koan. Debret koan, pa oant o c'hoari ar hartou, e houlennas adarre Louizig mond da gousked.

« C'hoaz zo labour d'ober », eme ar briñsez. » Deut ganen, ma tiskouezin deoh. »

Ma tremenjont dre ar gegin, ha Louizig, o tremen, a dapas hag a zegasas gantañ eur harter leue a welas eno war an daol. Hen dastum a ra ar briñsez e kaoued eul leon n'en-devoa bet tamm da zebri tri deiz a oa ; alhweza 'ra an nor warnañ, hag eh a kuit, en eur lavared :

« Warhoaz ar beure e teuin da weled penaoz 'vo ar bed ganeoh ! »

Louizig ne goll ket e benn ; teurel a ra ar harter leue d'al leon, hag e lavar prim :

*D'am zikour, roue 'l loened !*

*D'am zikour, pe e vin debret !*

Ha kerkent e tegouez roue al leoned, hag e tivenn d'al leon a oa 'barz ar gaoued ober droug ebed da Louizig. A-raog mond kuit, e lavar c'hoaz da hemañ :

« Bremañ e larfet d'ar briñsez 'vo red dezi mond ganeoh, ha kaer he-devo lared deoh chom c'hoaz, n'ho-po netra d'ober ken nemed pourmen ganti ha kemer ho plijadur ; na zelaouit ket he homzou kaer. »

An deiz war-lerh, da zav-heol, pa deuas ar briñsez, souezet braz e oe o weled Louizig o c'hoari gand al leon 'barz ar gaoued, evel gand eur hi.

« Peseurt den eo hemañ 'ta ? », a lavaras dezi heh-unan. « Eom da zijuni », a lavaras, evel an deizioù all.

« Nann ! », eme Louizig. « Bremañ e teufet ganen, p'eo greet an oll labour. »

« Ba ! chomit ganen amañ ; dimezet e vefom an eil d'egile, hag on-bo an oll blijadurezioù en on hastell kaer. »

« Nann, nann ! greet am-eus al labour, ha c'hwi, dalhit d'ho ker, hag eom, hebdale, pelloh. »

« Ma ! roit din amzer bepred da zerr dorjoug va hastell, ha da zegas ganen va alhwezioù. »

Serri a ra an oll dorjoug, lakaad an oll alhwezioù en he godell, ha neuze eh eont d'an aod, 'leh ma oa bepred bag vihan Louizig. Antren a reont 'barz ar vag, hag e berr amzer e oent rentet en tu all d'ar mor. Med ar briñsez, heb goud da Louizig, he-devoa taolet alhwezioù ar hastell arhant 'barz ar mor. P'errujont en aod, e oa eno ar marh koz ouz o gortoz.

« Laka ar briñsez », emezañ, « a-raog dit, war an dibr, ha te 'vo war an talier, 'vid n'halla ket mond kuit. »

Pa welas ar roue koz ar briñsez, kaer evel ma oa, e kollas e benn, hag e felle dezañ heh eureuji raktal.

« Goustadig ! », emezi ; « pa ho-po degaset din amañ va hastell arhant, evid ober mez d'hoh hini. »

Setu nehet ar roue koz. Penaoz degas eno kastell ar briñsez ?

« Ba ! » eme ar hakouz, « ar paotr marchosi, p'en-deus degaset ar briñsez, a zegaso ivez he hastell, 'michañs ! »

Setu goulennet Louizig da vond da gavoud ar roue, ha lavaret dezañ e rankje degas kastell arhant ar briñsez, pe n'oa nemed ar maro evitañ. »

« Penaoz, va Doue, aotrou roue, 'oufen-me ober eun dra evel-se ? »

« A ! n'eus ket da lared, red e vo deoh ober, pe vervel. »

« Ma ! esa 'rin bepred. »

Dond a ra Louizig paour da gavoud e varh koz, hag eñ trist : konta 'ra dezañ petra 'houlenn a-nevez ar roue.

« N'om ket c'hoaz e penn on foaniou », eme ar marh. « Kerz da gavoud ar roue ha lar dezañ e vo red dit kaoud diou vatimant, unan karget a gig hag a vara, hag eun all goullo evid lakaad ar hastell. »

Roet eo dezañ an diou vatimant, 'vel m'o goulenn, hag eh a kuit. Pa'h erru en enezenn 'leh ma oa ar hastell arhant, e oa daou leon oh en em ganna, c'hoant deze d'en em zebri gand an naon o-devoa. Teurel a ra deze eun ejen, ha setu-int da zebri, ha fin d'ar hann. P'o-devoa debret o gwalh :

« On bennoz dit », emeze, « Louizig, fillor a'r Roue Frañs ! E oam o vond da 'n em zebri amañ, ma ne vijes ket deuet d'on zikour. Ma'z-pefe ezomm biken a zikour, goulenn, hag eh errufom. »

« Ma ! loened paour, ezomm a-walh am-eus a-vremañ. Me 'zo degaset amañ gand a'r Roue Frañs, da gerhad dezañ kastell arhant ar briñsez he bleo aour, ha penaoz e teuin a-benn d'ober se, mar n'am-be sikour diganeoh ? »

« Ya, ya, ni ho heuillo hag a raio se evidoh, n'ho-pet morhed. »

Hag an daou leon da redeg d'ar hastell, d'e zihrwienna diwar ar rohell 'leh ma oa, ha d'e zegas d'ar vatimant.

Eur pennadig goude, e oe souezet ar roue koz eur beure, o weled 'vel ma oa kaer ha lugernuz an amzer. Ma'z eas d'e brenest.

« Ola ! », emezañ, « setu degouezet kastell ar briñsez he bleo aour ! »

Hag eñ raktal da gavoud ar briñsez :

« Setu deut ho kastell, priñsez ! Jezuz ! 'vel m'eo kaer, pa bar an heol warnañ ! Bremañ 'vefom eureujet. »

Hag e lampe hag e tañse ar roue koz gand ar joa.

« Goustadig ! », eme ar briñsez. « Ar hastell a zo deut, hen anavezoud a ran ; med an alhweziou ? N'em-eus ket an alhweziou ha na me na den ebed n'antreo ennañ biken ken a vo kavet din an alhweziou. »

« Med peleh emaint ? »

« Siwaz ! o treuzi ar mor, ez int kouezet diganen e-barz, hag em-eus aon vraz na vezint kavet morse ! »

Setu glaharet ar roue koz, e-kreiz e joa vrasa.

« Ha penaoz », emezañ, « dond biken e-benn da gavoud an alhweziou-ze ? »

« Evidon-me », eme ar hakouz, « ne welan nemed an hini en-deus degaset deoh ar briñsez hag he hastell, a vefe den da zegas ivez an alhweziou. »

« Gwir eo », eme ar roue ; « degemennit dezañ dond d'am havoud prim. »

Degemennet eo da Louizig. Setu-eñ adarre dirag ar roue.

« Degaset e-teus din, va faotr, ar briñsez hag he hastell ; med an alhweziou ? Red eo kaoud an alhweziou evid mond e-barz. »

« Hag emaint peleh ? »

« Ar briñsez o lezas da goueza 'barz ar mor, pa oa o tond amañ, hag e vo red dit o havoud hag o degas din. »

« Ha penaoz e fell deoh e rafen eun dra evel-se ? »

« A ! n'eus ket da lared, red e vo dit o degas din, pa n'eus nemed ar maro evidout. »

Dond a ra Louizig adarre da gavoud e varh, hag e lavar dezañ ar pez a houlenn ar roue.

« Ma ! me a yelo ganit. Goulenn va zamm a aour hag a arhant, ha, war an hent, ro aneze, a-zornadou, da gement paour a weli. Pa vi degouezet war an aod, galv ar pesk bihan az-teus saveteet e vuhez dezañ : hennez da lemo a boan, ar wech-mañ.

Mond a reont o-daou war-zu ar mor. Degouezet war an aod, Louizig a lavar :

*Roue an oll besked a'r mor,*

*Dered, dered prim d'am zikour !*

Kerkent ar pesk bihan a zav e benn war horre an dour, hag a lavar :

« Petra 'zo evid da zervij, Louizig, fillor a'r Roue Frañs. »

« Ato, rouanez he bleo aour he-deus lezet alhweziou he hastell arhant da goueza e foñs ar mor, hag a zo laret din e rankin o degas dezi, pe n'eus nemed ar maro evidon. »

« Ma ! bez dineh, ha mar demaint eun tu bennag 'barz va rouantelez, e vezint degaset dit amañ hebdale. »

Ar pesk bihan, hag a oa roue oll besked ar mor, a splujas neuze dindan an dour, hag a halvas e re, pep hini dre e ano, hag a houlennas digante ha n'o-devoa ket gwelet eun tu bennag alhweziou kastell priñsez he bleo aour.

Tremenet e oant oll dirazañ, ha hini aneze n'en-devoa gwelet an alhweziou. N'oa nemed ar wrah n'he-devoa ket respontet pa oe galvet.

« Peleh eo chomet adarre ar wrah ? », eme ar roue. » Honnez a vez bepered war-lerh. »

Emberr eh erruas ivez ar wrah, tremenet ganti he fenn en eun organell, hag o tenna eun druillad alhweziou war he lerh.

« Erru 'ta, gwrah ! Peleh 'oas-te chomet adarre ? »

« E oan o tond buan, pa welis e foñs ar mor an traou kaer-mañ, hag e soñjis ober plijadur deoh o tegas aneze ganen, va roue. Sellit petra int. »

« Alhweziou kastell ar briñsez he bleo aour ! », a lavaras ar roue, kerkent ha m' o gwelas.

Hag o hasas timad da Louizig, a oa o hortoz war an aod.

Roet eo an alhweziou d'ar briñsez, hag e tigor he hastell. Jezuz ! an traou kaer a oa eno !

« Bremañ, vad, priñsez », eme ar roue, « 'vo red eureuji ! »

« Gand plijadur », emezi ; « greet hoh-eus oll kement am-eus c'hoantaet. Ha koulskoude, eun draig am-eus c'hoaz da houlen diganeoh a-raog ; med se ne vo nemed eur c'hoari d'an hini en-deus gallet va degas amañ gand va hastell, ha kavoud din va alhweziou e foñs ar mor. »

« Petra eo ? Lavarit », eme ar roue.

« Me, roue, n'am-eus nemed triweh vloaz, ha c'hwi a zo eun tammig oajet evidon. Klevet hoh-eus komz, moarvad, euz an dour a varo hag euz an dour a vuhez, e heller en em yaouankaad gante ? Mar on-dije diou vuredad euz an dour burzuduz-se, e vefeh lakaet en oad a ugent vloaz, ha neuze or-be plijadur o veva asamblez. »

« Se a zo gwir-mad », eme ar roue. « Red e vo dim kaoud an dour a varo hag an dour a vuhez. Med penaoz en em gemer evid se ? »

Ar hakouz a oa ivez eun tu bennag dre eno, hag a lavaras kerkent :

« Med, va faeron, an hini en-deus degaset deoh ar briñsez kaer-mañ, gand he hastell hag heh alhweziou, a raio kement-mañ c'hoaz, hep poan. »

Ma oe lavaret adarre da Louizig paour e rankje kerhad diou vuredad euz an dour a varo hag an dour a vuhez, pe n'oa nemed ar maro evitañ.

« Ne vo fin ebed eta », a lavare dezañ e-unan, « d'am labouriou ha d'am foaniou ? 'Vid an dro-mañ, e kredan eo greet ahanon : penaoz dond biken a-benn d'ober kement-se ? Red eo lared eo kollet e skiant-vad gand ar roue koz-se. »

Mond a ra da gavoud e varh, trist ha morheduz, hag e lavar dezañ ar pez a houlen adarre ar roue.

« Bete vremañ ez om en em dennet mad », eme ar marh ; « med an dro-mañ n'ouzon petra a hoarvezo. On labour diweza e vo ; med aon vraz am-eus na retornfem ken. Goulenn adarre digand ar roue va zamm a aour hag a arhant, rag me a yelo ganit, ha, war an hent, ro an aluzenn da gement paour a weli. Degas ganit c'hoaz diou vured, evid lakaad an daou zour. Pell, pell on-eus da vond. »

Setu-int o-daou adarre en hent.. P'o-devoe dornet hent e-pad tri bloaz, e tegouezjont en eur hoad braz, war vete teir leo euz an diou feunteun.

« Bremañ », eme ar marh, « e vo red dit va laza. »

« Jezuz ! ho laza ! n'am-bo biken ar galon d'ober se ! »

« Gra, pa laran dit. Pa vin maro, e tigori din va horv, hag en em huzi e-kreiz va bouzellou tomm. Eur vran a ziskenno neuze war va horv, hag eur vran all, a vo a-uz 'barz ar wezenn, a houlenno : "Fresk eo ?". "Fresk eo", a responto an hini genta. Hag eben a ziskenno ivez neuze. Ma teu da daol da vad, e stagi an diou vured ouz daou droad unan euz ar brini, hag he hasi da glask an dour a varo hag an dour a vuhez, ha e talhi mad da eben e keit-se. Pa vo degaset dit an daou zour, e skuilli peder zakenn euz an dour a vuhez war va horv ha kerkent e savin beo, yah, yaouank ha kreñvoh evid biskoaz. Gra oll evel ma laran dit, hag e retornfom c'hoaz d'ar gêr. »

Laza 'ra Louizig e varh ha 'n em guza e-kreiz e vouzellou tomm. Emberr, e tiskenn eur vran war gorv ar marh.

« Fresk eo ? », a lavar unan all war ar brank.

« Fresk beo ! »

Kerkent Louizig a denn e zorn prim, hag a dap ar vran genta.

« Lez va far ganin ! Lez va far ganin ! », a gri eben.

« Ya, mar degasez din diou vuredad euz an dour a varo hag an dour a vuhez. »

« Ya, ya, ober a rin. »

« Deus amañ 'ta, ma stagin diou vured ouz da zaou droad. »

Setu staget an diou vured, hag e kri adarre :

« Lez va far ganin ! lez va far ganin ! »

« N'he lezin ket ken a zalhin an diou vuredad dour. »

Partia a ra ar vran. Distrei a ra tri deiz goude, med, siwaz ! n'oa ket a zour ganti ! Hag e pe stad e oa hi, al lapous kêz ! Rostet he fluñv, hag hi hanter-varo !

« N'eus ket a zour ganit ! », eme Louizig.

« Siwaz ! n'em-eus ket gallet. Daou zarpant a zeiz penn pep hini a zo e-kichenn pep feunteun, hag ar re-ze a zislouk tan gand o zeiz penn hag a dev oll kement a dosta war-vete eul leo. Sellit en pe stad on rentet ! »

Eun druez 'oa he gweled.

Kaset eo neuze an eil bran, gand an diou vured stag ouz he daou droad. Homañ a zo evurusoh, hag a zistro heb droug, ha ganti an diou vured leun. Louizig, evid gweled dioustu nerz an daou zour, a skuillas diou dakenn dour a varo war ar vran a oa bet devet gand tan ar zerpanted, ha kerkent e varvas ; neuze e skuillas warni diou dakenn all euz an dour a vuhez, ha kerkent setu-hi beo ha yah evel biskoaz. Memez tra a reas d'e varh, hag e savas kerkent, beo, yah, hag en em lakaas da hourignal ; med ne gomze ken.

Ma tistroont neuze d'ar gêr, kontant ha joauz. Seiz vloaz e oant bet oh ober o zro. Pa welas ar roue koz an diou vuredad dour burzuduz, en em lakaas da lampad ha da zañsal gand ar joa, hag e houlennas beza yaouankaet raktal, evid beza eureujet an deiz war-lerh.

Ar briñsez a skuillas peder zakenn dour a varo warnañ, ha setu-eñ kerkent maro-mik.

« Kasit ar hagn koz-mañ da vreina du-ze e douveziou ar hastell ! », emezi neuze.

Ha kerkent e oe greet 'vel ma lavaras.

Ar hakouz, pa welas, a yeas kuit, 'vel pa vije an diaoul war e lerh. Ha poent 'oa dezañ.

Louizig a oe neuze eureujet da briñsez he bleo aour, hag e oe eno festou, dañsou, kaniri, hag a bep seurt c'hoariou, e-pad eur miz. Ar glaouer koz, e wreg, e vugale hag o oll gerent a oe pedet ivez. Mamm va mammou-koz a oa eun tammig kar, hag a oe pedet ivez, hag evel-se va zud-koz o-deus gouvezet doare an eured.

Kontet gand Barba Tassel, Plouared, miz Kerdu 1869.

# Ar briñsez Troiol

*Bez' a zo bremañ pell amzer  
Pa o-devoa dent ar yer.*

Eun aotrou yaouank, marvet digantañ e vamm hag e dad, a oa chomet gand eul lezvamm. Homañ, evel ma c'hoarvez aliez, ne gare ket mab he fried euz e wreg kenta, hag a ree buhez fall dezañ. Ar paotr, degouezet gand e bemzeg pe e hwezeg vloaz, a guitaas eun deiz e lezvamm hag a yeas da vale bro. Fañch a oa e ano.

« N'eus forz petra a hoarvezo », a lavare ennañ e-unan, « gwaz eged amañ ne vin biken. »

Ha setu-eñ eet a-raog e benn, hervez a lavarar.

Bale a ra, bale a ra : loja a ra en tiegeziou war ar mêz ; a-wechou e kousk ivez er-mêz, med n'en-deus keuz ebed da di e lezvamm.

Eun deiz, war-dro kuz-heol, e tegouez e-kichenn eur hastell kaer. Digor e oa dor ar porz, hag eh antre. Ne wel den ebed. Mond a ra er gegin : den ebed eno ivez. Med eur pennadig goude, e teu eur havr. Ar havr a ziskouez dezañ mond war he lerh. Mond a ra hag en em gav en eur jardin gaer. Neuze e komz ar havr outañ evel-henn :

« Amañ, mar karez chom, ne vanko netra dit, med e ranki kousked teir nozvez en eur gambr a zsikouezin dit. »

« Petra ? amañ 'komz al loened ? »

« Me n'on ket bet a beb amzer er stumm ma'z on bremañ ; me 'zo dalhet amañ dindan gazel-ge, ha va oll gerent evel don. Med, mar karez ober penn-da-benn evel ma lavarar dit, e telivri va oll gerent ha me, ha n'az-pezo ket a geuz diwezatoh. »

« Lavarit din petra am-bo da ober evid se, ha mar gallan e rin. »

« N'az-pezo netra da ober nemed kousked teir nozvez en eur gambr a zo er hastell, ha n'eus forz petra a glevi hag a weli, pe a vo greet dit, chom heb lavared ger ebed, na zoken klemm. »

« Ma ! êsa 'rin bepred »

Pa oe degouezet koiulz koan, e oe servijet dezañ da zebri ha da eva en eur zal gaer. Med ar pez a zoueze anezañ, 'oa ne wele nemed daou zorn o lakaad plajou war an daol, pe o lemel aneze, ha korv ebed. P'en-devoe debret hag evet, e krogas eun dorn en eur hantelour, hag e reas sin dezañ da heuil. Mond a reas war-lerh an dorn, hag e oe kaset en eur gambr 'leh ma oa eur gwele. An dorn a lakaas ar hantelour war eun daol a oa eno hag a yeas kuit neuze.

Fañch, evitañ da veza souezet-braz, en em ziwiskas hag en em lakaas er gwele. War-dro hanternoz, e klevas eun dourni vraz en e gambr, hag e tihunas, rag kousket 'oa.

« C'hoariom boulou », a lavare darn.

Darn all a lavare c'hoari eur jeu all, med kaer en-devoa selled, ne wele den ebed.

« Ba ! ba ! », a lavaras eur vouez, « pleom a-raog gand unan a zo amañ er gwele. »

« Petra ? Unan bennag 'zo er gwele ? »

« Ya da ! deut da weled. »

Hag e tennjont ar paotr kêz er-mêz ar gwele hag en em lakajont d'hen teurel ha d'hen disteurel an eil d'egile evel eur bolotenn. Kaer o-devoa ober, Fañch ne lavare ger ebed, hag a ree van da gosuked bepred.

« Petra ? ne zihuno ket ? », a lavaras unan.

« Gortoz, gortoz », a lavaras unan all, « pa fell dezañ kousked. »

Hag hen stlapas ken rust gand ar voger, ma pegas outi evel eun aval poaz, ar paour-kêz. Hag ez ejont kuit neuze, en eur hoarzin.

Neuze e tegouezas er gambr ar havr en-devoa gwelet p'erruas er hastell ; med he fenn a oa bremañ evel hini eur plah kaer.

« Paour-kêz », a lavaras, « nag a boan az-teus gouzañvet. »

Hag en em lakaas da frota anezañ gand eul louzou a oa ganti ; ha, dre ma frote, e teue ar vuhez hag an nerz en e gorv. Ma 'n em gavas adarre ker beo ha ker yah ha biskoaz.

« Tremenet mad eo pep tra evid an dro-mañ », a lavaras ar havr dezañ : « med an noz da zond, ez-pezo muioh a boan c'hoaz. Na lavar ger ebed atao, n'eus forz petra a hoarvezo, ha diwezatoh e vezi digollet. »

« Ober a rin ggwelloha ma hellin », a lavaras Fañch.

Hag ar havr a yeas kuit.

Dijuni ha leina a reas mad ; tremen a reas an deiz<sup>56</sup> o vale dre ar hastell hag ar jardinou, heb gweled den, ha, goud koan, ar memez dorn a grog er hantelour hag a gas anezañ adarre d'ar memez kambr. An dro-mañ en em vount dindan ar holhed, er gwele.

« Marteze amañ n'am havfont ket », a lavare ennañ e-unan.

War-dro hanternoz, setu trouz ha c'hoari er gambr.

« C'hwez ar hristen a glevan ! », a lavar eur vouez a-greiz-oll.

« A beleh ar foeltr ? », a lavar ar re all. « Gweled a rez n'eus den ebed er gwele ; c'hoari, ha na gomz ken a gristenien. »

Hag en em lakaont adarre da hoari ; ha trouz ha tourni. Med a-greiz-oll ar memez mouez a lavar adarre :

C'hwez ar gristenien a glevan, pa lavaran deoh, paotred ! »

Hag eñ da zidanfoeltri ar gwele, ha setu dizoloet ar paour-kêz Fañch.

« Pa lavaran deoh, paotred ! Petra ? beo out c'hoaz, preñv-douar ! Gortoz, bremaig 'vo greet ouzit ! »

Hag e tiframmjont anezañ etre pevar hartier ; hag ez ejont kuit neuze, en eur hoarzin, gand eun trouz spontuz.

Kerkent e teuas adarre ar havr er gambr : bremañ e oa plah beteg hanter he horv.

« A ! paour-kêz », emezi, « e pe stad out aze ! »

Tostaad a reas an tammou an eil ouz egile, hag en em lakaas adarre d'o frota gand he louzou. Sentet rentet ar vuhez da Fañch evid an eil gwech.

« An deirved nozvez », a lavaras dezañ ar plah-gavr, « a vo ar wasa ; med kemer kalon, ha, mar gallez tremen mad an nozvez-se, e vo neuze fin d'az poaniou, ha d'am re ivez, ha da re ar re all oll a zo amañ. »

« Ne gredan ket e hallfe c'hoarvezoud kalz gwaz ganen eged beza lazet, evel ma'z on bet diou wech bete vremañ », a lavaras Fañch.

An deirved nozvez, evid diverra, eh eas adarre d'ar memez kambr, goude e goan, hag en em vountas en dro-mañ dindan ar gwele.

War-dro hanternoz eh erruas adarre ar memez re ; ha trouz ha tourni adarre.

« C'hwez ar hristen a glevan adarre ! », a lavaras eur vouez. » Daoust ha na ve ket maro c'hoaz ar preñv-douar-hont ? »

Hag int da zidanfoeltri ar gwele. Netra. Hag int da zelled dindan.

« Amañ 'mañ ! amañ 'mañ ! »

« Poaza anezañ oh ar ber, hag hen debri goude. »

« Hag a zo mad, greom evel-se ! »

Ha setu greet eun tan braz, lakaet Fañch en noaz ha poazet a-uz dezañ ha debret goude, beteg an tamm diweza, zoken an eskern.

Pa oe fin d'ar pred hag eet kuit ar jeanted, e teuas er gambr eur plah penn-da-benn en dro-mañ, eur briñsez euz ar gaerra !

« Allaz », emezi, « aon vraz am-eus na ve manet tamm ebed anezañ ! »

Hag hi da glask war an daol, dindan an daol. Ne gavas netra. Dre forz klask, e kavas en eur horn bennag eun tammig askorn euz ar penn.

« Bennoz Doue ! », emezi, « mad eo an dro ! »

Ha hi da frota an askorn gand he louzou. Dre ma frote, e kreske, e kreske, e teue kig warnañ, en em gave peb ezel en e blas, kement ha kement ma savas ar horv en e bez, beo ha yah-mad.

<sup>56</sup> an deiz : an devez.

« Ola ! », a lavaras neuze, « deut eo an dro da vad. Bremañ ar jeanted n’o-deus ken galloud ebed warnon na war va re, hag oll, kement a zo amañ, a zo dit, beteg me va-unan. »

Kerkent en em gavas eno kalz, kalz a dud euz a bep seurt oad ha pep seurt stad, priñsed, priñsez, duked, baroned, tud euz ar gomun, a oa eno oll dindan gazell-ge. A bep tu e savent hag e trugarekaent an hini en-devoa o delivret, hag eh eent kuit neuze, pep hini en e du.

« Eom kuit ivez », a lavaras Fañch d’ar briñsez ; eom da balez ho tad. »

« Nann c’hoaz », emezi ; « tri deiz<sup>57</sup> on-eus c’hoaz da veza amañ, hag an tri deiz-se e vo red deoh chom heb debri tamm nag eva banne, ken a vo an taol a nav eur beb beure. Ma tebrit ha ma evit an disterra tra a-raog an eur-ze, e vanfet kousket kerkent, ha n’am gwelfet ken. Bemdez, da nav eur, e teuin d’ho kweled, ha neuze e hallfet debri hag eva. War ar mên a zo e-kichenn ar feunteun, er hoad, e hortozfet ahanon, ha, kerkent ha ma sono nav eur, en em gavin eno ganeoh. Kement-se ne vezo ket diêz deoh, goude oll ar pezh hoh-eus greet. »

P’he-devoe lavaret ar homzou-ze, e kollas ar gwel anezi.

An deiz war-lerh ar beure, e oa Fañch en e goazez gand eur mevel, war vên ar feunteun, pell a-raog nav eur, o hortoz ar briñsez. N’en-devoa na debret nag evet, hag en-devoa naon. Pa oa eno evel-se, e welas o tond war e du eur wrahih koz, hag eur banerad prun ganti war goubl he breh.

« Demad deoh, aotrou koant ! »

« Ha deoh ivez, mammig koz ! »

« Kemerit eur brunenn diganen. »

« Trugarez, ne garan ket ar prun. »

« Sellit evel ma’z int kaer ! Kemerit unan da dañva ; ne goust netra. »

Kemer a reas unan. Med p’he hasas d’e henou, e vanas kousket kerkent. Nav eur a zonas neuze, hag ar briñsez en em gavas eno kerkent.

« Allaz ! kousket eo ! », a lavaras, pa welas anezañ.

« Ya », a lavaras ar mevel, « eur wrahih koz a zo tremenet dre aze hag he-deus roet eur brunenn dezañ, ha, p’en-deus he haset d’e henou, ez eo manet kousket dioustu. »

« Ma ! pa zihuno, roit dezañ ar mouchouer-mañ, evid m’en-devo soñj ahanon. »

Hag e savas neuze en êr. Fañch a zihunas kerkent, hag a welas anezi o sevel en êr : gwenn e oa evel eun êl.

« Manet e oan kousket ! », emezañ ; « warhoaz e vo red din teurel pled ggwellohoh. »

An deiz war-lerh ar beure, pa oa war vên ar feunteun gand e vevel, evel an deiz diaraog, e teuas adarre ar wrahih koz da dremen. Eur banerad figez a oa ganti an dro-mañ.

« Kemerit eur figezenn, aotrou. Sellit evel ma’z int kaer ha daro ! »

Naon en-devoa, hag e kemeras eur figezenn digand ar wrahih koz, hag he debras ; ha kerkent e vanas adarre kousket. D’an taol a nav eur, ar briñsez en em gavas adarre e-tal ar feunteun.

« Allaz ! Kousket eo adarre », emezi.

« Ya, sur », eme ar mevel ; « ar wrahih koz a zo tremenet dre amañ adarre, hag he-deus roet dezañ eur figezenn, ha p’en-deus debret anezi, ez eo manet kousket raktal. »

« Setu aze eur mouchouer all da rei dezañ, pa zihuno, evid m’en-devo soñj ahanon. »

Hag e savas adarre en êr : en griz e oa an dro-mañ.

« Va Doue ! », emezañ, « manet e oan kousket adarre ! Daoust Petra ‘zo kirieg da ze ? »

« Marteze, va mestr », eme ar mevel, « ar frouez a gemerit digand ar wrahih koz ho laka da venel kousket evel-se ? »

« Ba ! n’eo ket se ; an naon eo, moarvad. Med warhoaz e taolin pled mad, ha ne gouskin ket. »

Ar mevel a roas dezañ an eil mouchouer a oa griz ; ar henta a oa gwenn.

An deiz war-lerh ar beure, pa oant o-daou en o hoazez war vên ar feunteun, evid an deirved gwech, e teuas adarre ar wrahih koz, hag eur banerad avalou-orañjez ganti an dro-mañ.

« Kemerit eun aval-orañjez, aotrou ! ; sellit ma’z eo melen ha kaer. »

Ar mevel en-devoa c’hoant da lavared d’e vestr na gemerje ket, med ne gredas ket, hag e kemeras adarre. Ha kerkent ha ma krogas ennañ gand e zent, e vanas adarre kousket.

<sup>57</sup> deiz : devez.



Da nav eur, e tegouezas adarre ar briñsez, ha pa welas anezañ kousket :

« A ! maleüruz », emezi, « kousket out adarre ! »

« Ar wrahiñ koz a zo tremenet adarre », a lavaras ar mevel, « hag he-deus roet dezañ eun aval-orañjez, ha, kerkent ha m'eo kroget ennañ gand e zent, ez eo manet kousket. »

« Setu amañ eun trived mouchouer da rei dezañ, pa zihuno, ha neuze e rafet ar himiad diweza dezañ evidon, rag n'am gwelo ken, allaz ! »

Hag e savas adarre etrezeg an neñv, en eur leuskel eur garm truezuz. Fañch a zihunas kerkent, hag a welas traoñ he sae : du e oa ; hag ar mouchouer he-devoa roet d'ar mevel a oa du ivez.

« Allaz ! manet e oan kousket adarre ! »

« Ya, siwaz ! », a lavaras dezañ e vevel. « Ar briñsez, a-raog mond kuit, he-deus roet din an trived mouchouer-mañ, ha lavaret din kimiadi diouzoh evid ar wech diweza euz he ferz, rag ne dleit ken he gweled. »

« Eo, eo ! he gweled a rin c'hoaz, rag ne baouezin da vale, na noz na deiz, ken am-bezo kavet anezi, n'eus forz peleh ema. »

Hag en em laka en hent, e-unan, gantañ eun tammig bara hepken en e hodell. Pa oe skuiz o vale ha deuet naon dezañ, eh azezas war ar hlazenn evid diskuiza ha debri eun tammig. Eur wrahiñ koz a dremenas neuze e-biou dezañ, hag a lavaras :

« C'hwi, va den mad, a zo o leina aze ? »

« Ya, sur, mamm-goz ; mar karit ober evel don, ho-pezo lod euz ar pez a zo. »

Kemer a ra eun tamm bara digantañ, hen debri a ra, hag e lavar neuze :

« Mil bennoz deoh, va mab ! Me 'zo amañ, triweh kant vloaz 'zo, ha biskoaz den n'en-devoa, bete vremañ, roet din eun tamm bara. Evid ho trugarekaad, setu aze eur zerviedenn a roan deoh, ha p'ho-pezo c'hoant debri pe eva, goulennit ar seurt a garfet, hag en em gavo kerkent warni. Setu c'hoaz eur wialenn wenn evid mond en hent, ha pa skofet an douar ganti, e raio deoh ober kant leo bep taol. »

« Va bennoz deoh, mammig koz ! »

Ha kerkent e kollas ar gwel anezi.

« Daoust », a lavaras ennañ e-unan, pa oe eet kuit, « ha gwir he-defe lavaret an hini goz-se ? Ezomm a-walh am-befe euz eur zerviedenn hag euz eur vaz, evel ma lavar. »

Hag eñ o skei eun taol gand e wialenn war an douar, ha kerkent en em gavas kant leo euz al leh ma oa. Ma welas demdost eno eul lochenn vihan, toet gand hesk ha raden. Eul labourer-douar a oa en eur park, hag e houlennas digantañ troka e zillad outañ. Al labourer-douar ne houlenne ket ggwelloh, rag e zillad a oa pillou oll, ha re Fañch a oa mad ha kaer. Mond a reas neuze da skei war dor al lochenn. Eur wrahiñ koz, hir he dent evel va breh, a deuas da zigeri dezañ :

« Petra 'houlennit, va mab ? »

« Beza lojet evid an noz. »

« Allaz ! degouezet fall oh amañ ; me 'm-eus tri mab ha ne garont ket ar gristenien, ha, p'errufont emberr, ho-pezo chañs ma ne veh ket debret gante. »

« Va huzit en eun tu bennag, mamm-goz ; me ho sikouro en ho labour, hag a ouezo tremen euz ho mibien. »

Lakaad a reas anezañ en eur hoz koufr, e traoñ an ti. Oh aoza koan d'he bugale e oa ar wrahiñ koz ; greet he-devoa soup en teir barrikenn didal.

« N'ouzon petra rei deze goude o soup ; n'em-eus aze nemed tri dañvad, ha n'eo ket a-walh. »

« Gortozit, gortozit, mamm-goz ; na gemerit ket a nehamant gand se. »

Ha Fañch da zispaka e zerviedenn, ha da lavared :

« Dre vertuz va zerviedenn, ra zegouezo amañ tri ejen rostet ha ter barrikennad win ! »

Ha kerkent e tegouezas war an daol tri ejen rostet ha teir barrikennad win. Neuze e oa deut mad d'an hini goz.

Emberr e klevjont eun trouz braz, hag en beg ar siminal : « Hou ! hou ! hou ! »

« Setu va mab bihanna ! », a lavaras an hini goz ; « it buan 'barz ar houfr. »

Ha kerkent mab bihanna an hini goz a ziskennas dre ar siminal, hag a lavaras :

« Naon am-eus, mammig, gwall naon am-eus ! »

« Ma ! azezit aze da hortoz ho taou vreur, ha roit peoh. »

Hag eh azezas war eur skabell e-tal an tan ; med prestig e lavaras :

« C’hwez ar hristen a glevan, mamm, hag hen debri a rankan ! »

« Ya, moarvad, e tebri eur henderv dit a zo deuet d’am gweled, hag en-deus degaset peb a ejen deoh ? Ne welez ket aze ? »

« O ! neuze, mar deo eur henderv, ha mar en-deus degaset peb a ejen deom, ne rin droug ebed dezañ. Med peleh emañ ? »

An hini goz a dennas Fañch euz ar houfr, hag en em gavjont prest mignoned, e genderv hag eñ.

Emberr e klevjont eun dourni vraz, ha : « hou ! hou ! hou ! » war veg ar siminal.

« Setu an eil Avel ! », a lavaras an hini goz, rag mamm an avelioug e oa.

Hag e tiskennas ivez an eil Avel dre ar siminal. Pa welas Fañch :

« Eur hristen<sup>58</sup> ! Hen debri a rankan dioustu ! »

« Me ‘garfe gweled ! », eme an hini goz. « Petra, eur henderv deoh, hag en-deus degaset deoh d’ho koan peb a ejen ha peb a varrikennad win ! Azezit aze e-tal an tan, ha roit peoh, pe ho-pezo fest ar vaz. »

Hag eh azezas war eur skabell e-tal an tan, evel egile.

Emberr, setu eun trouz hag eun dourni kalz gwasoh. Krena a ree an ti, kreh-traoñ, hag ar gwez a oa en-dro a strake hag a yude : spontuz ‘oa da glevad !

« Erru eo va mab hena ! », eme ar wrah koz.

Ha kerkent e tiskennas dre ar siminal, ken a skubas an tan da greiz al leurzi. Hag e lavare :

« Naon am-eus, mammig paour ! naon am-eus ! naon am-eus ! »

« Ma ! roit peoh, prest eo koan. »

Med pa welas Fañch :

« Eur hristen ! », a lavaras kerkent.

Hag e oa o vond d’her lonka ; med an hini goz a grogas en eur wezenn-dill he-devoa tennet el liorz hag en em lakaas da gota he mab hena.

« A ! c’hoant lonka da genderv az-teus ; mab ma hoar, eur bugelig euz ar ggwelloha, en-deus degaset deoh d’ho koan peb a ejen ha peb a varrikennad-win ! Hag e soñj dit da lezin da ober ! »

Hag an hini goz a skoe hep truez, hag an Avel braz a grieg :

« Goustadig, mammig kêz, goustadig ! Ne rin droug ebed d’am henderv, p’en-deus degaset deom peb a ejen ha peb a varrikennad-win. »

Hag e paouezas neuze an hini goz da skei, hag en em lakajont oll ouz taol neuze. Med kement e lonkent, kement a lonkent, an Avel braz dreist-oll, ma rankas Fañch lavared d’e zerviedenn ober he dever beteg teir gwech. Pa oe leun o hovou ivez eun dro bennag, e teujont d’azeza en-dro d’eun tan braz hag en em lakajont da gaozeal evel pevar mignon.

« Peleh eh ez ivez, kenderv ? », a lavaras an Avel bihan da Fañch.

« Da glask ar Briñsez Troiol. Gouzoud a rez peleh emañ ? »

« N’ouzon ket, avad : biskoaz n’em-eus klevet komz anezi. »

« Ha te, kenderv ? », a lavaras d’an eil Avel.

« Me ‘m-eus klevet komz anezi, med n’ouzon ket peleh emañ. »

« Ha te, kenderv braz ? », a lavaras d’an Avel braz.

« Me ‘oar peleh emañ ; o tond ahane ez on, ha warhoaz e retornin di adarre. »

« Va has a ri ganit neuze ? »

« Ya a-walh, mar gallez heuill ; med eom da gousked bremañ, rag warhoaz on-devo kalz a hent d’ober. »

An deiz war-lerh ar beure, goude dijuni, eh eas pep hini en e du.

« Deus war va lerh, mar gallez », a lavaras an Avel braz da Fañch.

Ha setu-eñ en hent. Frrr ! ou, ou, ou ! viiii ! Ha Fañch war-lerh, ha da skei stank-ha-stank gand e wialenn wenn, a ree kant leo bep taol. Pa zizroas an Avel braz da zelled peleh ‘oa manet, e oe souezet-braz o weled anezañ war e zeuliou. Seu ma tegouezont gand ar mor.

<sup>58</sup> Eur hristen : dre vraz, n’eus ket kaoz a relijion. Talvezoud a ra kement hag “eun den”.

« Me n'hellan ket mond pelloh, mar n'am hemerez ket war da gein », a lavaras Fañch d'an Avel braz.

« Me da gemero war va hein, mar roez din boued pa houlennin. »

« Ya, kement ha ma kari. »

Ha setu Fañch war gein an Avel braz, ha da vond adarre. Dalhmad e houlenne da eva pe da zebri. Med e zerviedenn a oa gantañ, ha, dre ma houlenne, e roe dezañ. Mond a reont, mond a reont ! frrr ! viiii ! ou ! ou ! Gweled a reont ar hastell 'leh m'emañ ar briñsez Troiol. Diskennet eo Fañch e-kreiz ar porz. Staga 'ra tri mouchouer ar briñsez, an hini gwenn, an hini gris hag an hini du, ouz eur vaz, hag e plant anezi en douar. Prestig goude ar briñsez a dremen gand mestr ar hastell evid mond da eureuji d'an iliz. Gweled a ra Fañch hag an tri mouchouer, hag e lavar d'he flah a gambr :

« It da houlenn digand an den-ze pegeemnt e kosuto din unan euz e vouchouerou. »

Mond a ra ar plah a gambr da gavoud Fañch.

« Pegement e kousto din unan euz ho mouchouerou evid va mestrez ? »

« Lavarit d'ho mestrez penaoz n'he-deus ket a vadou a-walh evid prena unan euz ar mouchouerou-mañ. »

Distrei a ra ar plah a gambr da gavoud ar briñsez.

« Ahanta, petra en-deus lavaret deoh ? »

« Lavaret en-deus din penaoz n'hoh-eus ket a vadou a-walh evid prena unan euz ar mouchouerou. »

Ober a ra van neuze d'en gavoud diêz, hag e lavar penaoz n'hall ket mond d'an iliz hag e vo red lakaad an eured an deiz war-lerh.

Lakaet eo an eured an deiz war-lerh, hag e tistrojont oll d'ar hastell. An deiz war-lerh ar beure, e kas adarre he flah a gambr da houlenn digand Fañch pegement e kousto dezi daou euz e vouchouerou.

Mond a ra ar plah a gambr, hag e lavar dezi adarre :

« Lavarit d'ho mestrez n'he-deus ket a vadou a-walh evid prena nag unan na daou euz va mouchouerou. »

Distrei a ra da lavared d'he mestrez ar pez a zo bet respontet dezi.

« Ma ! it da lavared dezañ neuze dond da gomz ouzin. »

Mond a ra, hag e lavar :

« Lavaret a zo deoh dond da gomz ouz ar briñsez. »

« Lavarit d'ar briñsez dond d'am havoud, m'he-deus c'hoant da gomz ganen. »

Mond a ra ar briñsez da gavoud Fañch.

« Deuit ganen eun tammig d'am hambr », emezi.

« Ya, raktal ! »

Hag eh a ganti d'he hambr, hag en em daolont an eil en diouvreh egile, en eur ouela gand ar joa.

Ar briñsez a gas he flah a gambr da lavared da vestr ar hastell penaoz en em gav diêz bepred, hag e ped anezañ da hortoz beteg an deiz war-lerh evid mond d'an iliz, med pred an eured e haller ober anezañ an deiz-se, p'oa erru an oll dud a oa bet pedet.

Greet eo evel-se. Eur pred e oa euz ar haerra. E dibenn ar pred, e oa gê-kaer an oll, ha pep hini a gonte eun taol kaer bennag. Ma oe pedet ar briñsez da lavared ivez eun dra bennag ; hag e komzas evel-henn :

« Me 'm-oa eur houfrig-bahut, ha warnañ eun alhwez koant, evitañ da veza koz. Ma kollis va alhwez hag e lakais ober unan all. Pa oe greet an alhwez nevez, e teuis da gavoud an hini koz. Setu-me nehet. Hag e houlennan diganeoh, danvez va fried nevez, pe an hini koz pe an hini nevez a dlean da gemer bermañ ? »

« Me 'gred eo mad kemer an hini koz », a lavaras an aotrou.

« Ma ! me 'zoñj eveldeh. Red eo din diskouez deoh an alhwez koz a gomzan anezañ. »

Hag e savas, hag eh eas en eur gambr vihan a oa eno tost, hag e tistroas kerkent, krog en dorn Fañch, a oa gwisket bremañ evel eur priñs kaer, hag e lavaras :

« Setu-eñ amañ ! Hemañ eo va fried, ha nann hini all ebed ! »

Hag e eo greet an eured an deiz war-lerh, hag e oe eno festou evel n' em-eus gwelet biskoaz, na c'hwi ivez, hag e chomjont er hastell kaer-ze, rag ar mestr a oa eet kuit, n'ouie den peleh.

*Kontet gand Jakez Seson, a Blougonver, boutaouer-koad en forest Befou, miz Kerdu 1869.*

## An Tignouz pe Mevel an Diaoul

Eur wech e oa eur wreg paour manet intañvez gand eur mab. N'he-devoa netra da veva nemed aluzenn an dud karantezuz, ha bemdez e rankent mond en hent da glask bara. Ar paotr, anvet Pipi, a oa degouezet gand e zaouzeg vloaz, hag evel ma kreske ha m'en-devoa yehed, a oll a lavare d'e vamm :

« Red e vo deoh, Janed koz, ober d'ho mab mond da hounid e voued ; lakait eñ da baotr-saout pe da vesaer eun tu bennag. Eur vez eo hen gweled war ho lerh dre an hentchou, evel eul leue. »

Janed koz a lavare a-walh d'he mab he dilezel ; med ar paotr a oa didalvez hag a blije dezañ ar vuhez-se, ha ne zelaoue ket e vamm. Ma oa deut an dud da zegemer fall ar baourez koz, abalamour d'he mab, hag aliez, zoken, e veze kaset kuit hep tamm.

Eun deiz ma n'o-devoa ket kavet o lein, e oa an hini goz o krozal d'he mab dre an hentchou :

« Gweled a rez e vem degemeret fall dre-oll ; c'hoant az-teus da weled da vamm o vervel gand an naon ? Na deu ken war va lerh ; kerz da hounid da voued eun tu bennag. »

« Ha peleh eh in-me, mamm ?

« Kee gand an diaoul ! », a lavaras ar vamm, skuiz ha droug enni o kleved anezañ o lavared bemdez ar memez tra.

« Ma ! mamm, eh an d'hen klask. »

Hag eñ kuit. Pa oa o vond gand an hent, e tegouezas gantañ eun aotrou kaer, war varh, hag a lavaras dezañ :

« Peleh eh ez-te, va faotr ? »

« Ma feiz ! n'ouzon ket kaer. Va mamm he-deus lavaret din mond gand an diaoul, hag on o klask anezañ. »

« Mar karez dond ganen da vevel ? »

« Ya a-walh. »

« Deus amañ ganen war va marh. »

Setu-int o-daou war ar marh, ha kuit d'an daoulamm-ruz. An Diaoul a oa hennez. Pa oent degouezet en e gastell, e lavaras da Bipi :

« Deus ganen, ma tiskouezin dit petra az-pezo d'ober bemdez. »

Kas a ra anezañ da genta d'eul leh hag e oa eno peder fillig war drebezou, ha tan braz dindanne.

« Sell amañ peder fillig hag az-pezo tan da zerhel dindanne, hag eun tan ivern. »

Mond a ra gantañ neuze d'ar marchosi :

« Sell amañ va marh, hag e skrivelli anezañ, hag e roi foenn ha melchon ha kerh dezañ ar pez a garo, ha neuze e valei anezañ er hoad hag en aleou, en-dro d'ar hastell. Sell du-hont c'hoaz, er horn teñval-ze, eur gazeg treud, hag evid oll voued e roi dezi bazadou, diou wech bemdez ; ha sko stard, hag hep truez, ken a hwezi. Deus bremañ ma tiskouezin dit ar feunteun, e traoñ ar porz. Sell aze ar feunteun. Gweled a rez evel m'eo sklêr ha kaer an dour enni. Diou wech bemdez e tegasi va marh da eva amañ. Med taol pled mad da lakaad da zaou zorn pe da benn en dour-ze, pe gwaz a ze dit. An ti e vo red dit da skuba bemdez ivez, med na daol ket ar skubadur er-mêz : laka aneze en eur bern 'dreg an nor. Me 'ya bremañ da ober eun dro, ha pa retornin d'ar gêr, e welin ha te az-pezo greet pep tra evel am-eus gourhemennet dit. »

Mond a ra neuze ar mestr kuit, ha Pipi a chom e-unan er hastell. Mond a ra da genta da ober tan dindan ar peder fillig. Pa oa o c'hweza an tan gand eur zoufletez vraz a oa eno, e klev eur vouez klemmuz o lavared :

« Na hwez ket an tan dindannon, maleüruz, rag me eo da dad ! »

« Jezuz Doue ! va zad kêz, c'hwi 'zo aze ? »

Hag eñ o vouga an tan dindan ar billig-se, ha da hweza dindan an eil :

« Na hwez ket evel-se, den fall, rag me eo da vamm ! », a lavaras eur vouez all.

« Petra ? va mammig kêz, c’hwi ‘zo aze ivez ! va haset ho-poa gand an Diaoul hag ez oh erru en e di em raog ! Med n’eus forz, eh an da vouga an tan dindannoh, va mammig paour. »

Mouga ‘ra an tan, hag eh a d’an deirved billig :

« Na hwez ket an tan dindannon, den fall, me eo da vaeronez ! »

« C’hwi ivez, va maeronez kêz ! Med va oll gerent a zo amañ ‘ta ! »

Mouga a ra an tan, hag eh a d’ar bederved billig :

« Na hwez ket an tan dindannon, den fall, me eo person da barrez ! »

« Petra ? Petra ? c’hwi ivez ! Ma feiz ! gwaz a ze deoh. Teir gwech hoh-eus tremenet ahanon heb va fask, ha bremañ e tommfet aze, va fersonig ! »

Hag eñ oh ober eun tan ivern dindan e berson, hag o vond neuze d’ar marchosi en-dro d’ar hezeg. Rei a ra melchon ha kerh, leiz e gov, d’ar marh, ha goude eh a da vale anezañ dre ar hoad hag an aleou. N’en-devoa ket bet ar galon da vazata ar gazeg treud ; truez a gemeras outi, o weled evel ma oa, hag e roas zoken eun tammig melchon dezi. P’en-devoe baleet gand ar marh war-dro div eurvez<sup>59</sup>, e teuas d’ar gêr, hag e kasas anezañ da eva dour euz ar feunteun a oa e traoñ ar porz.

Pa oa daoubleget o seleled ouz e skeud en dour sklêr, e kouezas e gontell e-barz euz e hodell.

« Penaoz ober evid tapoud va hontell alese bremañ, p’eo divennet lakaad va daou zorn e dour ar feunteun-ze ? Med, ba ! penaoz e ouezo am-bo lakaet va dorn e-barz ? »

Hag eñ o vounta e zorn er feunteun hag, evel ne oa ket don, e tapas êz e gontell. Med pa dennas e zorn er-mêz an dour, e oe souezet-braz o weled penaoz e oa deut da veza : eun dorn aour en-devoa bremañ !

« A ! sell, me, eur paotr bremañ, avad, gand an dorn-ze ! Eun dorn aour ! Biskoaz kemend-all ! Ha penaoz lavared d’ar mestr n’am-bo ket lakaet va dorn e dour ar feunteun, pa welo kement-mañ ? Red ‘vo din hen paka gand eul lien, ha lavared am-bo kignet anezañ oh ober eul labour bennag. Marteze e kredo, ha ne houlenno ket gweled. »

Dond a ra d’ar gêr ; lakaad a ra ar marh er marchosi, ha goude e pak e zorn gand eul lien. Emberr eh erru ivez ar mestr er gêr. Mond a ra dioustu d’ar marchosi, selled a ra ouz ar marh.

« Mad ! mad ! greet e-teus dezañ evel ma ‘m-oa lavaret dit. »

Mond a ra neuze da weled ar gazeg treud, hag e laosk eul le-doue euz ar gwasa :

« Mil malloz warnout ! n’e-teus ket greet d’ar gazeg-mañ evel m’am-oa lavaret dit ! »

« Allaz ! ankouaet em-oa. N’on ket kustum c’hoaz euz va labour, evid eun deiz ‘zo abaoe ma’z on en ho ti. »

Er pred-se e welas e zorn paket.

« Petra ‘zo c’hoarvezet gand da zorn ? »

« Netra ! kignet em-eus anezañ eun tammig, oh ober euz ho marh. »

« Gaou a lavarez : bountet ‘teus da zorn e dour ar feunteun. »

Ha kerkent e tispakas dezañ e zorn, hag e reas eul le-dour euzuz.

« Va fardonit, mestrig kêz, evid ar wech kenta ! »

« Da bardoni a ran evid eur wech, med gwaz a ze dit d’an eil ! »

An deiz war-lerh ar beure, e lavaras mestr ar hastell da Bipi :

« Eh an bremañ d’ober eun dro pell-pell, ha ne zistroin ket a-raog c’hweh miz. (Da duta eh ee). Ne vanko netra dit amañ e-keit-se ; med taol pled mad d’ober pep tra evel am-eus gourhemennet dit : ma ne rez ket, eh erruin kerkent er gêr, n’eus forz peleh e vin, ha gwaz a ze dit neuze. Gra mad d’ar marh ; ro bazadou d’ar gazeg treud diou wech bemdez, ha taol pled mad euz ar feunteun. »

« Bezit heb morhed, mestr ; oll e vezo greet evel m’hoh-eus gourhemennet. »

Mond a ra mestr ar hastell en e hent, ha Pipi a ya ivez d’e labour. Goude beza roet boued d’ar marh, e kemer eur vaz hag en em laka da vazata ar gazeg paour. Ma oe souezet-braz o klevet anezi o lavared :

« Na skoit ket evel-se, en ano Doue, rag c’hwi hoh-unan a hallfe dond da veza evel don, siwaz ! »

« Petra ? c’hwi ‘gomz ivez ‘ta, loen paour ? »

<sup>59</sup> eurvez : eur, er skrid orin.

« Ya, rag me n'on ket eur gazeg, evel ma soñj deoh : me 'zo eur briñsez yaouank, merh eur roue braz, dalhet amañ, dindan ar stumm ma welit, gand mestr ar hastell-mañ. Med, mar karit senti ouzin hag ober penn-da-benn evel ma lavarin deoh, va zennfet c'hoaz ahann ha kalz a re all ganen. »

« Komzit buan, me 'raio oll evel ma lavarfet din. »

« It da genta da hrignol ar hastell, ha stouvit gand stoup genou eur hloh braz a zo eno, rag hennez en em lakafe da zon anezañ e-unan, pa hoantafom mond kuit, ha kerkent e tegouezfe ar mestr er gêr. »

Mond a ra d'ar hrignol, stouva a ra genou ar hloh, hag e teu adarre da gavoud ar gazeg hag e lavar dezi :

« Stouvet eo genou ar hloh. Ha bremañ ? »

« Kee bremañ d'an ti, ha taol er-mêz ar skubadur a zo eno 'dreg an nor. »

Mond a ra d'an ti ha teurel eur bern braz a skubadur a oa 'dreg an nor. Hag ez eo souezet-braz o weled o sevel ahane kalz-kalz a dud a bep seurt stad, hag oll e lavarent dezañ :

« On bennoz dit ! Ni 'oa dalhet amañ pell a oa gand an Diaoul, ha te 'teus on delivret. On bennoz dit, c'hoaz eur wech ! »

Hag eh eent kuit a-leiz a 'n nor, ha buan, buan.

« Taolet em-eus ar skubadur er-mêz an ti », a lavaras Pipi d'ar gazeg treud, » hag hervez em-eus klevet, em-eus delivret gwall-galz a eneo en poan. »

« It bremañ d'ar feunteun, bountet ho penn e-barz, ha deuit amañ adarre. »

Mond a ra d'ar feunteun, bounta 'ra e benn e-barz, ha, pa denn anezañ er-mêz, e oa e vleio hag e benn evel pa vijent aour. Hag en-devoa bremañ eur penn aour hag eun dorn aour.

« Kemerit bremañ an torch-plouz, ar skribell hag ar skubellenn, ha deuit gante war va hein, ha buan ! »

Ober a ra Pipi evel ma'z eo lavaret dezañ, ha setu-int kuit, d'an daoulamm-ruz.

« Sell war da lerh », a lavar dezañ ar gazeg, eur pennad goude. « Ne welez netra ? »

« Nann sur ; nemed eur goumoulenn du-du, a deu warnom. »

« Ar goumoulenn du-ze eo an Diaoul. Taol d'an traoñ an torch-plouz. »

Teurel a ra d'an traoñ an torch-plouz, ha kerkent e sav war o lerh eur hoad uhel-uhel ha stank, a zirog ar goumoulenn.

« Sell adarre war da lerh ; ne welez netra ? », a lavar ar gazeg eur pennadig goude.

« Eo, tan ha kurunou. »

« Taol buan ar skrivell d'an traoñ. »

Teurel a ra ar skrivell d'an traoñ, ha kerkent Pipi hag e gazeg a deu da veza evel daou zant, unan a bep tu d'an hent. Ha kerkent e tegouez eul levran hag a red ken a foeltr. Tremen a ra heb ober van ebed ha, pa ne wel netra, e return d'ar gêr. An Diaoul a oa adarre. An daou zant a deu kerkent da veza kazeg ha den evel kent, ha da vond adarre d'an daoulamm ruz.

« Sell war da lerh c'hoaz », a lavaras ar gazeg ; « ne welez netra ? »

« Eo, eur hi barbet du hag a deu evel eun dremedar. Erru eo tost. »

« Taol buan ar skubellenn. »

Teurel a ra ar skubellenn, ha kerkent e sav war o lerh eur stank vraz. Ar hi du degouezet e-tal ar stank ne gred ket en em deurel e-barz, hag en em laka da lapad, da lapad evid he dizeha : kement a ra o lonka dour, ma teu da greuvi.

Pipi hag e gazeg a oa eet bremañ diwar douar an Diaoul, ha n'o-devoa ken da gaoud aon dioutañ. Ar gazeg a gomzas neuze evel-henn :

« Me 'zo merh da roue Bro-Zaoz, med, siwaz ! daou vloavez<sup>60</sup> em-eus da chom er stumm-mañ. E-pad an daou vloavez-se e chomin er hoad-mañ. Deuit d'am gweled eur wech an amzer ha, pa vezo tremenet an daou vloavez, mar ne veh ket skuizet o hortoz ha kemeret unan all ganeoh, e vefom eureujet an eil d'egile. Setu amañ, da hortoz, eur voest a roan deoh ha, pa hoantafet eun dra bennag, lavarit : « Dre nerz va boest m'am-bo an dra-mañ-tra ! ». Ha kerkent e tegouezo an dra-ze.

<sup>60</sup> daou vloavez : daou vloaz, er skrid orin.

Kimiadi a reont neuze an eil diouz egile gand an daelou en o daoualagd. Med lezom ar gazeg en he hoad, hag heuillom Pipi.

Pipi a deu neuze da Bariz.

« Petra 'rin-me bremañ, e-pad daou vloavez ? », a lavare dezañ e-unan. « Re gaer eo va fenn ha va dorn, a zo aour, evid labourad. Mez am-eus gante zoken ; red 'vo din o huza. »

Degouezoud a ra gantañ neuze eur hrennard hag a oa an tign en e benn : euzuz 'oa da weled. Lemel a ra dezañ e groustenn, ar bleo a deu ivez da heul, hag o laka evel-se war e benn. Ma oa araog eur paotr koant, evid bremañ n'oa ken. Adaleg neuze e oe lesanvet an "Tignouz". Mond a ra er giz-se da houlenn labour da balez ar roue. Dre druez outañ, eo kemeret, ha lakaet da zivelhwedi<sup>61</sup> kaol. Eur jardiner koz a oa eno en-devoa truez ouz an tignouz hag a ree kaoz gantañ a-wechou : ma plijas dezañ komzou ar paotr, hag e teujont emberr da veza mignoned vraz o-daou.

Degouezoud a ra ivez gouel ar briñsez yaouank.

« Red e vo deoh », eme ar jardiner koz d'an Tignouz, « mond ivez evel ar re all da zouheti he gouel d'ar briñsez. »

« Ha petra 'roin-me dezi ? »

« Eur boked ; me 'guntuillo eur boked deoh. »

Pa oe e-unan en eur horn euz ar jardin, Pipi a dennas e voest euz e hodell, rag bepred e veze gantañ, hag a lavaras :

« Dre nerz va boest, m'am-bo eun diamant euz ar haerra. » Lakaad a reas an diamant e-kreiz e voked hag eh eas gand ar re all da zouheti gouel mad d'ar briñsez, hag e lezjont oll o bokedou en he hambr. Pa oent eet kuit, ar briñsez a zellas ouz an oll vokedou, da weled pehini 'oa ar haerra. Gweled a ra eun dra o sklêrijenna e hini an Tignouz (pep hini 'oa e ano war eur paper en-dro d'e voked). Kemer a ra buan an dra-ze, ah souezet eo o kavoud eun diamant euz ar haerra gand heh ano warnañ.

« O ! », a lavaras dezi heh-unan, c'hwi 'zo unan bennag, ha nann ar pez a zebantit beza ; ez oh oh ober ho tiod, med am-bo va daoualagd warnoh. »

An Tignouz a oa ken louz ken na zebre ket gand ar jardinerien : kaset e veze e voued dezañ en eul lochenn vihan a oa er jardin.

Eun deiz, goude beza debret e lein, evel ma oa e-unan, e tennas e voest euz e hodell, hag e lavaras :

« Dre nerz va boest, ma 'm-bo eur marh du, eur hleze dir ha dillad priñs euz ar re gaerra ! »

Ha kerkent en em gavas eno an traou-ze oll hag en em wiskas en priñs. Ar briñsez yaouank a welas anezañ euz a brenest he hambr hag a ziskennas buan er jardin gand he dimezelled. Med an Tignouz he gwelas o tond, ha p'erruas ar briñsez en e gichenn, e oa gand e zillad jardiner hag e dignasenn, euzuz da weled.

« Petra ? n'hoh-eus ket gwelt eur priñs yaouank amañ ? », a lavaras dezañ.

« Eur priñs yaouank ? Nann, avad. »

Kaer he-devoe klask ha furchal, ne gavas priñs ebed. Ma retornas d'ar palez.

An deiz war-lerh, goude e lein, an Tignouz a dennas adarre e voest, hag a lavaras :

« Dre nerz va boest, ma 'm-bo eur marh glaz, eur gwiskamant alaouret hag eur hleze aour ! »

Ha kerkent e oe degaset dezañ eur marh glaz, eur gwiskamant alaouret hag eur hleze aour, hag e benn hag e zorn a oa aour ivez. Biskoaz ne oe gwelet kaerroh priñs.

Ar briñsez a oa e prenest he hambr hag a ziskennas adarre buan d'ar jardin, pa welas eur priñs ken kaer. An dro-mañ n'en-devoe ket an Tignouz an amzer da ziwiska penn-da-benn e zillad kaer, hag ar briñsez hen kavas hanter-wisket c'hoaz en priñs, hag a lavaras dezañ :

« A ! c'hwi eo eta ! Me 'ouie ervad e oah unan bennag, ha nann eun diod kêz, evel m'ho-poa c'hoant da rei da gredi. C'hwi 'vo red din da gaoud evid pried. »

Kaer e oe ober evid harz ar briñsez yaouank da gemer da bried eun tignouz, eun inosant kêz, ne dalveze ket : hennez 'oa red dezi da gaoud. Ar roue koz hag ar rouanez a oa glaharet. Diou hoar all

<sup>61</sup> da zivelhwedi : tenna kuit ar melhwed.

he-devoa ar briñsez yaouank, hag e oent eureujet o-zeir er memez deiz, unan da vab roue an Turki, hag eben da vab roue ar Pers. Eno e oe friko ha plijadur neuze, m'ho ped da gredi !

An Tignouz a ree bepred an inosant, hag oll gerent ar briñsez o-devoa mez outañ. Evel-se ivez e oe kaset gand e bried d'eur hoz kastell dilezet e-kreiz eur hoad.

Mab roue Bro-Zaoz en-devoa goulennet ivez da bried unan euz a deir merh roue Bro-Hall, ar yaouanka, hag evel n'en-devoa ket bet anezi, e oa droug ennañ hag e tisklêrias ar brezel da roue Bro-Hall. Setu savet eun arme gaer euz a bep tu.

An Tignouz a houlenn mond ivez d'ar brezel gand e zaou vreur-kaer :

« Te, mond d'ar brezel, eun inosant kêz evel-dout ? Chom er gêr gand da wreg. »

Partia 'reont heptañ.

N'oa chomet loen-kezeg ebed er palez. An Tignouz ya war-lerh ar re all war droad. Pa oa o vond gand an hent braz, e kav eur marh glaouer, treud beteg an eskern. Pignad a ra war e gein, ha da zorna anezañ. N'en-devoa na fuzuill, na kleze, na sabrenn, nag arm all ebed. P'oa o tremen e-biou eur forn a oa war ribl an hent, e tap eur skubellenn-forn, ha kuit ganti.

« Peleh ar foeltr », eme ar fornier, « eh ez-te gand va skubellenn ? »

« D'an arme, sur, da zikour ma zad-kaer. »

Ha kuit gand ar skubellenn !

Mond a ra, mond a ra dre an hentchou-treuz, kement ha kement m'en em gav ivez war an hent braz a-raog an arme. Med mond a ra e varh en eur horneugell war ribl an hent, ha n'hall ket en em denna ahane.

Pa dremenas an arme, e oa o sacha war lost e varh, en eur lavared :

« Deus alese, loen paour, deus, ma'z efom da zikour va zad-kaer d'an arme ! »

Med kaer en-devoa ober, ar marh a chome bepred er vouillenn. Ar zoudarded, o termen, a hoarze hag a lavare an eil d'egile :

« Sell, sell mab-kaer ar roue ! »

Mab roue an Turki, pa welas, en-devoa c'hoant treuzi anezañ gand e gleze.

« Ba ! lest hañ », a lavaras dezañ mab roue ar Pers ; « n'aio ket pelloh, aze e chomo ! »

Pa oent tremenet oll, an Tignouz a dennas e voest euz e hodell hag a lavaras :

« Dre nerz va boest, ma 'm-bo raktal eur marh glaz, eur gwiskamant galoñset en arhant, hag eur hleze dir a zraillo oll kement a vo lavaret dezañ ! »

Ha kerkent en em gavas gantañ an oll draou-ze. Eur paotr 'oa neuze, m'ho ped da gredi, gwisket en priñs, ha gand e vleo aour hag e zorn aour !

Mond a ra war-raog d'an daoulamm, hag e tap hep poan an arme.

« Kaerra da briñs ! », a lavare an oll. « Daoust piou eo ? »

Den n'hen anaveze.

P'en em grogas an daou enebour, e trehe ar Zaozon ; roue Bro-Hall 'oa o vond da goll, p'en em daolas an Tignouz evel eur foll e-kreiz ar Zaozon, ha gand e gleze e traille oll, hag eur rivier gwad a rede war e lerh ; evel eun diaoul e oa. Erruoud a ra dirag roue Bro-Zaoz, goloet a wad hag e gleze ruz en e zorn, hag e lavar dezañ :

« Roue Bro-Zaoz, red eo deoh sina ar peoh, pe me ho lakaio a-beziou, evel am-eus greet d'hoh arme. »

Setu nehet-braz roue Bro-Zaoz ; med ken spontet 'oa, ma sinas ar peoh evid c'hweh miz. Dond a ra neuze an Tignouz da gavoud roue Bro-Hall, ha gantañ en e zorn ar paper a oa sinet ar peoh warnañ. Gweled a ra e zaou vreur-kaer war e hent, hag e lavar deze en eur ziskouez ar paper :

« Setu amañ ar peoh, paotred, sinet gand roue Bro-Zaoz ! »

« Ro anezañ din ! », a lavaras mab roue an Turki.

« Ta, ma roez din en trok biz-meud da droad kleiz. »

Kemend a hoant en-devoa e vije lavaret penaoz 'oa eñ en-devoa gounezet an treh, ma lezas troha biz-meud e droad kleiz. An Tignouz hen kemer hag a laka anezañ en e hodell. Den n'hen anaveze bepred. Distrei a ra an arme da Bariz. Pa zegouezjont 'leh m'o-devoa gwelet an Tignouz er horneugell gand e varh pa oant o vond, e oa eno bepred er memez stad, o sacha war lost e loen, hag o lavared :



« Deus 'ta, loen paour, ma'z efom da zikour va zad-kaer d'an arme ! »

Mab roue an Turki, p'hen gwelas, a yeas kemend a zroug ennañ, ma tennas e gleze evid hen treuzi ; hag en-divije greet, ma ne vije ket bet dalhet.

« Lest an inosant paour-ze, priñs ! »

Degouezet en Pariz, e oe greet a bep seurt enoriou da vab roue an Turki, evid beza lakaet sina ar peoh.

Pa oe tremenet ar c'hweh miz, eh adkomañsas adarre ar brezel. Hga an Tignouz, o weled ar re all o partia, en-devoa c'hoant mond gante ivez, hag a lavare adarre :

« Me 'h aio ivez... me 'h aio ivez d'ar brezel, da zikour va zad-kaer. »

Med ne ree den van ebed evid hen kleved, hag e partijont oll, o lezel anezañ er gêr. Med pignad a ra war e goz marh, ha da vond war-lerh an arme ! P'oa o tremen e-biou d'an ti-forn, e kemeras adarre ar rozell-forn, ha kuit ganti. Hag ar fornier war e lerh :

« Peleh eh ez-te gand va rozell, mab ar foeltr ? »

« Da zikour va zad-kaer ar roue d'an arme ! »

Kaer en-devoe ar fornier redeg war e lerh, n'hallas ket hen tapoud. Ma tegouezas adarre, dre an hentchou-treuz, a-raog an arme ; ha, pa dremenas, e oa adarre e-kreiz ar memez korneugell, gand e varh, ar rozell-forn gantañ war e skoaz, hag e lavare :

« Deus 'ta, loen paour, deus 'ta, ma'z efom da zikour va zad-kaer d'an arme ! »

An oll a hoarze o weled anezañ, nemed e zaou vreur-kaer : ar re-ze ne hoarzent ket. Mab roue ar Pers a dennas e gleze hag a redas warnañ evid hen laza ; ha greet en-dije sur, ma ne vije ket bet harzet. Mond a reont a-raog, o lezel anezañ e-kreiz an dour hag ar fank. Neuze an Tignouz a dennas e voest euz e hodell hag a lavaras :

« Dre nerz va boest, ma 'm-bo eur marh du, eur gwiskamant priñs galoñset en aour hag eur hleze a zraillo kement a vo lavaret dezañ. »

Ha kerkent en em gav eno an traou-ze oll. Hag eñ d'ar stourm neuze, d'an daoulamm, war gein e varh du, hag eñ eur paotr ! P'erruas, e oa arme roue Bro-Hall o vond da goll. En em deuler a ra war ar Zaozon evel ar gurun ruz, e gleze gantañ en e zorn, ha, dre ma'h a, e tiskar hag e traill oll : eur rivier gwad a rede war e lerh. Degouezoud a ra adarre dirag roue Bro-Zaoz, evel eun diaoul kounnaret, hag e lavar dezañ penaoz e vo red dezañ sina ar peoh, da viken, ha paea da roue Bro-Hall tri milion ar bloaz, pe e traillio anezañ war al leh. Ma rank roue Bro-Zaoz sina. Dond a ra neuze en-dro, gand e baper en e zorn. Mab roue ar Pers a bed anezañ da rei dezañ ar paper a oa warnañ sin roue Bro-Zaoz.

« To ! to ! n'hen roin da zen ebed ! »

« Me az ped war bennou va daoulin, ro din anezañ. »

« Evid da skouarn dehou, pa 'teus kemend a hoant d'hen kaoud. »

Lezle a ra mab roue ar Pers troha e skouarn dehou, hag ar priñs dizanav (n'anaveze den anezañ bepred), a lakaas anezi en e hodell.

P'oa an arme o tistrei d'ar gêr, e weljont adarre an Tignouz e-kreiz ar horneugell. Mab roue ar Pers, hag en-devoa poan e plas e skouarn trohet, a zilampas diwar e varh, e gleze gantañ en e zorn, evid laza anezañ : mab roue an Turki a harzas anezañ d'ober.

Pa zegouezjont en Pariz, e oe sonet ar hleier oll, ha greet tantajou e pevar horn kêr. Ar roue koz a lakaas neuze ober eur pred kaer, leh ma tlee rei e gurunenn d'an hini en-devoa gounezet an treh. E zaou vab-kaer a lavare o-daou 'oa dleet deze ha n'en em glevant ket. Oll gerent ar roue hag ar rouanez, hag an oll bennou braz euz ar rouantelez a oe pedet d'ar pred-se. Gwreg an Tignouz a oe pedet ivez, med an Tignouz e oe lavaret dezañ chom er gêr. Ha koulskoude, pa oa an oll ouz taol, eh erruas ivez e sal ar pred gand e votou-koad, e zillad louz hag e dignasenn.

« Lakait al loen-ze er-mêz ! », eme ar roue hag ar briñsed, kerkent ha m'hen gweljont.

Ha tri pe bevar lakez a lampas warnañ raktal. Med hemañ a dennas neuze e voest euz e hodell hag a lavaras :

« Dre nerz va boest, ma vin gwisket en priñs gand dillad galoñset-aour euz ar haerra ! »

Ha kerkent e c'hoarvezas evel m'en-devoa c'hoantaet, hag an oll a chomas da zelled outañ, digor o genoioù gante. E wreg 'oa he daoualgad warnañ ivez, hag e soñje enni heh-unan :

« Ola ! eun dra bennag a-nevez a zo ! »

Ar roue koz a bedas anezañ d'azeza ouz taol, en e gichenn, hag eur pennadig goude e lavaras :

« Bremañ e fell din rei va hurunenn d'an hini en-deus gounezet an treh kaerra war roue Bro-Zaoz. Piou en-deus gounezet da genta ?

« Me », a lavaras mab roue an Turki.

« Ha gwir ? », eme an Tignouz.

Hag e tennas eun dra bennag euz e hodell.

« Daoust ha ne ve ket amañ biz-meud ho troad dehou ? Sellet e vo ha savet 'zo unan all deoh ? »

Med ar priñs a blegas e benn, ha ne lavaras ger.

« Piou en-deus gounezet an eil treh ? », a lavaras ar roue koz.

« Me ! », a lavaras mab roue ar Pers, med eun tammig goustadikoh eged egile.

« C'hwi ? Gwelom ha savet e ve eur skouarn nevez deoh. N'hoh-eus skouarn dehou ebed, a gredan ? Gwelom ha ne ve ket homañ hoh-hini ? »

Hag e plegas ivez e benn evel egile, ha ne lavaras ger ken.

Ar roue koz ah eas droug ennañ, hag a lavaras d'e zaou vab-kaer :

« En em dennit pell diouzin, daou zen displeal ha trubard ! It pep hini d'e vro gand e wreg, rag n'houllan ken ho kweled em falez ! »

Gwreg an Tignouz, a oa neuze eur briñsez euz ar gaerra, en em daolas neuze etre diouvreh he fried, o ouela gand ar joa. Ar roue koz a anavezas neuze penaoz 'oa e vab-kaer en-devoa gounezet diou wech an treh war roue Bro-Zaoz, hag a lakaas e gurunenn war e benn.

Hag e oe greet eur pred a-nevez, kalz kaerroh eged egile, ha kaerroh ivez eged an hini am-eus-me greet d'am hoan hirio, gand patatez ha lêze !

*Kontet gand Barba Tasel, euz bourk Plouared, miz Genver 1869.*

## Roue ar Portugal<sup>62</sup>

*Setu amañ eur gaozig koant  
Ha, va hredit, mar hoh-eus c'hoant,  
Ne vo laret enni tra gaou,  
Med, marteze, eur ger pe daou.*

Eur wech e oa eur roue er Portugal hag a oa ker koant ma soñje dezañ n'oa den ebed ker koant hag eñ war an douar. Ma c'hoantaas mond da vale bro da weled hag e kavje, en eun tu bennag, eun all ker koant hag eñ. Ne oa ket eet pell, pa welas eun tort war an hent. Hag e lavaras an tort, o selled outañ :

« Sell, sell, divalao da den<sup>63</sup> ! »

« Petra, tort », a lavaras ar roue, « c'hwi 'gav ez on eun den divalo ? »

« Ya da, evidoh da veza roue. Med mar gallfeh kaoud ar briñsez Ronkar, euz a gastell Montoban, en tu all d'an douar, neuze avad, e vefeh eun den ! »

« Petra, tort, c'hwi 'zo den da ober din kaoud ar briñsez Ronkar ? »

« Marteze a-walh. »

« Deuit ganen neuze, ma'z efom on-daou d'he hlask. »

« Me 'raio oll evel ma lavarfet din. »

Mond a ra an tort gand ar roue d'e balez.

An deiz war-lerh e lavar ar roue dezañ :

« Eom bremañ da glask ar briñsez Ronkar. »

« Ma ! Grit da genta samma eiz mul a aour hag a arhant. »

Sammet a zo eiz mul a aour hag a arhant.

« Lakait bremañ degas dim peb a varh mad, ha deom en hent. »

Degaset eo an daou varh ggwelloha a oa e marchosi ar roue, ha setu-int en hent o-daou. »

Pa oant eet eur pennad, e lakaas an tort eun dra bennag e skouarn e varh, ha kerkent e kouezas hemañ d'an douar, maro.

Hag an tort da lared d'ar roue neuze :

« 'Vidon-me ne valein ket, ha ma ne ven douget, n'in ket pelloh. »

« Deuit ganen war va marh », eme ar roue.

Setu-int o-daou war ar memez marh, ha da vond adarre. Med an tort a reas adarre eun dra bennag da varh ar roue, hag e kouezas ivez d'an douar, maro-mik.

« Penaoz ober bremañ ? », eme an tort.

« Taolom war an hent », eme ar roue, « an aour hag an arhant a zoug unan deuz ar muled, ha pignom on-daou war e gein. »

Taolet eo an aour hag an arhant war an hent, ha setu-int o-daou war gein ar mul. Dond a ra an noz, keit ha ma oant o tremen dirag eur hoad braz.

« Deom 'bazz ar hoad da dremen an noz », a lavaras an tort.

Mond a reont er hoad gand ar seiz mul sammet.

« It er bern deliou seh-se da gousked », a lavaras an tort d'ar roue, « ha me 'h aio war eur wezenn-dero, evid gweled petra a hoarvezo e-pad an noz. »

Mond a ra ar roue er bern deliou, hag an tort a bigne war eur wezenn-dero.

Goude beza greet eun hun, e tihunas an tort, o kleved trouz, hag e welas dindan ar wezenn eur gador alaouret hag eun den en e goazez e-barz ; hag en-dro dezañ e oa pemp den all warn-ugent en o zav, ha neuz fall kaer warne.

« Erru oh oll ? », eme an hini a oa azezet er gador.

« Ya, nemed ar Hamm. »

<sup>62</sup> Roue ar Portugal : Adembannet e oa bet gand J. Le Dù hag Y. Le Berre en dastumadenn Studi (N<sup>n</sup> 2), gand poelladennou, e 1977. Disheñvel a-walh eo skrid Studi diouz hini Ollivier. Ha n'am-eus ket kavet ar skrid orin...

<sup>63</sup> divalao da den : peseurt den divalo.

« Ma ! erruoud a raio ivez : bep tro e vez war-lerh. Kontit din an taoliou kaer hoh-eus greet pep hini ahanoh. »

Ha setu-int da gonta o zaoliou kaer. Oll o-devoa greet kaer pe gaerroh. Ar Hamm a erruas ivez e-keit-se.

« Erru out ivez, Kamm ? », a lavaras dezañ ar mestr.

« Ya, mestr, erru on ivez. »

« Ha te, petra a gaer 'teus-te greet ? »

« O ! eun taol deuz ar haerra. »

« Gwelom, lavar deom buan. »

« Roue ar Portugal a zo er hoad, ha gantañ seiz mul sammet a aour hag a arhant. Emañ o vond da glask ar briñsez Ronkar da eureuji. Med selaou mad, tort... »

« Tort ? », a lavaras ar re all oll. « Peleh e welez-te eun tort ? »

« A ! na rit ket a van : me 'lavar aliez geriou evel-se ha n'int netra, gouzoud mad a rit se... A-raog kaoud ar briñsez-se, az-po da ober. Honnez 'zo o chom en eur hastell kaer, etre an neñv hag an douar. Selaou mad, an Tort. »

« Med peleh emañ da dort eta ? »

« Ba ! na rit ket a van, em-eus lavaret deoh c'hoaz. Da genta e kavi eur ster ledan ha n'eus pont ebed warni. Pa vi degouezet eno, troh gand da gontell eur wialenn haleg en eur harz. Goude m'az po trohet ha peillet da wialenn, n'ankounac'ha ket bounta anezi teir gwech er harz. Neuze eh i beteg ar ster hag e skoi tri daol gand da wialenn war an dour, hag unan gand da droad war an douar, ha kerkent e savo eur pont war ar ster. Tremen buan en tu all d'an dour... Med ne vezi ket c'hoaz e penn da labour, tort kêz. »

« Arsa », eme ar mestr, « petra a gontez aze deom ? »

« Med ne welit ket 'ta ez eo an tu da vond da balez ar briñsez Ronkar ? Pa vi eet en tu all d'ar ster, selaou mad, tort, en em gavi e troad eur menez uhel ha sonn-sonn, goloet a spern hag a drez, ha ne weli hent ebed da vond warnañ. Med gweled a ri eno eur vilienn ront, ha mar gallez he sevel hag he skei gand ar menez, kerkent en em gavo eun hent kaer da vond beteg al lein. Pa vi erru eno, selaou mad amañ, tort... »

An Tort, m'ho ped da gredi, 'oa digor e ziouskouarn hag a zelaoue.

« Ba ! ro peoh deom gand da dort », a lavaras ar mestr, « ha hast buan ! »

« Pa vi erru e kreh ar menez, az-pezo da ober gand pemp-kant soudard warn-ugent, ha tri-ugent jeant. Allaz ! tort paour, amañ em-eus truez vraz ouzit. Mar gallez erruoud er hastell d'an taol a greisteiz, neuze 'vo kousket ar zoudarded hag ar jeanted, hag e vo mad da daol. Antre prim er hastell. An oll dorjou a gavi digor, rag eno n'erru ket a dud bemdez euz ar vro-mañ. En eur gambr kaer, e weli eur briñsez, kaer evel an heol, kousket war eur gwele. Na chom ket eno da zelled outi, digor da henou ganit. Bount buan da vouchouer en he genou, kemer anezi war da ziouvreh, ha deus kuit ganti, heb selled war da lerh. Med allaz ! paour-kêz, mar n'erruez ket d'an taol a greisteiz, ez eo greet ahanout. Ha setu eno an tu da vond da balez ar briñsez Ronkar. Dalh soñj mad, tort. »

An deiz a gomañse da darza, hag eh eas al laeron kuit.

Ar roue n'en-devoa klevet netra dindan e vern deliou ; med an tort n'en-devoa ket kollet eur ger a gement en-devoa lavaret ar Hamm. Diskenn a ra neuze diwar e wezenn, dihuni a ra ar roue, hag en em lakaont adarre en hent. Emberr e tegouezont e-tal eur ster vraz. An tort a denn neuze e gontell, a droh eur wialenn haleg en eur harz a oa eno, a beill anezi hag he bount teir gwech er harz, taol war daol. Ar roue, ouz hen gweled, a droh ivez eur wialenn hag en em laka d'he feillad, en eur vond, med n'en-devoa ket he bountet teir gwech er harz. Degouezoud a reont e-tal ar ster ; n'oa pont ebed.

« Amañ e rankfom chom », a lavaras ar roue.

Med an tort a skoas tri daolig gand e wialenn war an dour, eun taol gand e droad war an douar, ha setu kerkent eur pont kaer war ar ster, ha souezet-mad ar roue. Tremen a reont en tu all. An tort a sko daou daolig all war an douar gand e wialenn, hag ar pont a gouez en dour.

Neuze en em gavont e troad eur menez uhel ha sonn-sonn, ha goloet oll a spern hag a drez.

« Petra ?, war ar menez-se 'vo red pignad ? », a lavaras ar roue.

« Ya 'vad. »

« Evid neuze n'efom ket pelloh. »

An tort a zelle en-dro dezañ, o klask eur vilienn : he gweled a ra e-touez ar yeot.

« Gwall-vraz eo ! », a lavaras ennañ e-unan ; « n'ouzon ket hag e hellin sevel anezi.

Sevel a ra anezi gand kalz a boan, hag a sko anezi gand ar menez. Ha kerkent setu eun hent deuz ar haerra. Sevel a reont gantañ, ha, pa oant oh erruoud war lein ar menez, e oa just kreisteiz o son.

« Mad eo an taol ! », a lavaras an Tort dezañ e-unan.

Mond a reont dioustu d'ar hastell. Digor 'oa an oll dorjoug. Tremen a reont kalz a gambrchou, kaer pe gaeroh oll, hag eh erruont en unan kalz kaeroh c'hoaz, 'leh ma welont eun dimezell kousket war eur gwele, hag hi koant ha sklêr 'vel an heol. Ar roue a chom da zelled outi, digor e henou gantañ. Med an tort ah a raktal d'ar gwele, hag a vount e vouchouer e genou an dimezell evid na grije ket. Neuze e kemer anezi etre e ziouvreh, ha kuit ganti buan, en eur lavared d'ar roue :

« Deut war va lerh ! »

O tremen dre ar hambrchou hag ar porz, e welont ar jeanted hag ar zoudarded, hag i oll kousket mad. Ne zihun hini aneze ; n'oa ket erru ar houlz c'hoaz. Diskenn a reont ar menez. Med an tort ne zoñjas ket 'oa bet lavaret degas ar vilienn d'he leh kenta, evid ma serrje an hent war e lerh : he lezel a ra war ribl ar menez, hag an hent a chom digor.

Ar jeanted hag ar zoudarded a zihun ivez er hastell pa oe deut ar houlz. Gweled a reont eo kollet ar briñsez ; ha setu trouz ha klask er hastell ha war-dro. Pemp pe c'hweh jeant a wel an hent-braz chomet digor.

« Dre amañ eo eet kuit ! », a lavarjont.

Ha war he lerh, gand kammejou braz. An tort a glev aneze o tond, hag a lavar d'ar roue :

« Kemerit bremañ ar briñsez ivez, rag me 'zo skuiz. »

Erruont a reont e-tal ar ster. Skei a ra an tort tri daol gand e wialenn hag unan gand e droad, ha kerkent, e sav adarre eur pont war ar ster. Erru en tu all, e sko tri daol all, hag ar pont a gouez er ster. Poent 'oa ! rag e oa ar jeanted o vond da lakaad o zreid war benn ar pont, ha neuze e oant kollet ; med bremañ n'o-devoa ken galloud ebed warne. Yudal a reent ha toui en tu all d'an dour, med an tort hag ar roue a hoarze hag a ree goap oute, ar pezh o lakae da gounnari. Spontuz 'oa o hleved.

An tort, ar roue hag ar briñsez, homañ 'oa dihunet, p'oa deut he houlz, hag a gerze ivez bremañ, en em lakaas en hent evid retorn d'ar Portugal. Ma tegouezas deze tremen an noz er memez koad ha pa oant o vond. Ar roue hag ar briñsez Ronkar a gousk adarre en eur bern deliou, hag an tort a bign adarre war e wezenn-dero. Emberr, war-dro hanternoz, eh erruas adarre al laeron dindan ar wezenn. Ha pep hini da gonta d'ar mestr ar pezh en-devoa greet. Ar Hamm a erruas adarre war-lerh.

« Ola ! paotred », a lavaras oh erruoud, « eun taol euz ar haerra. »

« Petra 'zo ? petra 'zo, Kamm ? », a lavare an oll.

« Roue ar Portugal a zo er hoard, ha gantañ ar briñsez Ronkar ! Kavoud a refom anezañ pa deuiio an deiz. An tort, mar kar diwall, ah aio c'hoaz d'ar gêr. Kerkent ha ma vo eet er-mêz ar hoard, e tegouzo gantañ eur harroñs kaer, hag ar postillon a lavaro d'ar roue ha d'ar briñsez Ronkar mond e-barz ; med ma'h eont 'barz ar harroñs-se, ar roue hag an tort a vo kaset gantañ d'an ivern, hag ar briñsez a retorno d'ar hastell, 'leh ma oa dindan gazel-gê. Pelloh, e tegouezfont gand eur stank hag e welfont e-barz eun den prest da veuzi hag a houlenno sikour digante ; med mar fell deze hen tenna diouz an dour, ar roue hag an tort ah aio kerkent d'an ivern, hag ar briñsez a retorno d'ar hastell, gand ar jeanted. Pelloh c'hoaz, e kavfont eur wrañh koz, ha ganti a bep seurt bonbonigou ha traou mad : ar briñsez he-devo c'hoant braz da gemer eun dra bennag diganti, med mar kemer an disterra tra, ar roue hag an tort ah aio kerkent d'an ivern, hag hi da gastell ar jeanted.

An tort a zelaoue mad war e wezenn.

Pa strinkas an deiz, al laeron en em skignas dre ar hoard, lod du-mañ, lod du-hont, da glask roue ar Portugal hag ar briñsez Ronkar : n'ouient ket 'oant ken tost deze. An tort a ziskennas neuze diwar e wezenn, hag a zihunas ar roue hag ar briñsez, hag en em lakajont adarre en hent.

Kerkent ha ma oent eet er-mêz euz ar hoard, e weljont eur harroñs kaer, hag ar postillon a bedas ar roue hag ar briñsez da bignad e-barz. Ar re-mañ ne houlenent ket gwelloh, med an tort, gand e wialenn haleg, en-devoa miret, a roas eur wialennad d'ar postillon a-dreuz e fas, hag eh ejont a-raog. N'oant ket eet gwall-bell pa glevjont unan o krial :

« Sikour ! sikour ! forz va buhez ! »

Hga e tegouezjont emberr gand eur stank 'leh ma weljont eun den prest da veuzi, hag hennez eo a grie er giz-se.

« An den paour ! red eo sikour anezañ ! », a lavaras ar roue hag ar briñsez.

« Nann ! nann ! na selaouit ket ; a-raog ! a-raog ! », a lavaras an tort.

Neuze e kavjont eur wrañ koz, ha ganti eur banerad pasteziou ha traou mad a bep seurt.

« Kemerit eur wastell, itron », a lavaras d'ar briñsez ; bikoaz n'hoh-eus debret netra ken mad ! »

E oa ar briñsez oh astenn he dorn, evid kemer eun dra bennag, pa zeredas an tort, a roas eun taol troad er baner hag a stlabezas oll war an hent, er poultr. Hag ar wrañ koz da vallozi ; hag droug er roue hag er briñsez.

« Da betra, tort an diaoul », a lavare ar roue, « 'teus-te greet se ? Ne welez ket penaoz ar briñsez he-devoa c'hoant debri eun dra bennag, ha me ivez. »

« Diwezatoh e lavarinn deoh. Dalhom da vond bepred. »

Ankouaet 'm-oa lavared penaoz ar Hamm, er hoard, en-devoa divennet ouz an tort lavared netra ebed d'ar roue euz a gement en-devoa klevet, pe e vije troet an hanter euz an traoñ anezañ en marbr, hag an hanter euz kreiz a chomje evel ma oa, med e taolje tan dre e henou, dre e fri ha dre e zaoulagad.

Degouezoud a reont o-zri gand eun ostaleri war vord an hent, ha naon braz deze. Debri ha kousked a reont eno, hag an deiz war-lerh ar beure e kemeront eur harroñs all evid o has beteg palez ar roue.

Neuze e oe eureujet roue ar Portugal d'ar briñsez Ronkar, kaerra priñsez a oa dindan lagad an heol, hag e oe neuze festou ha goueliou euz ar haerra.

A-benn nao miz goude, ar rouanez a hanas eur mab bihan euz ar haerra.

An tort a oa chomet gand ar roue en e balez, hag a oa e vignon brasa. Aliez e komzent euz o beaj da gastell ar jeanted, hag ar roue a houlenne digantañ pep tro penaoz 'oa deut a-benn da lakaad pep tra da zond da vad. An tort a gave peb gwech eun dro bennag, ha ne lavare ket dezañ. Med c'hoant ar roue da houzaud ne ree nemed kreski bemdez. Eun deiz eh eas da gambr an tort, eur bistolenn gantañ en pep dorn, hag e lavaras dezañ :

« Red eo dit lavared dioustu, pe n'eus nemed ar maro evidout ! »

« Evel-se e fell deoh ma faea euz a gement am-eus greet evidoh ? »

« A ! ne dalv ket ; lavar din dioustu, pe out maro. »

« Ma ! eh an da lavared deoh ; med keuz ho-pezo goude. »

Hag e lavaras dezañ. Kerkent ha ma komañsas da gomz, e komañsas ivez da drei e marbr ; e dreid da genta, goude e ziouharr, e ziouvorzed. A-benn 'oa fin dezañ da gomz, e oa marbr beteg e zargreiz, hag e taole tan dre e henou, dre e fri ha dre e zaoulagad. Euzuz 'oa da weled !

Setu glaharet ar roue, o weled petra 'oa c'hoarvezet gand e vignon brasa. Bemdez eh ee da weled anezañ, ha ne ree nemed gouela o weled ar poaniou en-devoa. Ne ouie petra d'ober. ma lavaras eun deiz :

« Ma ! red eo din mond c'hoaz d'ar hoard ; marteze e welin ar Hamm, hag e lavaro din penaoz ober. »

Mond a ra d'ar hoard, anaoud a ra ar wezenn-dero war an hini<sup>64</sup> e pigne an tort, hag e pign ivez warni. War-dro hanternoz, eh erruas adarre al laeron. Ha pep hini da lavared d'ar mestr ar pez en-devoa greet. Ar Hamm a lavaras d'e dro :

« Roue ar Portugal a zo adarre er hoard, paotred ! »

« Ba ! ro peoh dim gand da roue ar Portugal : ne rez nemed ober goap ahanom ! », a lavaras an oll.

<sup>64</sup> war an hini : war behini, er skrid orin.

« Pa lavaran deoh, emañ er hoad ; hag evid sovetaad e vignon an tort, a zo troet eun hanter anezañ en marbr, e vo red dezañ laza e vabig, diwada anezañ evel eur porhell bihan, strinka ar gwad war an tort, ha kerkent e teuo en e stumm kenta. »

Ne zelaoue den ar Hamm, nemed ar roue : hennez hen selaoue mad.

Pa darzas an deiz, al laeron a yeas kuit, hag ar roue a ziskennas diwar e wezenn, hag a zistroas d'ar gêr. Setu ma oa nehet, hag e lavare dezañ e-unan, penn-da-benn an hent :

« Laza va bugel, eur mabig ker kaer ! Biken ne rin se ! Ha koulskoude ar paour-kêz den-ze ! Ranna 'ra va halon, pa zoñjan ennañ ! »

Erruoud a ra er gêr ; mond a ra da weled an Tort. Er memez stad 'oa bepred. Nehamant en-devoa, ha gouela 'ree ; netra ne deue a-benn d'hen frealzi. Ma lavaras eun deiz :

« N'hallan pelloh beva evel-se ! Red eo din delivra va mignon kêz an tort. »

Kemer a ra eur gontell, hag eh a evid laza e vab. Med mankoude a ra ar galon dezañ, hag e teu war e giz. Distrei a ra eur wech all, mouchet e zaoulagad, hag e troh e hougl d'e vugel paour. Dastum a ra e wad en eur bezel hag e red da deurel anezañ war an tort. Kerkent hemañ a baouez da deurel tan, ar marbr a zo troet en kig, ha setu-eñ deut adarre d'e stumm kenta. En em strinka a reont an eil en diouvroh egile, hag ar roue a lavar :

« Sell, va mignon, evel ma'z karan ! Laza va mabig evid da zelvra ! »

« Ya, va haroud a rit sur ; med ho mab n'eo ket maro ; eom d'hen gweled. »

P'errujont er hambr, e oa ar bugel en e gavell, hag eñ sart-mad, hag o c'hoarzin ouz e dad.

Braz 'oe joa ar roue, a hellit kredi.

Neuze e oe greet festou ha c'hoariou euz ar re gerra, hag abaoe n'em-eus ket klevet euz o doare.

*Kontet gand Frañseza Ar Hroseur, gwreg Bizi, euz a Venah ; miz Genver 1869.*

## Ar peroked sorser

*Eur wech e oa, eur wech a vo,  
Komañsamant an oll gaozo',  
N'eus na mar na marteze  
En-deus tri zroad an trebe'.*

Eur wech e oa eun intañvez koz ha paour, hag he-devoa tri mab. An tri baotr-mañ ah ee bemdez da glask boued, hag o mamm a chome er gêr, da neza tammou neud da werza. M' o-devoa kalz a boan o veva o-fevar.

Ma lavaras eun deiz an tri mab d' o mamm :

« Ni, mamm, ma veh kontant, a yelo bremañ da vale bro, pell, pell, ha, pa zistrofom, ni 'vo pinvidig hag a zegaso deoh kalz a arhant. »

« Jezuz ! va bugaligou paour, yaouankig oh c'hoaz. Bihanig dreist-oll, hag em-eus aon e tegouezfe droug ganeoh. »

Bihanig 'oa ano ar yaouankañ.

« Ba ! mamm », a lavaras Bihanig, « n'ho-pet morhed ganen-me, me 'n em denno koulz ha hini euz va breudeur hag evidon da veza bihan, n' on ket aonig. »

« Ma ! va bugaligou kêz, it neuze en gras Doue. Setu aze peb a hweh real : va oll arhant int. »

Hag e kimiadjont diouz o mamm, hag eh ejont en hent o-zri asamblez. Goude beza baleet e-pad tri devez<sup>65</sup>, en em gavjont eun abardaez e-kichenn eur hastell, e-kreiz eur hoad braz. Skei a reont war an nor : digoret eo dezo :

« Petra 'houlenit », eme ar porzier.

« Beza repuet evid an noz. »

« Allaz ! kouezet fall oh, bugaligou paour : amañ zo o chom tri jeant ha teir jeantez koz ha teir yaouank, hag ar re-ze a zebr kement kristen a zegouez en o hastell. »

« Jezuz ! », eme an daou baotr henañ, eom kuit buan. »

« Ma feiz ! », eme Bihanig, mar deo red dim beza debret, n'eus ket a forz kaer pe gand ar jeanted pe gand ar bleizi. »

Ar hoad 'oa leun a bep sort loened gouez hag a bep tu e klevent bleizi o yudal.

Antren a reont. Pa zegouezjont er gegin, e oa eur hristen o rosta war ar ber. Eur jeantez koz a oa eno hag a lavaras deze :

« Ra viot deuet mad, va bugaligou ! Tostait da domma. »

An daou henañ a zouze a-dreñv hag a grene gand an aon ; Bihanig a azezas war ar skabell e korn ar fornigell. Pa oe aozet koant, e oe lavaret d'ar vugale dond ivez ouz taol gand ar jeanted hag ar jeantezed, hag ar jeant braz a zispennas ar hristen rostet, hag a roas e damm da bep hini Ar jeanted hag ar jeantezed a lonke, hag a lipe o bizied hag o beg ; Bihanig a ree van da zebri ivez, med teurel a ree dindan an daol kement a veze lakaet dezañ war e blad ; e zaou vreur a oa trist-meurbed, ha gwenn evel lien an doubier, ha ne zebrent tamm.

« Te », eme ar jeant braz da Vihanig, « a gavan a zo eur paotr kaloneg, hag a blij din. Chom a ri da vevel ganen ? »

« Ya a-walh. »

« Ma ! deus ganen, ma tiskouezin dit an traou kaer a zo er hastell-mañ. Sell aze, da gentañ, eur peroked ha n'eus ket e bar war an douar : hennez a lavar din kement a dremen hag a vez greet 'barz va zi. Sell amañ bremañ eun dremedal hag a ra kant leo beb eurvez<sup>66</sup>. Eun esterloup am-eus c'hoaz, ha pa vez laaket war lein an ti, e sklêrijenn e-kreiz an noz evel an heol da greisteiz. »

C'hoaz e tiskouezas dezañ kalz a draou kaer pe gaerroh oll.

« Chom ganen da vevel, ha ne vanko netra dit amañ. 'Vid da zaou vreur, ar re-ze a vo debret warhoaz da zijuni ! »

<sup>65</sup> devez : tri deiz, er skrid orin.

<sup>66</sup> beb eurvez : beb eur, er skrid orin.



Bihanig hag e vreudeur a oe lakaet er memez kambr da gousked. Er gambr dindan e kouske an teir jeantez yaouank, ha m' o hlevent gand o haoz :

« Eun druez eo laza an tri baotrig-se », a lavare unan.

« Ya, med gwella da zijuni a refom gante warhoaz ! », a lavare eun all.

« Ne glevit ket, paotred ? », eme Vihanig d' e zaou vreur.

Ar re-mañ ' oa prest da vervel gand an naon.

Emberr e klevjont ar jeantezed o tirohal. Bihanig a zavas neuze eur plankenn euz ar solier, a ziskennas e kambr ar jeantezed, hag a drohas o gouzoug deze o-zeir. Neuze e savas adarre er gambr euz kreh, hag e lavaras d' e vreudeur :

« En hent bremañ, paotred ! ha prim, ha goustadig ! »

Ma stagjont liñseliou o gweleou war ar prenest, evid diskenn ; med al liñseliou a oa re verr, hag ar paotr henañ, o koueza, a dorras e vorzed. Bihanig hen kargas war e chouk, hag hen kasjont d' an ti kenta a gavjont. Bihanig a lavaras d' an ozah :

« Grit mad d' on breurig paour, en-deus torret e vorzed ; ni ya on-daou en eun dro on-eus d' ober, ha pa retornfom, e rofom deoh aour hag ar arhant ar pez a houlennfet. »

« Greet ' vo dezañ euz on gwella », eme an ozah.

Hag setu Bihanig hag e vreur en hent war-zu Pariz.

An deiz war-lerh ar beure, ar jeant braz, souezet o weled ne ziskenne ket ar jeantezed yaouank da zijuni, a bignas d' o hambr, o soñjal ' oant manet kousket. Med pa zigoras an nor ha pa welas, en em lakaas da vlejal evel eur hole-taro. Ar re all, pa glevjont, a redas ivez d' ar gambr, ha ma oe eno neuze trouz ha garm spontuz. Mond a ra ar jeant braz da gavoud e beroked :

« Peroked sorser, lavar din,

Petra ' zo nevez ' barz va zi ? »

Ar yaouanka euz an tri bugel hoh-eus lojet an noz tremenet, anvet Bihanig, hennez en-deus greet an taol.

« Peleh emañ ? »

« Eet eo kuit, gand e zaou vreur. »

« Mar hen tapan ! ! »

Hag ar jeanted, o-zri, war e lerh. Med war-lerh e oant !

Bihnaig hag e vreur a erruas en Pariz, eun dro bennag ivez, ha raktal eh ejont da balez ar roue. Skei a reont war an nor :

« Petra a houlennit ? », eme ar porzier.

« Labour. »

« Labour ? Antreit neuze, da vevel ' zo a-nevez eet kuit. »

Ma oe lakaet Bihanig da hwennad ar jardinou, hag e vreur da faouta koad.

Ar roue, o vale dre ar jardinou, a welas eun deiz Bihanig, ha dre m' hen kavas dihun ha stummet-mad, e chomas eur pennadig da gaozeal gantañ. An deiz war-lerh, memez tra. Kement e plijas dezañ, m' hen kemeras da baotr a gambr. Hag e veze neuze bemdez o vale gand ar roue hag e verh. Ar roue a gemere plijadur o tivizoud gantañ, ha ma kontas Bihanig eun deiz ar pez ' oa c' hoarvezet gantañ e ti ar jeanted.

« Er hastell-ze, avad, aotrou roue, a zo traou kaer ! Eno zo eun dremedal hag a ra kant leo beb eurvez<sup>67</sup>, eun esterloup hag a sklêrijenn an noz evel an heol da greisteiz, hag eur peroked hag a lavar d' e vestr oll kement a dremen ' barz ar hastell ! »

Ar briñsez yaouank a zelaoue, hag a lavaras d' he zad :

« Me, avad, va zad, a garfe kaoud ar peroked-se ! »

« Ba ! va merhig kêz, penaoz ' fell dit ' ve gallet kaoud ar peroked-se, gand an tri jeant a zo er hastell ? »

« Marteze, va zad ! Goulennit digand ar pach<sup>68</sup> Bihanig. »

« Kredi a ra deoh, pach Bihanig, e ve gallet kaoud ahane ar peroked-se ? »

<sup>67</sup> eurvez : eur, er skrid orin.

<sup>68</sup> pach : galelg. floh.

« Gwall-ziêz e ve, aotrou roue, ha koulskoude, evid ober plijadur deoh ha d'ar briñsez, on kontant da êsa, mar roit din ar pezh a houlennin. »

« Ya sur, goulennit ar seurt a garfet, ho-pezo mar be gallet. »

« Ma ! n'hoh-euz nemed rei din samm eur mul a aour hag a arhant, hag eh êsain an taol. »

« Roet 'vo deoh. »

An deiz war-lerh ar beure e parti Bihanig gand e vul. Mond a ra da genta d'an ti 'leh m'en-devoa lezet e vreur klañv. »

« Penaoz e ya va breur ? », emezañ.

« Mad a-walh, dre hras Doue ; prestig e kerzo heb flahiou. »

Briata a ra e vreur, lezel a ra e aour hag e arhant gand an ozah evid hen trugarekaad euz ar boan en-deus bet gantañ, kemer a ra beh e vul a win-ardant hag a gasis<sup>69</sup>, hag eh a adarre en hent. Erruoud a ra e-tal ar hastell, hag e sko war an nor.

« Petar 'houlennit ? », eme ar porzier, dre doull an draf.

« Beza lojet, mar plij. »

« Tremenit hoh hent. Amañ ne vez lojet den ebed, abaoe an taol en-deus greet ar Bihanig. »

« Petra 'ta en-deus greet ar Bihanig, an den fall-ze ? »

« Tremenit hoh hent, pa lavaran deoh. »

Hag ar porzier o vond da zerri an draf.

« Selaouit 'ta, paeron, me 'm-eus amañ a bep seurt evajou mad ; stokom asamblez ha kaozeom eun tammig. »

Hag e roas dezañ eur werennad vad a win-ardant, hag eun all, hag eun all : kement ha kement ma evas teir boutailad gwin-ardant ha teir boutailad kasis, ha setu-eñ mezo-mik-dall. Bihanig a antre neuze êz ; mond a ra d'ar marchosi hag e vezv ivez ar baotred-varchosi, hag e tegas gantañ an dremedal, rag n'hellas ket kaoud ar peroked an dro-ze. Mond a ra kuit buan, ha ne oe ket pell o tegouezoud en Pariz, 'leh ma oe degemeret mad gand ar roue hag ar briñsez, petra bennag n'oa ket deut gantañ ar peroked ; koulz 'oa gante bremañ an dremedal.

Diouz ar beure, pa zavas ar jeant braz, eh eas evel bemdez da weled e beroked :

« *Peroked sorser, lavar din,*

*Petra 'zo nevez 'barz va zi ? »*

« Bihanig adarre en-deus laeret an esterloup ! », a lavaras ar peoked.

Hag ar jeanted, pa glevjont, da vallozi ha da yudal, ha da hoantaad mond war-lerh al laer ; med 'vel ne welent takenn, n'halljont biken mond er-mêz ar hoad, ha ne reent neemd steki ouz ar gwez ha ruillal.

Pa zegouezas Bihanig gand an esterloup, e oe eur joa vraz outañ, ha ma oe greet eur fest kaer, ha goude e oe dañsou 'barz ar jardinou e-pad an noz, rag an esterloup a oe lakaet war dourell uhella ar palez, hag e sklêrijenne eul leo tro-dro, evel an heol da greisteiz. Beb noz e vije lakaet an esterloup war an dourell uhella, hag a beb bro euz ar bed e teue rouanez ha priñsed d'hen gweled, ha da houlenn ar briñsez da zimezi.

« Ma ! va zad », a lavaras ar briñsez eur pennad goude, mar gallfeh kaoud bremañ peroked ar jeanted, ho-pefe kaerra tri burzud a zo war an douar ! Bihanig, p'en-deus degaset deoh an dremedal hag an esterloup, a zeuio a-benn da gaoud ivez ar peroked sorser. »

« Se 'zo gwir a-walh, va merhig kêz. Med petra 'rofom ivez da Vihanig evid an oll boan en-deus bet ganim ? Hen kemer a rafes a-walh da bried ? »

« Ya, va zad, ma tegas dim ar peroked sorser. »

Ha, 'vid troha berr, setu kaset adarre Bihanig da gerhad ar peroked sorser, ha lavaret dezañ en-devo ar briñsez da bried ma teu a-benn euz e daol. Partia 'ra adarre gand eur mul sammet a aour hag a arhant ; lezel a ra, evel an troiou all, an aour hag an arhant en ti 'leh ma oa e vreur, a oa yahmad bremañ, hag eh a etrezeg ar hastell. Med morheduz-braz 'oa an dro-mañ.

« Penaoz 'n em gemer ? », emezañ. « Aon braz 'm-eus na retorfen ket an dro-mañ Med ivez kaoud ar briñsez da bried ? En gras Doue, goude oll ! »

<sup>69</sup> gasis : galleg. Eun doare gwin-ardant.

Erruoud a ra 'barz ar hoad a oa e-tal ar hastell. Gweled a ra eno eur paotrig o vesa deñved, hag e lavar dezañ :

« Kerz da gerhad din eun tammig tan d'ar hastell-ze, va faotrig, evid tana va horn-butun, ha me 'roio dit eur pez daou skoed. »

Ar paotr a gemer ar pez daou skoed , hag a red d'ar hastell. E-keit-se, Bihanig a dap unan euz an deñved, hag hen kas pelloh e-touez ar raden hag ar strouez. Eno e kign an dañvad, ha pa oe degouezet an abardaez, en em vesk gand an deñved all, hag eh antre gante 'barz ar hastell, heb ma ouias netra nag ar mesaer nag ar porzier.

Ar jeant braz a ya da gavoud e beroked, a-raog mond da gousked, bremañ eh ee diou wech bemdez, diouz ar beure, hag a-raog mond da gousked da noz, hag e lavar dezañ :

« *Peroked sorser, lavar din,  
Petra 'zo nevez 'barz va zi ?* »

« Emañ Bihanig adarre 'barz ar hastell ! », a lavar ar peroked.

« Peleh 'mañ 'ta ? »

« En kraou an deñved, kuzet dindan krohenn eun dañvad en-deus kignet. »

Hag ar jeant da redeg da graou an deñved, ha da glask, ha d'o zastonad. N'hen kav ket, hag e tistro da gavoud ar peroked.

« N'hen kavan ket en kraou an deñved. »

« Pa lavaran deoh, emañ eno ; klaskit c'hoaz, ha diwallit mad ! »

Hag e retorn adarre ar jeant d'ar hraou, hag e taston an oll deñved, an eil goude egile. Lakaad a ra e zorn war unan, hag e chom e grohenn en e zorn :

« Ola ! », emezañ, « krog on ennañ ! »

« Allaz ! Bihanig kêz, tapet out an dro-mañ ! », a lavar ivez Bihanig outañ e-unan.

Hag e tegas ar jeant anezañ d'ar gegin, dre e vleo, hag e lavar :

« Setu amañ al laer ! An dro-mañ eo greet outañ ! Penaoz hen debrfom ? »

« En rost », eme ar re all.

« Ya, en rost, ha raktal. »

Ma oe ereet gand eur gordenn, ha diwisket en noaz ha taolet eno en eur horn euz ar gegin, da hortoz lakaad anezañ ouz ar ber. Ar jeantez koz a oa oh aoza koan a oa chomet heh-unan, hag e oa o trailla skillou da ober tan.

« Nag a boan a gemerit ganen-me, mamm-goz ? », a lavaras Bihanig dezi. « Mar karit va dieren eun tammig, me a zraillo skillou deoh ? »

Setu ma'z eo dierenet gand ar jeantez koz. Kerkent e krog er vouhal hag e tiskarg eun taol ker pounner war he fenn, ma chom sahet ar vouhal e-barz, hag e kouez d'an douar evel eun ejen badaouet. Neuze e red d'ar peroked, hen paka 'ra en eur sah, ha kuit gantañ !

Pa deu ar jeant braz d'ar gegin da houlenn doare ar rost, pa wel e wreg lazet hag e beroked laeret, en em laka da yudal, ken a grene ar hastell gantañ. Ar re all a zeredas, pa glevjont, hag e oe eno neuze eun trouz spontuz !

Pa zegouezas Bihanig e Pariz gand ar peroked sorser, e oe ker kontant ar roue, ma pokas dezañ, hag ar briñsez ivez, hag e lavaras :

« Te, Bihanig, n'a-teus ket da bar war an douar. A-vremañ da zellan evel ma mab-kaer, ha, pa gari, e vo greet an eured. Ha koulskoude, a-raog, em-befe c'hoant da weled maro an tri jeant hag an diou jeantez a chom c'hoaz, rag keit ha ma vefont beo, ne vin ket en peoh, hag em-bo bepred aon na deufent da 'n em veñji. »

« Ma ne houlennit ken nemed se, aotrou roue, e vo greet prim ho c'hoant. Grit ober din eur harroñs en houarn oll, hag ar hreñva ma vo gallet. An nor a dleo serri he-unan, pa yelo unan bennag 'barz ar harroñs, hag heb ma vo gallet he digeri. Roit din c'hoaz c'hweh a gezeg euz ho re wella, ha va lezit d'ober neuze. »

Pa oe greet ar harroñs evel m'en-doa lavaret, Bihanig a bartias gantañ. Erru 'barz ar hoad, e-kichenn ar hastell, e tigor dor ar harroñs, hag e pign war eur wezenn-dero a-uz, da hortoz.

Emberr, pa oe debret lein er hastell, e teuas an tri jeant hag an diou jeantez da vale er hoad.

« Sell kaerra da garroñs<sup>70</sup> a zo du-hont ! », a lavaras ar henta hen gwelas.

« Tostaom da zelled. Daoust da biou eo ? »

« Digor eo an nor ! »

« Kaerra ma eo an diabarz !<sup>71</sup> »

« Eom e-barz ! »

Setu ! o-femp 'barz ar harroñs. Bihanig a ziskenn kerkent diwar e wezenn-dero ha da foueta kezeg ! hag en hent 'trezeg Pariz. Spontuz 'oa klevet ar hri hag ar garm hag ar malloziou a oa 'barz ar harroñs ; med kaer o-devoa ober, n'hallent ket dond er-mêz.

Pa zegouezont e palez ar roue, e oe greet e-kreiz ar porz eun tantad braz, ha lakaet ar harroñs houarn en e greiz. Daouzeg karrad keuneud a oe devet en-dro dezañ.

Eno e oe klevet neuze eun trouz euzuz, ha 'vel ne dle ket beza euzusoh en ivern !

Bihanig a oe dimezet da verh ar roue, ha gounezet a-walh en-doa anezi, me 'gred !

E vamm hag e zaou vreur a oe ivez euz an eured, hag e vevjont oll evuruz assemblez.

Ar festou, an dañsou hag ar c'hoariou a badas pemzeg deiz, ha me 'gred penaoz n'oa eno na yod-kerh, na patatez, evel am-bez-me bemdez evid oll friko !

*Kontet gand Barb Tasel, Plouared ; miz Kerdu 1868.*

---

<sup>70</sup> kaerra da garroñs : pegen kaer eo ar harronns !

<sup>71</sup> Kaerra ma eo an diabarz !: pegen kaer eo an diabarz !

# Merh markiz Koadleger, pe Fañch Kreñv, Yann Koveg, Youenn ar Reder, ha Job al Lagadeg.

*Kement-mañ 'oa d'an amzer  
Ma oa-devoa dent ar yer.*

Eur wech e oa eur markiz o chom e maner Koadleger, hag a oa manet intañv gand teir merh. Eur mab en-devoa bet ivez, med marvet 'oa d'an oad a driweh vloaz.

Ma savas brezel a-greiz-oll, hag e rankas mond d'an arme, rag, siwaz ! e garg hen goulenne... Pa oe fin d'ar brezel-ze, e tistroas d'ar gêr. Pa oe degouezet e bourk Louargad, en antreas en eun ostaleri, hag e houlennas penaoz 'oa ar bed en Koadleger.

« Nikun n'her goar », eme an ostizez, « rag an teir merh yaouank a zo eno ne zegemeront den, abaoe ma zo eet o zad d'ar brezel, ha ne glever gwech ebed komz aneze. »

Ar markiz koz a bignas neuze war e varh, hag a gemeras hent maner Koadleger. P'erruas, 'oa serret an noz hag e skoas war an nor.

« Piou 'zo aze ? », a oe goulennet euz eur prenest.

« Eun tremeniad kêz, kollet gantañ e hent ; m'ho-pefe ar vadelez d'hen repui evid an noz ? »

« Amañ, va den paour, ne vez lojet den ebed. »

« En ano Doue, digorit din ; me 'roio kelou deoh euz ho tad. »

« Antreit, neuze. »

Hag e oe digoret dezañ. Kastizet ha koseet e oa, ha n'anaveze ket e verhed anezañ, ha koulskoude e sellent, hag o halon a domme outañ. Med ar markiz koz n'hallas ket en em vired pelloh hag e lavaras :

« Me eo ho tad ! »

Ha kerkent, setu-int d'en em vriata ha da ouela gand ar joa.

Med allaz ! a-boan e oant bet tri miz asamblez, ma tegouezas lizer digand ar roue da lavared d'ar markiz koz distrei raktal d'an arme, e oa disklêriet ar brezel a-nevez. Ha setu-int glaharet oll, a-greiz ma oant en o joa vrasa.

« Ma vije beo c'hoaz va mab », eme an tad paour, « e vije eet d'ar brezel em leh, hag e vijen chomet er gêr ganeoh, va bugale gêz ! »

Ha ne reent bemdez nemed gouela.

« Me, va zad », a lavaras eun deiz ar verh henañ, « a yelo d'ar brezel en ho leh. »

« Petra 'larez, va merh paour ? Se n'hall ket beza. »

« Eo, eo, va zad ! Deskit din eun tammig c'hoari an armou, me 'lvaro e vezin ho mab, ha pa'm-bezo gwisket ho tillad brezel, den ebed n'ouezo 'vin eur plah. »

Kement e talh war he zad, m'he lez da vond. Mond kuit a ra eur beure war eur marh kaer, ha hi heñvel-mad ouz eur brezeler. Med he zad a ya en he raog, a-dreuz ar parkou hag en em guz dindan ar pont war ster al Leger, dre beleh e ranke tremen. Kerkent ha m'he hlevas o tond war ar pont, e laoskas eun tenn fuzul hag e krias : « Qui vive ? ». Ma oe spontet ar plah ; ha hi o trei brid he marh, ha d'ar gêr buan. He zad a redas ivez a-dreuz ar parkou hag a erruas en he raog.

« N'out ket eet pell, va merh paour ! », a lavaras dezi, p'he gwelas o tond.

« O ! va zad, pa oan o vond da dremen pont al Leger, e oa eno eur bagad soudarded, a zo en em lakaet da denna warnon, hag evel m'oan va-unan, ez on deredet d'ar gêr. Dre hras Doue, n'em-eus bet droug ebed. »

« Mad a-walh 'teus greet, va merh. Kerz buan da gemer da zillad plah. »

An eil merh a houlenn mond kuit an deiz war-lerh. Kaer en-devoe he zad laavred dezi e c'hoarvezje ganti evel gand he c'hoar henañ hag e tistroje emberr :

« A ! ne dalv ket », emezi, red 'vo din mond ; me n'on ket ken aonig-se. Gweled a refet ! »

Setu ma wisk eta an dillad soudard dilezet gand he c'hoar hag e pign war varh, ha kuit. He zad a ya adarre d'ar red a-dreuz ar parkou hag en em guz dindan ar pont. Pa glev treid ar marh o tond warnañ, e tifluk en eun taol, hag e tiskarg e fuzul, en eur lavared :

« Ar yalh pe ar vuhez ! »

Hag ar plah d'ar gêr, d'an daoulamm, evel eben. He zad a oa erru en he raog, hag a lavaras, p'he gwelas :

« Setu-te distro 'ta, va merh ! Lavaret mad em-oa dit. »

« O ! va zad paour, eur bagad laeron a oa dindan pont al Leger hag o-deus tennet warnon gand o fuzuillou ! N'hoh-eus ket klevet an trouz ? Darbet eo bet din beza lazet. »

« Ma ! kerz d'en em ziwiska. Warhoaz ar beure 'vo red din mond va-unan ; aon am-eus c'hoaz da veza re ziwezad. »

An deiz war-lerh ar beure, ar verh vihanna a houlenn mond ivez d'he zro.

« Te ivez, va bugelig paour ? Sell a zo c'hoarvezet gand da ziuo hoar. »

Med kaer en-devo he zad lavared evid he distrei, red e oe dezañ he lezel da vond kuit. Mond a ra adarre da guza dindan ar pont, ha, p'oa e verh o tremen, e tiskargas e fuzul, en eur lavared :

« Ar yalh pe ar vuhez ! »

Med homañ ne spontas ket hag, e-leh distrei d'ar gêr, en em lakaas da zorna he marh gand eur wialenn a oa ganti, ha kuit d'an daoulamm ruz.

« Ola ! », eme he zad, « homañ a yelo pell ! »

Hag e tistroas laouen d'ar gêr.

Pa oe erru ar plahig yaouank eur pennad en tu all d'ar pont, e lakaas he marh d'e gammed, hag e tegouezas ganti eur warhig koz, daoubleget war he baz.

« Demad dit », emezi, « merh vihan markiz Koadleger ! »

« Ha deoh ivez, mammig koz. »

« Bez' az-pefe ar vadelez d'am zikour da dremen an dour ? »

« Ya, sur, mamm-goz. »

Hag e tiskennas, evid he sikour da bignad war he marh, hag e tremenjont eur waz-dour a oa eno. Degouezet en tu all, e tiskennas ar wrah hag e lavaras :

« Va bennoz dit, merhig vihan markiz Koadleger, ha, ma'z-pefe biken ezomm a zikour, evel az-pezo, goulenn Gwrah-koz an *Inkonu*<sup>72</sup>, ha kerkent en em gavin.

« Trugarez, mammig koz. »

Hag ar wrah a yeas kuit, hag hi a zalhas gand he hent.

Eun tammig pelloh, o tremen dre eur hoad, e welas eur paotr o keneuta.

« Petra 'rez aze, va faotr ? », a lavaras dezañ.

« Klask keuneud d'am mamm a zo er gêr. »

« Pe ano az-teus ? »

« Fañch Kreñv. »

« Kontant out da zond ganen ? »

« Peleh ? »

« D'an arme. »

« Petra eo se ? »

« D'ar brezel. »

« A ! ya, d'en em ganna, ne houlennan ket well ; med va mamm he-deus ezomm ahanon. »

« Sell aze evid da vamm. »

Rei a ra dezañ peziou aour.

« Petra 'raio va mamm gand ar boutonou melen-mañ ? »

« Peleh emañ da vamm ? »

« Du-hont, 'barz al lochenn. »

Mond a ra gantañ beteg e vamm.

« Demad deoh, mamm-goz. »

<sup>72</sup> inkonu : galleg "inconnue"

« Ha deoh ivez, aotrou. »

« Kontant 'vefeh e teufe ho mab ganen ? »

« Jezuz ! aotrou kêz, ha penaoz 'rin-me neuze evid beva, koz ha dinerz evel ma'z on. »

« Setu amañ peadra da veva, keit ha ma vezo ho mab ganen. »

Hag e roas dezi eun dornad aour.

« Trugarez, ha bennoz Doue deoh, va aotrou mad ! Bezit fur ha sentit oh an aotrou, va mab Fañch. »

« Ober a rin, mamm. Kenavo, mamm ! »

« Doue d'ho pennigo, va mab ! »

Hag ez ejont kuit o-daou asamblez.

Emberr e weljont eun den o redeg war-lerh eur had, ha stag eur mên-milin ouz pep troad dezañ.

« Sellit, sellit, aotrou ! », eme Fañch.

« Petra 'rit-c'hwi, va den mad ? »

« Êsaad tapoud ar had-hont a welit chomet war va lerh. »

« Hag e stagit mein-milin ouz ho treid ? »

« Ya, sur, aotrou, rag ker buan on, ma ran eul leo pep kammed, ha bep tro e tremenan dreist ar had. »

« Pe ano hoh-eus ? »

« Youenn ar Reder. »

« Ma ! ha kontant 'vefeh da zond da vale bro ganen ? Me ho paeo mad. »

« Ya, aotrou ; ne houlennan ket well. »

Setu int tri.

Eun tamm pelloh e weljont unan hag eur hov braz-braz dezañ, kement ha teir barrikenn ! Lakaet en-devoa e gov war eur hleuz, hag e c'hweze etrezeg ar meneziou.

« Petra 'rit-c'hwi aze evel-se, va den mad ?, a lavaras dezañ on marheg yaouank.

« C'hweza evid ober trei ar milinou-avel. »

« Peleh emañ ar milinou-ze ? »

« N'o gwelit ket du-hont, war ar menez, teir leo ahann ? »

« Hag oh paeet pegement bemdez ? »

« Pemp kweneg bemdez, ha va boued. »

« Pe ano hoh-eus ? »

« Yann Koveg. »

« Ma ! deuit ganen, ha me ho paeo kalz muioh. »

« Kontant on, ne houlennan ket well, rag skuiz a-walh on oh ober ar vicher-mañ. »

Ha setu int pevar.

Pelloh c'hoaz e weljont unan o viza gand eur wareg, med ne welent loen ebed.

« Petra a vizit evel-se, va den mad ? »

« Eur gudon a welan du-hont war vranc eur wezenn, teir leo ahann. »

« Eun tenner mad e tleit beza neuze ? »

« Ya sur, aotrou. »

« Pe ano hoh-eus ? »

« Fañch al Lagadeg. »

« Kontant 'vefeh da zond ganem da vale bro ? Me ho paeo mad. »

« Ya, sur, aotrou. »

Ha setu int pemp.

« Setu din bremañ pevar mevel mad », a lavare homañ, « hag eun dra bennag a rin gante. »

Degouezoud a reont ivez en Pariz, hag ez eont da loja en eun ostaleri vad. Koania 'reont o-femp asamblez. Naon o-devoa, ha Fañch Kreñv dreist ar re all. Pa veze servijet eur plad<sup>73</sup> bennag war an daol, e lampe warnañ raktal, hag e lonke ar boued hag a-wechou ar plad ivez. Ma oa souezet ar re all, ha droug-kontant o weled ne chome netra gante. E vestr, pa welas, a lavaras d'an ostiz :

<sup>73</sup> eur plad : eur pladad boued.

« Grit soup d'an den-mañ en eur varrikenn didalet, ha degasit dezañ eur varrikennad jistr. »

Pa glevas Fañch, ez eas da bokad d'e vestr, ha da frota e gein dezañ, en eur lavared :

« A ! va mestrig kêz, c'hwi, 'vad, 'zo eur mestr mad ! Me 'raio oll 'vel ma lavarfet din ; me 'zo kreñv, gweled a refet ! »

An deiz war-lerh ar beure, ar mestr a lavaras d'e bevar mevel :

« Ez an da weled ar roue en e balez ; c'hwi 'chomo amañ, ken am-bezo ezomm ahanoh, ha va gourhemennou a roin evid na vanko netra deoh. »

Ha d'an ostiz e lavaras ivez :

« Ez an bremañ en eun dro ha n'ouzon ket mad pegeid e vin ; va mevelien a lezan amañ, hag ho pedan da zoursial oute, ha da rei deze oll kement a houlennfont. Unan aneze, Fañch Kreñv, a zo eun tammig rust ha gouez ; med n'ho-pet ket aon dirazañ, rag n'eo ket droug evid se. Me ho paeo ar pez a houlennfet, ha setu amañ daou-hant skoed arrez. »

Mond a reas neuze da balez ar roue. Degemeret mad eo.

« Sellit 'ta », eme ar roue, « va mignon koz, markiz Koadleger, en-deus degaset e vab din, ma ne hell ket dond e-unan ! Evuruzamant eo greet ar peoh. Med n'eus forz, pa'z out deut, e chomi ganen ; me en em garg ahanout, hag a skrivo d'az tad. »

Ma oe roet da bach d'ar rouanez, dre ma oa koant hag en-devoa feson vad.

Ar roue a yeas eur pennadig goude-ze da weled eur roue all a oa mignon dezañ, hag e-keit-se, e lezas ar rouanez da ren ar rouantelez. Homañ a blije kaer he fach dezi, ha bemdez e vezent o vale asamblez dre ar palez hag ar jardinou ; c'hoari ha c'hoarzin a ree gantañ, ober serriou-lagad, lavared komzou tener. Ar pach ne ree van ebed ; ober a ree memez eun tamm e baotr diwevad, med nehet-braz 'oa koulskoude. Ar rouanez, o weled kement-se, a yee droug enni hag a damalle he fach hag a lavare dezañ :

« Genaoueg ! ne vi biken mad da netra 'ta ? »

Degouezoud a reas ivez ar roue er gêr. Goulenn a eure kelou digand ar rouanez euz he fach :

« Roit peoh din gand ar genaoueg, ar mihieg-se », emezi ; « kredi a rafeh en-deus c'hoantaet pokad in ! »

« Eñ, c'hoantaet pokad deoh ! »

« Ya sur, an den divergont ! ha gand se ez eo leun a hwez ; ma ouifeh petra en-deus lavaret c'hoaz ? »

« Petra « ta ? »

« Petra ? Lavaret en-deus beza den da halloud trehi e-unan ar roue Kezar, da zegas deoh e gurunenn hag eun dant euz e benn ! »

« Ola ! ola ! red eo lavared dezañ dond da gomz ganen dioustu. »

Lavaret eo d'ar pach dond.

« Penaoz, paotr », eme ar roue, « hag ez oh bet divergont a-walh evid c'hoantaad pokad d'ar rouanez ? »

« Penaoz e hellit kredi eun dra evel-se, va roue ? An hini en-deus lavaret se a oar a-walh n'eo ket gwir ? N'hen selaouit ket, aotrou roue, rag gaou a lavar. »

« C'hoaz a zo : lavaret hoh-eus beza den da drehi hoh-unan ar roue Kezar, ha da zegas din e gurunenn hag eun dant euz e benn ? »

« Penaoz, Doue, aotrou roue, eun denig striz evel-don en-defe gallet lavared eun dra evel-se, nemed kollet e vefe e skiant-vad gantañ ? »

« Eo ! lavaret hoh-eus, ha red e vo deoh ober ar pez hoh-eus lavaret, pe n'eus nemed ar maro evidoh ! »

Dond a ra neuze d'an ostaleri da gavoud e dud, hag e lavar deze :

« Setu labour, paotred ! »

« Petra eo, mestr ? », eme Fañch Kreñv ; me ne houlennan nemed labour ? »

« Ma ! Fañch, kontantet e vi neuze. Kerz da genta da hovel ar marichal, ha lavar dezañ ober din eur vaz houarn a vo pemp-kant livr enni. »

« Ma ! », eem Fañch, « mond a ran raktal. »

Pa oe greet ar vaz, e krog Fañch enni, hag e lavar :



« Ba ! ba ! grit din eur vaz vad, an dro-mañ n'eo nemed eur blouzenn ; gweled a rit ? »

Hag he zorr war e hlin. Ma oe klasket neuze an oll houarn a oa en kêr, ha greet dezañ eur vaz all hag a boueze tremen mil livr.

« Bremañ c'hoaz ! », emezañ ; « gand homañ e rin eun dra bennag. »

En em lakaad a reont o-femp en hent. Goude beza baleet pell, pell, e tegouezjont ivez dirag palez ar roue Kezar. Ar palez-mañ 'oa ken kaer ha ken uhel ha ken kreñv ar mogeriou, ma chomjont da zelled outañ, ha n'ouient petra d'ober.

« Eom bepred da dremen an noz en eun ostaleri », a lavaras ar mestr, « hag e soñjfom penaoz en em gemer. »

Goude koan, ar re all a ya da gousked, hag ar pach pe merh markiz Koadleger, mar deo gwelloh ganeoh, a chom da ziviz ha da eva gand an ostiz. Hag e lavar dezañ :

« Me 'm-eus pevar mevel ha n'eus ket o far war ar bed ; gante, hepken, me 'hallfe trehi ar roue Kezar, lemel digantañ e gurunenn, ha tenna dezañ eun dant euz e benn. »

« Ha gwir ? »

« Ya, gwir a-walh ; med na livirit ket se da zen ebed. »

« Nann, nann ! »

An ostiz, kerkent ha ma oe eet egile da gousked, a redas da balez ar roue hag a lavaras dezañ :

« Va roue ! va roue ! ma ouifeh ! »

« Petra 'ta ? »

« Me 'm-eus lojet eun den, gand e bevar mevel, hag a lavar ez int gouest o-fevar da drehi war hoh armeou, da lemel diganeoh ho kurunenn ha da denna deoh eun dant euz ho penn. »

« An den-ze a rank beza mezo, pe kollet gantañ e skiant-vad. Med me 'ya da skriva deoh eul lizer da lavared dezañ dond da gomz ganen. »

Degas a ra an ostiz al lizer d'ar pach. Hen lenn a ra hemañ, hag e lavar :

« It da lavared d'ar roue Kezar, m'en-deus c'hoant da gomz ganen, dond d'am havoud ; evidon-me ne flachin ket. »

Mond a ra an ostiz da gas e respont d'ar roue Kezar.

« Peseurt den eo hennez 'ta ? », a lavar Kezar souezet ; « red eo din mond d'hen gweled. »

Dond a ra.

« Petra », emezañ, « c'hwi, va den mad, hoh-eus lavaret galloud trehi va armeou gand ho pevar mevel, ha lemel diganen va hurunenn, ha tenna eun dant euz va fenn ? »

« Ya, sur, lavaret em-eus hen ober, ha bepred hen lavaran. »

« Ma ! deuit ganen da leina ho-pemp warhoaz, ha neuze e welfom. »

« Gand plijadur, aotrou roue ; med unan euz va faotred n'eo ket fur a-walh, hag em-eus aon e rafe eun dra bennag da zisplijoud deoh. »

« Deuit bepred, ha deuit ho-pemp. »

« Trugarez, aotrou roue ! Mond a refom, p'hoh-eus c'hoant. »

Pa oe eet ar roue kuit, e teuas da gavoud e dud, hag e lavaras deze :

« Pedet om, paotred, da vond da leina warhoaz gand ar roue Kezar, en e balez, hag eh efom. Te, Fañch Kreñv, a vo red dit beza eno divergont, divez, hag ober villa ma halli. »

« Ma ! va mestr », eme Fañch, « va lest da ober. »

An deiz war-lerh, ez eont o-femp d'ar palez, war-dro kreisteiz. Pedet e oa ar briñsed ha pennou an arme, ma oa eur fest kaer. A-boan 'oa deze beza azezet ouz taol, ma kemer Fañch al loa-bod, hag en em laka da stlepel soup a-gleiz, a-zehou, a bep tu, en eur lavared :

« Petra, evid eul logodenn va hemer ar roue-mañ, rei din ken nebeud a soup ! Me n'on ket deuet amañ da vervel gand an naon ; degasit din soup en eur varrikenn didal ! »

Setu savet an oll ouz taol, labezet a soup hag a druzoni ; ha kri, ha trouz.

« Dastumit prim al loen-ze 'barz ar prizon ! », a lavaars ar roue.

Ha kerkent eur bagad soudarded en em daolas warnañ. Med Fañch a dapas e vaz en-devoa lezet e toull an nor, hag o stlejas hag o draillas oll. Diskenn a reas neuze er porz a oa leun a zoudarded, ha da hoari gand e vaz.

« Tennit warnañ gand ar hanoliou ! », eme ar roue.

Med Fañch a dape ar bolodou diwar nij hag a lavare :

« Petra ? Piz, bili, mad d'ar vugale da hoari poullig ! »

Ma rankas ar roue goulenn gras, evid na vije ket draillet e oll zoudarded.

« Ola ! », eme ar roue, « setu amañ, avad, eun den ! »

« Ya, sur, aotrou roue ; med tri all am-eus c'hoaz hag a zo koulz hag hen ; setu amañ eur reder avad, ha n'hoh-eus hini da hoari gantañ en ho rouantelez a-bez. »

« Ma ! lakaom klaoustre. »

« Ya, a-walh ; petra a lakaom ? »

« Va zeñzor, mar kollan, 'eneb da vuhez, ha hini da baotred, mar kollez. »

« Kontant on ; lavaret eo ! »

Ma oe lakaet an deiz war-lerh evid ar redadeg.

« Da dro eo, Youenn ar Reder, ha diwall da goll, pe e kollfom oll on buhez. »

« Bezit heb morhed, va mestr. »

An deiz war-lerh, d'an eur lavaret, en em gav an daou reder er par. Roet e oe deze peb a bod-pri, hag e tleent mond da garga o fodou d'eur feunteun a oa deg leo ahane, ha distrei gante leun a zour. Ar roue a skoas tri daol en e zorn kleiz, ha setu int eet kuit.

War o hent e oa eur chapel hag e oa merket war he mogeriou oll geloioù ar rouantelez. Youenn en-devoa amzer, hag a chom eno da lenn. Ma krog neuze ar c'hoant kousked ennañ, hag e kouez d'an douar, harp e benn war benn eur marh maro 'oa eno. Reder ar roue a oe bet beteg ar feunteun ha dija e oa o tistrei, gantañ war e benn e bod leun a zour. Job al Lagadeg, an tenner mad, a welas neuze 'oa manet kousket Youenn ar Reder. Tapoud a ra prim e wareg, ha gand eur bir e skarz ar penn marh a oa dindan e benn. Hemañ a zihun neuze, a grog en e bod, hag e tri pe bevar hammed e oe e-kichenn ar feunteun. Karga 'ra e bod a zour, hag e tistro, hag eh erru da genta er par. Poent 'oa dezañ, rag egile n'en-devoa ken nemed daou gammed da ober !

« Va malloz ! », eme ar roue Kezar. « Koll a ran. »

Ha ma rankas rei e deñzor.

E-pad eiz deiz, e oa bet eiz kemener oh ober sier da lakaad an aour hag an arhant. Pa oent kaset oll war eul lestr, e tistrojont dre vor. Degouezet 'oant dija pell, pa weljont o-devoa ankounac'haet kurunenn ar roue Kezar hag e zant. Me oe red deze dond war o giz. Fañch Kreñv a oe kaset da gerhad ar gurunenn hag an dant. Antren a ra 'barz ar palez, heb ma krede den hen harz ; an oll a sponte oh hen gweled. Mond a ra beteg ar gambr 'leh m'oa ar roue, hag eñ trist mad. Gand eun taol dorn e ra lampad eun dant euz e henou ; neuze e tap ar gurunenn a oa war e benn, ha kuit !

Setu kri forz, ha trouz ha glahar er palez. Kaset eo eur strollad a dregont lestr 'eneb o lestr. P'o gweljont o tond, an avel gante :

« Alo ! paotr e gov braz, labour bremañ ! »

« Ya, va mestr. »

Ha Yann Kovig da hweza, da hweza, ha diskar ha beuzi oll listri Kezar.

Erruoud a rejont neuze hep poan. Pa welas roue Frañs teñzor Kezar hag e gurunenn hag e zant, en-devoe eur joa vraz, hag e lakaas e bach da veza marheg.

Eur pennad goude, eh eas adarre ar roue en hent, hag e lezas adarre e rouantelez da ren gand ar rouanez. Bepred e plije dezi ar pach koant, hag e veze o klask beza gantañ, ha war e lerh dre-oll. Med hemañ ne ree bepred van ebed, ma kounnare ar rouanez gand an droug a oa enni.

Pa zistroas ar roue d'ar gêr, e lavaras dezañ :

« Eun naerlin<sup>74</sup> a zo aze 'barz ar hoad, hag a halhar ahanom ; on oll deñved hag aliez ar vesaerien a vez lonket ganti. Red e vo dond a-benn d'he laza, en eun tu bennag. »

« Gouzoud a rit nag a dud on-eus kollet dija oh êsaad he laza. »

« Ho marheg nevez en-desu lavaret din 'oa den da zond a-benn anezi. »

« ya ? Se 'zo mad neuze, ha red e vo dezañ ober ar pez en-deus lavaret. »

Degemennet eo ar marheg nevez da vond da gavoud ar roue.

<sup>74</sup> naerlin : notenn gand ar skrid orin : eun naer vraz gand eur horn war he fenn. Gourel eo er skrid orin. Lakaet eo bet gwregel pa vez gwregel ar ger "naer"

« Penaoz, marheg, hag hoh-eus lavaret beza den da laza an naerlin a zo aze 'barz ar hoad, hag am glahar ? »

« N'em-eus ket, va Doue, aotrou roue. »

« Eo ! eo ! lavaret hoh-eus d'ar rouanez, ha red e vo deoh ober ar pezh hoh-eus lavaret, pe n'eus nemed ar maro evidoh. »

Setu on marheg yaouank nehet-braz.

« Penaoz », emezañ, « en em dennin euz ar pleg-mañ ? Pa oan o vond kuit diouh ti va zad, e tegouezas ganen eur wraha koz, a zikouris da dremen eur waz-dour, hag a lavaras din, m'am-bije eun deiz ezomm a zikour, n'am-bije netra d'ober nemed gervel Gwraha an *Inkonu*, hag e teuje. Ezomm a-walh am-eus a zikour, a gredan ; gwelom 'ta hag hi a deuiio. » « Gwraha koz an *Inkonu*, deuit d'am zikour, m'ho ped ! »

Ha kerkent e tegouez eur wraha.

« Petra 'zo evid ho servij, merh markiz Koadleger ? »

« Lavaret zo din e rankin tapoud eun naerlin a zo aze 'barz ar hoad, pe n'eus nemed ar maro evidon. »

« Ma ! va zelaouit mad, ha mar grit pep tra evel ma lavarinn, e teufet a-benn euz ho taol. Lavarit d'ar roue rei deoh eun hanter varrikennad kasis, eur vouhal, eur habestr aour hag eur marh euz e varchosi, hag ouspenn eun talar. It gand an oll draou-ze 'barz ar hoad ; lakait ar varrikenn didalet dindan eur wezenn-dero, ha pignit neuze war ar wezenn. Pa zanto an naerlin ar c'hwez, e teuiio d'ar red hag en eur skrijal spontuz. P'he-devo evet eur banne kasis, e redo dre ar hoad, hanter-vezo, hag a laosko kriadennoù euzuz ; teurel a raio tan, pa welo ar marh, e lampo warnañ, med hemañ he fellaio gand gwinkadennoù. Dond a raio adarre da eva kasis, hag e savo he fenn hag ho kwelo ; neuze ez aio kuit gand eun trouz euzuz, hag e tistroio d'ar red, hag e planto he horn 'barz ar wezenn, ken n'halla ken hen tenna. Diskennit neuze prim evid he genna e-barz an toull. Skrijal a raio, ha teurel tan, ken a rosto ar gwez en-dro dezi ; med na spontit ket evid kement-se, ha lakait ar habestr alaouret war he gouzoug. Neuze, pa welo n'hella ken en em zivenn, e lavaro : « Lavaret mad e oa 'vijen kemeret gand eur plah yaouank gwisket en marheg. Trehet az-teus warnon, merh markiz Koadleger ! » Neuze n'ho-po ken ezomm da gaoud aon : an naerlin 'vo deuet doñv evel eun oan, hag e hallfet he staga ouz lost ho marh, ha dond ganti da gavoud ar roue. An oll a sponto war an hent hag en kêr oh ho kweled o tond ganti, med ne raio ken droug da zen ebed. P'erruo e porz ar palez, dirag ar roue, e lavaro dezañ : « Te bepred, roue Frañs, a zo diota den a vale, te a zo doganet<sup>75</sup> aliesoh a wech eged a vein a zo oh ober da balez ! » Ma kounnaro neuze ar roue hag a lavaro : « Petra ober ? ». « Lakaad gori eur forn, ha teurel da wreg e-barz ! ».

« Trugarez ! ha va bennoz, mammig koz ! »

Hag ez eas kuit kerkent.

Oll e c'hoarvezas evel m'he-devoa lavaret ar wraha koz, hag ar rouanez a oa taolet en eur forn goret ruz, ha gwentet he ludu en avel.

« Bremañ, aotrou roue », a lavaras c'hoaz an naerlin, « e tleit eureuji ho mab da verh vihan markiz Koadleger, a zo amañ. »

« Merh markiz Koadleger ! », a lavaras an oll souezet.

« Ya, merh yaouanka markiz Koadleger, ha nann e vab, evel ma soñje ganeoh oll ! »

Ma oe dimezet hag eureujet merh yaouanka markiz Koadleger da vab roue Frañs, hag e oe festou, dañsou ha c'hoariou eno neuze, evel n'hoh-eus gwelet biskoaz.

Ar markiz koz a oe ivez pedet d'an eured gand e ziou verh all, hag ar re-mañ a eureujas prestig goude peb a briñs yaouank hag e vevjont oll evuruz assemblez.

*Kontet gand ?*

<sup>75</sup> doganet : d... er skrid orin.

